



Youenn OLIER

O SELLOUT

WAR VA C'HIZ

eñvorennoù ha deizlevr

II

ROAZHON

GEVRED

1967



P e n n a d k e n t a ñ

Digêriañ a rejomp eta e diwezh miz Gouere pe Eost 1937, d'ur yaou. Hep keuz e kuitajomp ar vro-hont e-lec'h n'hor boa bet biskoazh mignon ebet ; ne zalc'his darempred gant nikun du-hont ; unan eus va c'hoarezed a viras ur vignonez epad pell amzer ; hec'h unan e voe ouzh henn ober ; evidon-me e tegemeris ul lizher ben-nak eus va c'helenner c'hwec'hvet er bloaz araok hogen ne zalc'his ket da genskrivañ. Cambrai a oa kouezhet penna-da-benn en tremened a-boan ma oan distroet d'ar vro hag e gwirionez n'em eus ket bet tro da adwelout ar gêr-se abaoe tregont vloaz.

N'ouzon ket petra hor boa graet eus al loened a oa er gêr. Ne chome mui nemet ar gazhez a oa o paouez kaout un torad re vihan hag a oa o kantren er c'hriagnol c'houllo en ur glemm, estrenvanet. Loc'hañ a rejomp d'abardaez. Ambrouget em boa va zad-kozh ha va zad er c'harr-samm a zouge hon arrebeuri (1). Ar peurrest eus an tiegezh a zlee degouezhout antronoz dre an tren.

Tremenet e oamp dre Bapaume ha Péronne - noziñ a rae a-benn neuze - ; chomet e oamp a-sav e Beauvais. War-dro hanternoz pe un eur diouzh ar mintin hor

---

(1) E 1950 em boa savet un danevell eus ar veaj-se ; tostoc'h e oan d'an darvoud ha freskoc'h e oa va eñvor. N'em eus ket bet kalon da glask ar paperennoù-se, lakaet ne vijent ket bet kollet. A-hend-all, war a glevjomp a-c'houdevezh e voe distrujet hon ti pa darzhas pont 'Cantimpré' e miz Mae 1940, pa zegouezhas an armeoù alaman.

boa tizhet Dreux ha troet hor boa war-du ar mervent. Treuzet hor boa neuze Nogent-Le-Rotrou ha diraezet Le Mans abred diouzh ar beure. Lein hor boa debret eno. E Filger e oamp deuet tre e Breizh ha da ziwezh ar beurevezh e oamp degouezhet da skluz Moñs, etal Bruz, e kreisteiz Roazhon.

Kemm bras a oa etre Cambrai e Bro-C'hall ha maezioù Breizh ar reter e-lec'h e oamp erru. Rannvro Roazhon a hañvale deomp bezañ morgousket. E Moñs ne c'helle led skluziañ nemet ur gobar war un dro ; ha c'hoazh ne oa enni nemet kant tonellad bennak e-lec'h tri-c'hant war ganol an "Escault" ; ivez ne dremene nemet pemp pe c'hwec'h kobar bemdez e-lec'h kant-ugent du-hont : un arouez ouzhpenn eus ur Vreizh isdiorreet.\*

Falloc'h e oamp lojet a-hend-all eget e Cambrai. Ne oa nemet tri fezh ebarzh an ti. Pa voemp erru e voe kempennet daou bezh all hogen da c'hortoz ne c'hellemp ket derc'hel an tad-kozh ganeomp hag hemañ a rankas distreiñ da Waien evit ur pennad. War ar marc'had e oa digevannez an ardremezioù hag un hanter-lev bennak diouzh ar vourc'h edomp o chom, pezh n'oa ket aes kennebeut.

Un tammig egiz en ur vereuri edomp en ti-se. Bez e oa ul liorz vras adreñv dezhañ, gant gwez frouezh e-leizh. Eno ivez e oa ur puñs da gerc'hat dour ha kentañ a reas hor c'hazhez<sup>oc'h</sup> erruout e voe en em deurel ennañ, pezh a roas trubuilh awalc'h deomp. Gwell a se en doa kavet al loen un toull er voger da repuiñ. Amzer a voe da glask ur skeul ha d'henn astenn betek ennañ, ma krapas ganti mibin kerkent ha ma voe bet nesaet awalc'h outañ.

(1) Ivez, ar c'hobaroù digedlusker a ranke bezañ sachet gant kezeg.

Goude hevelep beaj e oa pennfollet mik ar gazhez kaezh.

Kustumiñ a rejomp buan ouzh hor buhez nevez. Maezioù Bruz ha Pont-Reant a zo eus ar bourrusañ hag ar mizvezh hanter a dremenis e Moñs arack digoradur ar skolioù a voe evidon ur pennad kaer a vakañsoù. En ardremezioù-se ez eo dudius meurbet traonienn ar Winun ; gwaskedet eo ribloù ar stêr gant gwez uhel ha tri c'hilometrad izeloc'h e troont da dornaodoù uhel, war-dro milin ar Boel, e maen-krag mouk fichet gant ar brug hag al lann. En amzer-se ne oa ket a girri-tan ha den ne zeue da gantren tro-aze. Hiziv avat, adal deroù an nevez-amzer, en em daol Roazhoniz a vagadoù stank bep sul war-du an andred livus-se ken en em gav argweladennet e ken stank engroez hag e kreiz kêr Roazhon.

Etal skluz Moñs ivez e tisoc'h an adstêrig Meu er Winun ha meur a wech e kemeris ar c'hanod a oa stag ouzh ar c'hal du-mañ hag ez is da vageal betek tro-war-droioù kastell Bloseg a zo savet tost aless, e-kichen ar vardell. Peskedus e oa ar Winun d'ar mare-se a-hend-all ha bekeded e-leizh a c'helljomp pakañ tro pe dro en hañvezh-se. Alies awalc'h ivez e c'haolien va marc'h-houarn ha mont a raen d'ober un tamm tro va unan penn, evel ma oan kustum d'ober e Cambrai ergentaou. Bep sizhun e skoen war-du Roazhon da brenañ eno kelaouennoù bugale: 'Pierrot' ha 'Coeurs vaillants' a lennen eh amzer-se. A-wechoù all e kaw'reen dre ar maezioù hep pal ebet nemet ergerzhout ar vro. Un ~~da~~ vezh em boa tizhet Menez-Kreñv, dre C'hoven, pemp kilometrad bennak diouzh Bruz. Gant

trugar em boa dizoloet ur Vreizh disheñvel krenn diouzh ar rannvro c'hall edon o pacuez kuitaat ; diabloù glasvezhus am boa spurmantet a-c'horre un uhelblaenenn ; koadoù am boa treuzet. Seurt gweledvaoù a oa dianav din a-greñn a-ziagent.

Pep tra a oa nevez deomp. Da noz e klevemp kaouenned oc'h hopal, kuzh er gwez war ribloù ar ganol. Ar boued en ur stumm hag an evaj dreist-holl a oa ken nevez all deomp : e Cambrai e oamp boaz da evañ bier ; e Bruz avat e tañvais ar sistr evit ar wech kentañ ; diouzh-tu e oa bet gwerzhed ur varrikennad deomp (1), sistr kalet hogen d'ar c'houlz-se n'oa ket evit ober ur c'hemm etre sistr dous ha sistr kalet. Iskis e oa ivez mont da gerc'hat dour er puñs. Evit ar gêriz vihan e oamp e tenne ar vuhez -se war ar maez da ehanoù na zlejant echuiñ biken.

Fin a voe dezho koulskoude. E miz Here e ranken dont tre er skolaj Sant-Marzhin evel skoliad lojet ; va breur Yann a oa da vezañ degemeret er pempvet klas. Va c'hoar Nouela a zlee bezañ lakaet evel skoliadez lojet ivez e kelenndi ar Galon sakr e-lec'h e teuas va c'hoar henañ da vezañ skolaerez. Ur c'hoar all, Marie-Hélène, he doa kavet fred evel biz-berrskriverez e greanti orjal Bruz, un hanter-lev diouzh ar skluz.

Hogen ne vern penaos ne chomjomp ket pell e Moñs. Kinniget e oa bet d'am zadur plas all e Sant-Jermen, en hanternoz Roazhon, seitek kilometrad diouzh

(1) E Gwaien n'oa ket a sistr da evañ : n' eus ket awalc'h a vez avaloù er C'hab. Dour a veze evet, gwin da c'houde.

kêr, war ganol an Izol (1). Ur wech, e diwezh miz Gwengollo, e oan aet gant va zad da weladenniñ ar skluz-se. Hanter dianket e oamp da gentañ rak kemeret hor boa hent Sant-Malo (war varc'h-houarn edomp). Evit gouzout peseurt tu skeiñ a-benn ar fin e oamp deuet tre en un ostaleri bennek war ribl an hent ha servijet e oa bet deomp pep a volennad sistr -trenk eveljust - ebarzh bolennoù giz kozh ha na weler ket mui nemeur hiziv, a soñj din, dezho ur grogenn, kinklet gant roudennoù liv orañjez : pemp gwenneg e koustas deomp ar volennad. Hervez an diskleriadurioù a oa bet roet deomp e oamp troet a-zehoù un tammig larkoc'h ha goude bezañ treuzet Mouterel-ar-Rivinoù hor boa tizhet skluz ar Gêrgoat.

Stêr ha kanol an Izol a ra o zreuz e Sant-Jermen, e-harz tarroziou uhel ha serzh awalc'h a zo darn eus ur gribenn hir a verk bevann hanternoz kompezenn Roazhon. E traon ar vourc'h e teval a-sonn moger ur vengleuz dilezet ; en tu all d'ar stêr, a-zehoù o sellout ouzh ar c'hreisteiz, eus gonezet bepred ur vengleuz bennak (maen-krag a dennar diouti).

Kaer awalc'h eo an taolead. Bourc'h Sant-Jermen a zo pintet e lein un tornaod koadek o valirañ a-us d'an draonienn (dister awalc'h eo a-hend-all : n'eus anezhi nemet ur straed hir a diez louet savet e maen-krag ar c'horn-bro). E skoaz dezhi, en tu all d'ar ganol, adreñv an ti skluz, e lein ar mengleuzioù, en em astenn ur bineg e krap ouzh ur bantenn. Pa vezer erru d'al laez

(1) Ret eo lavarout en devoa va zad ul labour didorr kentañ e Moñs rak n'en doa nemet c'hwec'h kobar bennak da skluziñ bendez, ul labour en defe dereet ouzh ur c'hefridiad eus Saded da c'hortoz ar stad vrezhon.

e spurmanter ur gweledva ec'hon, ur blaenenn en em led war-du ar gevred a-hed ul lev bennak, bevennet er c'hornog gant linenn ceun-tenn ar ganol. Eno e vourren dont da bourmen epad an ehanoù.

Bez e tleemp dilojañ eta ur wech ouzhpenn e-kerzh miz Du. N'edon ket er gêr en dro-mañ. Evit chan an Hollsent e oamp aet da vBruz. Hogen e ti-skluz Sant-Jermen e tremenjomp gouel Nedeleg.

Brasoc'hik e oa ti-skluz Sant-Jermen eget hini Moñs. Savet eo bet, a gav din, e deroù an XIX vet kantved pa oa bet kleuziet ar ganol hec'h unan en amzer an impalaer gall Napoleon kentañ. Bez e oa div gambr vras en traon ha teir el laez, bihan avat hag izel al lein anezho. Daou lab hag ur solier a oa adreñv an ti a oa gronet a-hend-all gant ul liorz ; en tu all d'ar skluz hor boa ul liorz all, gwez pechez enni. Un tamm tachenn a oa deomp ivez etre ar ganol hag ar stêr : lezet e veze d'ur vaouez kozh a gase di he buoc'h da beuriñ.

Linenn houarn Sant-Malo - Roazhon a dremene en tu all d'an Izol. Alese, dre ur wenodenn a dreizhe ar c'hoadig e krap ouzh an tornaod, e c'helled diraez ar vourc'h war-hed ur pemp kant metrad bennak ; (peurvuañ avat ez aemp dre bont ar skluz hag an hent bras ; tremen a raemp dreist d'al linenn houarn hag eno e pakemp ur c'hardenn a gase ac'hanomp war-grec'h diouzhtu.

Gwelloc'h en em gavomp e ti-skluz Sant-Jermen eget en hini Moñs. Amezcion hor boa ha tost awalc'h e oamp ouzh ar vourc'h, pezh a oa aesoc'h evelato, dreist-holl evit va mamm.

En em blijout a'ris e Sant-Jermen koulz hag e Moñs. Bourrus e kaven bale war va fouez etre ar ganol hag ar stêr, a-hed ar vriell wezek. Epad ar goañv e oa kresk gant an dour ha c'hoarvezout a rae gant an Izol en em fennañ ebarzh ar ganol. Neuze avat e kaven dudi o sellout ouzh gorre lenkr ar stêr o redek kuit war-du ar vilin dost.

Va zad ivez en em blijas du-se. Disheñvel bras e oa e labour diouzh an hini en devoa e Moñs. Ouzhpenn ma oa e Sant-Jermen ur burev-diskleriañ evel e Cambrai en devoa va zad da evashaat ar ganol betek ar skorf-rannañ bras uheloc'h eget Mouterel-war-Izol. Bez e tlee ivez diwall d'ar ganouc'hell-bourveziñ a loc'he diouzh lenn ar Boulez hag a bourchase dour d'ar ganol diouzh ret epad an hañv. Nouspet kilometrad a oa d'ar ganouc'hell-se a oa strizh a-hend-all - ur metrad pe ur metrad pemont led - , kildroennek kenañ avat. Gwall voazet e oa ar gouerion da zourañ o loened er ganouc'hell hag a-wechoù e veze dispennet ar vriell gant karnoù ar saout. Setu e veze ret mont d'o c'havout hag o fediñ da gempenn ar pezh a oa bet gwastet gant o chatal. Epad an ehanoù, pa n'ouien ket petra ober, e ambrougen va zad en e droiadoù ha, feiz, bez e c'hellan respont e tremene an traoù eus ar c'hentañ bep taol. Degemeret e vezed gant kalz a hegaratted er mereurioù, tachenoù dister alies, kollet e-kreiz ar maezioù, kuzh adreñv o c'hleuzioù, e-mesk ar gwez, dezho tiez-annez bihan, hep solier, teñval hag enk, ur gambr vras pe ziv en traon, ma teued tre enno dre un nor-brenestr ; da arreburi o devoa armelioù

ha gweleoù bras, a-wechoù ul listrieg pe un orolaj, dan-vez preizh d'an hendraouerion da zont ; eveljust ne oa tamm tredan ebet e neb lec'h d'ar c'houlz-se.

Degemer mat a veze graet deomp, a lavaren. Kinniget e veze deomp kig-sal ha bara-amanenn, sistr ivez. Neuze, na petra 'ta, e oa tu da gomz ha d'en em glevout.

Buan e verzis avat e oa ar sistr koulz hag an odivi ur wir walemm er rannvro-se eus Breizh. Epad an hañv war-lerc'h, e 1938, e tiwalle va zad da labourioù a oa kaset da benn endro da Vousterel-war-Izol. Soñj am eus bezañ gwelet eno ar vicherourion - gwazed diwar ar maezioù tro-dro - och evañ litradoù ha litradoù a sistr trenk - gwir eo e labourerion e gor an heol - o kregiñ er memes boutailh an eil war-lerc'h egile hag o lonkañ a stag penn : heuget awalc'h e oan. E-doug an eost e oa gouest ar vederion da skarzhañ seizh pe eizh litrad sistr evel-se (1).

E gwirionez ne oa ket displijus tamm ebet labour va zad epad an hañv da vihanañ. Loc'hañ a raemp diouzh ar beure war varc'h-houarn. Dre Vousterel-war-Izol e tizhemp Feun, pal kentañ hon hentadenn. Goude bezañ aet e-biou da lenn ar Boulez e chomemp a-sav da verennañ en un ostaleri vihan, war-dro Denzieg, tost d'un ti-hent-houarn. Neuze e tapemp Denzieg e deroù an endervezh ; ur wechad e oamp aet da welout ar maer, n'ouzon mui e ser petra. Skeiñ a raemp en diwezh war-du Gwipel ; p'hor boa (1) Meur a unan a gont war vertuz pep hini evit argas ar vezventi. Kavout a ra din ez eo stag houmañ da gentañ ouzh kudennoù kevredigezhel a rank ar stad diskoulmañ.

tizhet ar ganol e troemp etrezek ar c'hreisteiz hag e hedemp ar vriell betek skluz Sant-Jermen, e-kreiz an deñvalijenn, amheuliet gant garmadennoù al laboused-noz kuzh e gwez uhel ribloù ar ganol a daole o skeud pounner war an dourioù. Diwezhat e tagouezhemp d'ar gêr ha va mamm he deveze tro a-wechoù d'en em chalañ. Va zad avat a vourre o vevañ e-kreiz an natur evel-se ha moarvat e kave dezhañ e oa adarre o redek ar maezioù e Kleden en e yaouankiz (1).

Amezeion garadek hor boa du-se, dreist-holl ar miliner en devoa ur mab a oad ganeomp, Jean Thouminot e anv. Dont a rae ganeomp da c'hoari ; pa veze poent dezhañ avat tostaat ouzh taol e soned ar c'horn-boud hag ar paotr a ranke dec'haloupat d'illo d'ar gêr da bakañ e bred.

A-hend-all en em ziduen dreist-holl gant va breur. Epad an hañv ez aemp da neuñ er ganol, a-wechoù betek ar skluz uheloc'h ha distreiñ, ur c'hardlev hanter bennak (seizh-kant metrad a zo, a gredan, etre skluz Sant-Jermen hag hini ar Beuzid). Pa zeuen er-maez eus an dour avat e veze koulz din en em welc'hiñ penn-da-benn rak bep taol e vezen goloet gant ur gwiskad tanv a libouz gell. Va breur a vourre splujañ ivez a-c'horre ar pont kozh (enlec'hiet eo bet abaoe gant ur pont nevez ledanoc'h) met se ne blije ket din nemeur.

A-hend-all n'hor boa ket kalz darempred gant tud ar c'horn-bro, nemet gant ar meliner an eus meneget (1) A-wechoù e raemp an droiad-se war an tu-gin. A-wechoù all e tistroemp dre an hent bras, dre Elvinieg, Sant-Medarz, ha bourc'h Sant-Jermen.

hag a oa o vevañ tost deomp hag un nebeudig kenwerzhourion er vourc'h. Souezhet e voen da gentañ gant doare ar rann-yezh romanek a oa komzet gant ar re gozh, nebeut awalc'h en holl avat ha ne oa ket gwall zisheñvel diouzh ar galleg boutin. Ouzh implij an tremenet-strizh em boa taolet perzh dreist-holl : lavarout a raed da skouer: "Je fus à la ville." E-lec'h ar son -e- e klevet ar son -eu-, en andrement dreist-holl ; ivez ar -r- ne oa ket distaget war-lerc'h ur gensonenn all a-wechoù. "Il fait froid, un deux, tois," a gleven hag a gaven hentus awalc'h (1).

Daoust ma ouient ha ma anzavent e oant Breizhiz o doa tud ar c'horn-bro un tamm kemplezh o vezañ ma oant dic'houzvez a-grenn eus ar yezh. Tchet e oant da implijout ar ger 'breton' evit brezhoneger (int o unan avat a oa 'sots-bretons'), pezh a feuke va zud awalc'h : Breizh a oa Breizh evito, penn-da-benn, gant he femp departamant. Setu e adkaved e reter Breizh, war an tu-gin ha war un derez izeloc'h, ar c'hemplezh a samme Breizhiz ar c'hornog : tud ar c'horn-bro a zamveize e oant disterc'h eget o c'henvroiz eus ar c'hornog dre ma ne ouient ket yezh Vreizh hag e rae diouer dezho un tamm eus o herzh vreizhat. Moarvat ez eo bet dismegañset Bretoned ar c'hornog en abeg d'ar yezh ; hogen ivez, hep gouzout mat dezho a-wechoù, e degouezhennoù zo, e c'hoarveza ganto tennañ un tamm lorc'h eus o anacudegezh eus ar brezhoneg.

(1) Un nebeut koefoù eus korn-bro Roazhon a veze gweliet c'hoazh bep an amzer. Hiziv zoken n'eo ket aet seurt koef da get a-grenn rak daou vloaz zo em eus merzet unan c'hoazh da geñver ur Pask kentañ.

A-benn ar fin e oa tizhet an holl Vrezhoneg gwitibunan gant an dismegañs a oa graet dezho dre nac'hañ outo ar gwir da c'houzout o yezh vroadel (1)

.....  
P e n n a d 2

Deuet e oan tre eta er skolaj Sant-Marzhin, e-kreiz kêr, 31 straed Etraon, e deroù miz Here 1937, en trede klas.

Sant Marzhin a zo un ensavadur kozh a zo bet savet gant an Eudisted e deroù an XIXvet kantved, war-dro 1830, ma ne fazian ket. Mennet e oa en amzer -se da vezañ ur c'hloerdi bihan hag he zachenn en em astenne betek an "Hôtel-Dieu" a vremañ (ne oa neuze straed Le-graverend ebet), e gorre-kêr, un tamm uheloc'h eget ar straed uhel, straed Sant-Malo e-lec'h e voe ganet Debeauvais. Bez ez eus anezhañ ur mell savadur hirgarrezek ha louet, tri solieradur dezhañ ; ar chapel a zo lec'hiet a-sonn e-keñver ar pennisavadur-se, hag a dizh tost-da-vat ar straed. Bevennet e oa ar porzh a ziarag gant ur voger uhel tregont vloaz zo ; hiziv ez eo bet distrujet ar voger -se ha lakaet ez eus bet ur gael en he lec'h, a zo c'hourc'hoc'h evelato. Savadurioù nevez a zo bet savet ivez a ziadreñv ha re gozh a zo bet kempennet. War a glevana a-hend-all ez eo niverusoc'h un tamm mat ar skolidi : mil pe vil-

(1) Daou vrezhoneger a anavezis e Sant-Jermen, unan a oa ul Leonad, ur paotr yaouank kozh a zalc'he un atant nepell eus du-mañ hag a salude va zad e brezhoneg. Egile, ur gwened ur, ur mezhvier, en doa kollet e vrezhoneg e strad ur voutailh bennak.

daou-chant. Em amzer-me ne oa nemet daou drede klas, ugent pe pemp-warn-ugent a skolidi enno.

Ne oan bet biskoazh skoliad lojet ha diaes e kavis en em voazañ ouzh va buhez nevez. E gwirio-  
nez ne ris biskoazh da vat hag un amzer doull-bac'h e voe  
din an hini a dremenis er skolañ etre 1937 ha 1940 (1).  
War an notennoù a gemeris adal 1938 e teu endro bepred ar  
ger 'enoe'. Daoust ma ne ziskouezen ket nemeur a-hend-all  
ne oan ket evit gouzañ ar veli a oa o pouezañ warnon be-  
pred ha ni eveshaet da bep mare eus an devezh pe eus an  
nozvezh.

Strizh awalc'h e oa reolenn ar skolaj  
evel ma oa e pep skolaj all moarvat d'an ampoent. Ar chloñ  
a zihune ac'hanomp da bemp eur hanter. Kousket a raen ar  
bloaz kentañ en ur mell solier, dindan an doenn, a oa bet  
graet  
un hunva anezhi ; poblet e oa gant logod divergont a bour-  
mene epad an noz war va flueg hag a-dreñv va fennwale ;  
stignet e veze gripedoù dezho ha tapet hini pe hini bep an  
amzer. Ur wech en doa disoñjet unan eus va c'hamaladed  
sellout ouzh e c'hriped ken na oa deuet flaer ar c'horf  
brein da gargañ an hunva a-bezh ; neuze e oa aet da glask  
e strad e armel !

Da c'hwec'h eur e vezomp kaset d'ar  
chapel da selaou an oferenn. Da c'hwec'h eur hanter ez nomp  
d'ar studi e-lec'h e chomemp betek seizh eur hanter. Neuze  
e veze servijet lein deomp : kafe pe chokolad a gaven avat  
ken goular an eil hag egile. Da eizh eur e kroge ar c'hen-

(1) Pa heuliis kentelioù ar c'hlas prederouriezh e 1940-  
1941 e oa erru an Alamaned ha bod hor boa kavet va breur  
ha me en un tiegezh e kêr.

telioù. Da greisteiz e tebred merenn. Studi a oa adal  
pemp eur d'abardaez. Koan a servijed da seizh eur  
ha kard ha da eizh eur hanter e vezomp aet d'hor gwale.  
Gwall abred e oa, dreist-holl epad an hañv rak padout a  
ra andeiz betek nav eur hanter bennak e miz Mezheven :  
neuze e chomemp da spiañ an dud a oa e toull ar prenestr  
en tiez e-skoaz d'hon hunva, da c'hortoz ma teufe an noz.  
Skolidi ar c'hentañ klas evelato o deveze un eurvezh stu-  
di goude koan en abeg d'ar vachelouriezh a oa da brien-  
tifi.

D'ar skolidi lojet n'oa aotreet mont d'ar gêr  
nomet da vare ar gouelioù bras ha c'hoazh, gouel Nedeleg  
hag ar pep brasañ eus ar sizhun santel a dremenemp er  
skolaj. Gant notennoù mat e oa kofije da vont d'ober un  
dro e kêr ; ur c'henskriver'avat a ranke ho kerc'hat.  
Hor c'hoar henañ a oa aet eta da genskriverez hogen di-  
vourrus e kaven seurt ermaeziadennoù - gwisket e vezomp  
bepred gant livrez ar skolaj - dre ma n'avezempen den  
ebet e Roazhon d'an ampoent ken na raemp nemet ruzañ hor  
botoù e kêr hep gouzout re vat da belec'h mont. Baleadeg-  
où ar skolidi n'oant ket plijusoc'h, anat eo. Tro pe dro  
ez aemp da arvestiñ ouzh kevezadegoù mell-droad, a-wechoù  
war dachenn-sport kêr, straed an Oriant, a oa pellik di-  
ouzh ar skolaj pe dachennoù all, hini skolaj Sant-Visant  
war lez kêr, ur mell prad war-dro maez Milou ha boulouard  
Burloud a zo bet aloubet gant kêr penn-da-benn abaoe. N'  
oan ket troet gant ar mell-droad avat hag hir e kaven an  
amzer o sellout ouzh ar c'hoari. Epad an hañv ivez e c'hoar-  
veze ganeomp mont da neuñ en ur c'houronkva a oa bet

aozet e-harz tachenn "Yaouerion Vreizh", nepell diouzh un hent a gas da Sant-Gregor : n'oa ket boull-boull an dour. leiet e oa zoken hogen tu a oa da neuñ.

A-hend-all e hedemp an hentoù tro-dro da Roazhon, hep ober ehan ebet e neb lec'h a-wechoù, war-du Sant-Malo, Ploulann h.a. Tro pe dro e tizhemp Sant-Gregor, ul lev hanter diouzh ar skolañ, ur barrez he devoe ar Santig du, ur brezhoneger, da berson, en amzer wechall, dre hed ar ganol ; ha dre hed ar Winun e skoemp war-du ar Prevalez, ur c'hastell brudet, a gav din, en arbenn a feur-emglev ar Mabilez hag a varc'hatadurioù a voe kaset da benn etre chouanted ha republikaned c'hall da vare dispac'h mil-seizh-kant-eikont-nav. Distrujet eo bet ar c'hastell-se epad ar brezel ha bremañ e klevan emeur o vont da ziskar ar vali a zervenned kaer a gase di ergentaou. Emled kêr a vefe kiriek adarre d'an distruj-se. Epad an hañv ez aemp betek ur c'hoadig plijus, 'Koad ar Bili', war duhennoù Gwenn, a zo a-serzh a-us da gompézenn ar Winun en em astenn betek bourc'h Saizon ; e-kreiz ar maeziou, e krap ouzh ur bantenn e oa ar c'hoadig-se ; hiziv avat ez eo bet tizhet gant kensavadur skol-veur nevez ar skiantoù a zo bet diazezet etre hent Gwizurieg hag hent Agenieg. Kêr Roazhon he deus kaset he c'hraban betek eno ivez.

Un nebeut diduamantoù a oa pourchaset deomp. Strolloù c'hoarierion - soñj am eus a hini 'Thuet' - a zeue da zisplegañ deomp pezhioù c'hoari klasel gall. D'ar fiñvskeudenndi ez aemp ivez, dibaot tre a wech avat, ivez da foar Roazhon pe da germoù mat, hini Yaouerion

Vreizh" war hent Etraon. Eno em boa tañvaet evit ar wech kentañ galetez ed-du ha n'em boa ket kavet mat a-hend-all (1).

War boentoù all ivez e oa strizh ar re-oliadur. Lavaret em eus e ranked dougen ul livrez da sul evit ar ermaeziadennoù. Eeunoc'h e oa avat hini Sant-Marzhin eget gwiskamant ar skolañ e Cambrai. Du-hont e tougemp un 'doney' gant ur jiletenn wenn hag ur gasketenn e-giz an ofisourion-avor! Ur porpant plaen n'hor boa ken e Sant-Marzhin. Evit pezh a sell ouzh ar gwiskerezh avat e voen souezhet awalc'h gant ar mell a c'hourc'hemenne d'ar skolidi lojet kaout botoù-koad ha botoù-danzev e diabarzh ar skolañ. Ar botoù-koad a veze lakaet da vont da c'hoari er porzh. Va c'hendiskibion hag int akoursot a bell zo a oa mibin da sabatuiñ gant o botoù-koad ha gouest da skeiñ en ur volotenn ha da redek ken dinec'h ha tra. Amparfal tre e oan-me avat ha rak-se moarvat ne voen ket evit kemer perzh e c'hoariadegoù va c'hamaladed ken e teuis zoken da gemer kas ouzh ar mell-droad. Va unan penn e chomen epad an chanoù-kental, hep kavanda ebet (nevez-skoliad e oan ivez) o c'hortoz ken na ve poent distreiñ d'ar studi.

N'hor beze ket aotre atav da gomz epad ar predoù. E predva ar re grenn e veze graet deomp alies lennadurioù. Eus unan em eus dalc'het koun ; e dalbenn e oa : "La Mirlitentouille, épisode de la chouannerie bretonne..." gant Lenotre, a gredan. Al levr a oa bet pour-  
-----  
(1) E Swaien gwechall e tebred boued evel war ar maez : youd gwiniñ, youd kerc'h, youd ed-du, krampouez gwiniñ galetez ed-du h.a. Du-mañ e Cambrai avat ne veze aozet krampouezh gwiniñ nemet da geñver an Enez. Boued ar vro hor boa eveljust.

chaset gant an Tad Plomet a oa oc'h eveshaat predva ar re grenn er bloaz-se hag a oa un tamm brogarour (skoliad e oa bet e kloerdi Keranna) hogen ivez roueelour gall, a gav din.

Va c'hendiskibion a oa genidik eus rannvro Roazhon an darn-vuiañ anezho ha liesseurt awalc'h o orin kevredigezhel. Kalz a oa mibion genwerzhourion - marc'hadour chatal e Laelieg e oa tad unan anezho -, mibion notered, perc'henned-douar h.a. Un toullad bugale noblañsoù a oa ivez : de la Villéon, de la Blanchardière, de Penguern, de Lohéac h.a. Lod anezho a oa Gallacued, a gredan. Ar c'helc'hiadur-se a oa disheñvel diouzh an hini e oan boaz outañ (e Cambrai e <sup>oan</sup>skoliad dieub ha n'em boa ket nemeur a zarempred gant va c'hamaladed nemet epad ar c'hentelioù e ve). E-keñver kevredigezh da vihanañ e vije bet al lise muioc'h diouzh va doare hag er penn-kentañ n'en em gavis ket em bleud gant va va c'henseurtead nevez. A-c'houdevezh en em voazis hep ober din avat gwir vignon ebet. E gwirionez e oan techet er bloavezh-se d'en em dennañ a-gostez gant va studioù ha va huñvreadennoù. En em roet em boa d'ar studi ha deuet e oan da vezañ barrek war an alamaneg ; kontadennoù Grimm hag oberennoù di-aesoc'h e voen gouest da lenn er skrid alamanek, da skouer, diwar neuze. Ar yezhoù bev a blije din bepred. Ar plasoù kentañ a zeus din ivez e lennegezh dre vras. Amzer a gollan avat o lenn romantoù levraoueg studi ar re grenn. Soñj am eus e kaved el levraoueg-se romantoù skrijus a seurt gant 'Patira' a zezrevelle darvoudoù o tremen endro da Zinan. Diwezhatoc'h e kemeris dudi el levrioù istor

ivez hep dilezel evit se ar romantoù nemet o tibab neuze oberennoù skrivagnerion a oa diouzh ar c'hiz c'heazh d'ar c'houlz-se e galleg, Bordeaux, Bourget, Estaunié h.a. a zo ankounac'haet krenn hiziv.

\*\*\*\*\*

Pennad 3

Ur bloavezh didrubuilh - e-keñver skol - e voe an hini kentañ a dremenis e Sant Marzhin. Da gelenner war al lennegezh - latin, gresianeg ha galleg - em boa an eo. beleg Fontaine, un den hegarat ha didrouz, dister awalc'h da welout gant e lunedoù korn hag e zremm livrin. Ganet ha savet e oa bet war ar maez e rannvro Roazhon hogen berr tre e oa e zeskanant diwar-benn kudennoù Breizh eveljust. E labour kelenner a oa onest ha peuzvat. Bep an amzer, soñj am eus, e lenne deomp istorioù a skouer vat a gaven dudioc'h evelato eget e gentelioù.

Eus ur c'helenner all em eus dalc'het soñj. Hemañ avat ne oa ket ur Breizhad, ur 'Frankkontad' ne lavaran ket ha Tramus a oa e anv. Ur beleg a oa anezhañ ivez hogen n'on ket evit lavarout hag-eñ e oa eudist eget. Kelenn a rae din istor hag alamaneg (pevar e oamp hepken o teskiñ alamaneg en trede klas). Ur mell den koujorn ha krenn a oa anezhañ, livrin ha ledan e fas, moal ha ruz e glopenn ken e lufre, karadek ha drev, o frotañ bepred e zaouarn an eil ouzh egile pa veze o komz ouzhoc'h, o peukañ e skolidi d'o lakaat da respont primoc'h. E fin ar bloavezh skol, da geñver e ouel, a gav din, hor boa kinniget d'hor

c'helenner istor ul levr istor, na petra 'ta, unan diwar-benn **brezel Spagn** a oa oc'h ober e reuz d'an ampoent. Gwell en doa kavet avat an ao. Tramus kaout ul levr diwar-benn Alamagn ar genelwerinelourion a oa hogos e barr he galloud neuze : diawelout a rae ne oa brezel Spagn nemet un advrezel e-keñver an hini edod o prientiñ hag a oa o vont da darzhañ er bloaz war-lerc'h. Ha war ar poent-se ne oa ket faziet moarvat.

E ser un darvoudenn all em eus dalc'het koun anezhañ. Epad e'gentelioù istor e c'hoarveze gantañ goulenmata daou skoliad en hon touez diwar-benn istor Breizh. Ar re-mañ avat a oa bugale noblañsoù, de Pengwuern ha de la Blanchardière. Hemañ bepred a seblante gouzout un dra bennak war an divoud-se. N'eo ket ouzh e respontoù avat e taolen pled : sebezet e oan o tont da c'houzout he devoa bet Breizh un istor par da hini Bro C'hall. Iskis e kaven klevout anvioù an duged a oa dianav krenn din a-ziagent. Betek neuze e oan bet lakaet da grediñ he doa bet Bro-C'hall hepken un tremened politikel.

Skrivet em eus e deroù ar pennad-mañ em boa tremenet ur bloavezh didrubuilh e diabarzh ar skolaj. Er bed diavaez avat ne oa ket hevelep kont. Er bloaz 1938 e oa kroget red an istor da dreiñ prim eston. Da gantañ e oa bet aloubet Aostria gant al luez alaman. Kement ha m'em eus soñj n'em boa ket taolet fed ouzh an darvoud-se. Ne lennen ket ar c'helaouennoù, na petra 'ta. Hogen kavout a ra din ivez e oa bet degemeret ar gwall zegouezhenn-mañ gant kalz a habaskted e-touez an dud war

va zro. An darvoud a seblante natur awalc'h o vezañ ma oa alamanegerion eus an Aostrianed ; ha n'eo ket sujidi ar stad c'hall, hag int boazet ouzh ar c'hreizennerzh, a c'helle kavout abeg e Hitler pa ne leze an disterañ emvelestre-rezh d'e vro c'henidik. Ouzhpenn-se, d'ar c'houlz-se, e oa bet 98 % eus an Aostrianed, goude un istor lieskantvedek a frankiz hag a zishualded, o vouezhiañ en un taol, hep bezañ bet rediet, evit diverkañ anv o bro a-ziwar gartenn ar bed, hag ar c'hardinal Innitzer a oa bet o reiñ skouer dezho (1). Penaos souezhiañ goude-se e ve bet ar Vretoned gonezet da vennad an impalaerelouriezh c'hall goude pevar c'hantved a stagidigezh ?

Daoust da gement-se, krennarded dibreder evel ma oamp, ne soñjemp ket nemeur er brezel, en hon diduamantoù bihan ne lavaran ket. Kouñ am eus a ziv ergerzhadenn hor boa graet e fin ar bloaz skol. Ar wech kentañ e oan aet betek Saozon, war ribloù ar Winun gant "Breuriezh ar Werc'hez", ur bourmenadenn blijus awalc'h, an hini nemeti a ris gant ar vreuriezh hengounel-se rak er bloaz war-lerc'h ne voen ket degemeret da ezel (marteze em boa ur spered fall, hep gouzout din moarvat!) Dres arack ar vakañsoù ivez hor boa graet un droiad e Konkaven, war aod an hanternoz : ar wech kentañ e voe din dizoleiñ ar rannbarzh-se eus Breizh a zo hoalus kenañ. Dav e voe din goude-se gortoz fin ar brezel abarzh distreiñ war an aod-se.

(1) Kement-se n'en deus ket miret ouzh ar re unanet war-lerc'h ar brezel da blantañ dezho ar frankiz endro. Perak n'o deus ket graet kemend-all evit Breizh ?

Ehanoù plijus e oa bet ivez mizvezhioù Gouere hag Eost. D'ar c'houlz-se koulskoude e oa bet ar brezel tost da darzhañ p'en doa klasket Hitler tagañ Tchekoslovakia. Abaoe em eus lennet meur a levr diwar-benn an darvoudoù-se ha n'o doa ket kalz a ster evidon neuze. D'ar mare-se evelato o doa kredet an dud da vat e oa didec'hus ar c'henstok etre Alamagn ha Bro-C'hall. Ar C'hallaoued o doa soudardet meur a vloavezhriad. Diwallet e oa pontoù al linenn-houarn Roazhon-Sant-Malo a-us d'ar ganol, e Sant-Medarz e-lec'h e oa bet lec'hiet un toullad taowelerion. Rener ar bagad, ur c'habiten e anv an Douareg, a dremene bemdez meur a wech dirak hon ti, ambrouget a-wechoù gant div blac'h yaouank eus Melez, ar vourc'h dostañ war hent Roazhon.

Krennarded a seurt ganeomp ne oant ket emouez ouzh grevusted ar pezh a c'hoarveze hag a vroude hepken o faltazi. Evit ar re o doa bevet ar brezel kentañ avat e oa ankenius meurbet gortoz adarre hevelop drouzvezh. Gant trugar ha disamm eta o doa degemeret keloù ar peoc'h saveteet d'ur priz na verne ket dezho. Awalc'h e oa dezho gouzout ne vije ket brezel. Soñj am eus a levezon va zad pa ouezas e oa pellaet evit ar pred tasmant ar walenn. Diwezhat e oa en em gavet er gêr en noz-se ; oc'h ober un droiad a-hed ar ganol e oa bet. A-boan diskennet diwar e varc'h-houarn ha digoret an nor en doa taolet : "Ne vo brezel ebet!" gant mouezh un den dieubet diouzh un hurlink. Daoust ha gouzout a rae n'en defe ket gwelet an dibenn anezhañ ?

\*\*\*\*\*

Nemet da vare an enkadenn a zlee disoc'hañ da emglev München ne oan ket bet trubuilhet bras gant an darvoudoù en hañvezh-se. Kendalc'het em boa da vale war varc'h-houarn a-hed ar ganol gant va zad pe va unan. A-wechoù ivez e kemeren un tignol a oa stag ouzh ar c'hal ha gant va breur ez aen d'ober un tamm tro betek skluz ar Beuzid. Un devezh - n'ouiemp ket petra ober moarvat - hor boa kaset ar c'hazh ganeomp. Ar paour kaezh loen avat a oa bet spontet oc'h en em gavout e-kreiz an dour ha n'en doa ket fellet dezhañ chom ganeomp. Ur mell lamm en devoa graet da glask tizhout ar ribl ; hemañ a oa re bell avat hag hor c'hazh a oa kouezhet e-kreiz ar ganol. Ma ! Biskoazh ne welis aneval ebet o neuñ ken ouesk hag hor c'hazh en drc-se ; ur serr-lagad goude e tape douar yac'h ha salv. Ha ni keuziet o kavout al loen paour en ur stad truezus, gleb-teil e foulenn, e oamp aet da gerc'hat ur spoueenn ha frotet hor boa anezhañ kalonek ; sec'h mat ne oa ket avat daoust da se ha Bisig en doa tremenet ar peur-rest eus an endervezh o tommhoeliañ hag oc'h en em lipat a-benn gwiskañ endro un neuz kazh dereat.

E miz Here 1938 eta e oan deuet tre en eil klas. Da benngelenner war al lennegezh em boa ar wech-mañ an ao. Percepied, ur Breizhad eus gorre Breizh, beleg eus an eskopti. Bez e oa anezhañ un den bihan ha treut, disliv, roufennet don e zremm, o komz gant ur vouezh vouk

ha raouliet un disterañ. Aet e oa dija war an oad d'ar c'houlz m'en anavezis hag an dra-se a oa anat diouzh e wisk zoken peogwir e touge bepred ur varetenn war e benn.

Evel e genvreur an ao. Fontaine e oa anezhañ ur c'helenner peuzvat ha na zeue ket nemeur er-maez eus tachenn e vicher. En eneb d'am c'helenner trede klas ne hañvale ket bezañ tchet d'ar romantoù na d'ar c'hontadennoù a santimant. Leun a skiant-vat e oa, ur perzh hag a ra diouer a-wechoù da gelennerion war al lennegezh a zo. Un hej trumm a rao d'e ziskoaz pa veze anv a garantez er skridoù klasel gall a ziskleriemp. Ar garantez a oa mat d'ober euredoù hag un eured n'oa ket ur romant an hini e oa. Ha p'edomp o plaenaat ar "Femmes savantes" e oa a-du krenn gant egile a soñje "ne vevar diwar yezh vray, diwar soubenn vat ne lavaran ket..." Neuze, o sel-lout ouzhimp dreist da werennoù hirgelc'hiek e lunedoù, e klaske gwiriañ ha meizet mat hor boa e gentel. Un den kempouezet ha diazezet mat war an tamm douar-mañ a oa anezhañ hag er c'heñver-se disheñvel mat diouzh an hini am boe da gelenner er bloaz war-lerc'h.

Ret eo lavarout e selaouemp kement-se gant ur skouarn hepken rak n'oamp ket gwall chalet gant kudennoù seurt se d'an ampoent.

Gwelet mat e oan gantañ hag ar plasoù kentañ a zeue din bep taol tost da vat er c'hevezadegoù. Evelato em boa roet kerse d'an den kaezh e fin ar bloaz. D'an eil a viz mae 1939 e oan bet kaset gant ur c'hamalad all, Piel e anv, ur Gall a-hend-all, da gemer perzh en ur genstrivadeg aozet gant Skol-veur gatolik Angers. Da des-

tenn lennegezh hor boa da ziskleriañ : petra eo ar varzhoniezh ? Moarvat ne oan ket bet awenet gant hevelep testenn rak c'hwitet em boa en un doare mantrus, ha va c'hensko-liad koulz ha me. N'hor boa ket graet muioc'h berzh en droidigezh diwar latin. Setu, epad pemzektez war-lerc'h, da vihanañ, hor boa klevet kros awalc'h gant hor c'helenner dipitet ha na bardone ket deomp nemeur bezañ disouezhet anezhañ e ken vil doare.

A-hend-all em boa ar memes kelennerion hag er bloaz arak nemet e oa graet ar c'hentelioù alamaneg gant ur c'helenner nevez, ur sivil ar wech-mañ, Thomas e anv, ma ne fazian ket, ur gwaz kreñv ha skoaziet ledan, lunedoù korn dezhañ, e tro pergont pebmont vloaz, a zeue n'ouie den a belec'h - ur pouezmouezh iskis a oa gant e c'halleg - hag a steuzias a-grenn da vare ar brezel. Klevout a ris a-c'houdevezh e oa bet lazhet e 1940.

Red ar vuhez er skolañ epad ar bloavezh arak ar brezel a voe ken unton hag er bloavezh arak, torret hepken gant darvoudoù : ur weladenn a rejomp d'ar mirdi dindan renerezh an tad Geschwind (eno hor boa gwelet 'ginivelezh' Latour). Ar c'helenner-mañ a gase ac'hanomp da ergerzhout straedoù kozh Roazhon endro d'an iliz-veur, dorjoù Mordel ma teue tre duged Vreizh ebarzh o c'hêrbenn ; meur a daolenn gozh dedennus hor boa dizolot gantañ en ilizoù kreiz-kêr ; war un dro e roe deomp diskleriadurioù diwar-benn Roazhon gozh, tangwall 1721 h.a. Kement-se avat gant ur spered hengounel ha n'eo ket tamm ebet gant ur spered breizhat eveljust.

Un nebeut diduamantoù a veze aotreet deomp bep an amzer evelato. D'an 20 a viz Du 1938 - glav puihl a reas e-doug an deiz d'ar sul-se - e oan aet da arvestiñ ouzh film kentañ Walt Disney e tresadennoù-fiñv e liv, "Gwennerc'h hag ar seizh korrig". Kalz berzh a reas oberenn Walt Disney d'an ampoent. E-keit-se, darn eus va c'hamaladed a oa aet war o zroad betek tachenn-sport st. an Oriant : ur match a oa etre ar "Red-star" ha Roazhon en devezh-se. Ur film pe zaou all hor boa gwelet e-kerzh ar bloaz, a gav din : "Les deux gamines" (n'em eus tamm soñj anezhañ a-hend-all), e kêr ; er skolaj e oa bet luc'hvannet ur film mut kozh "La ronde des heures" hag unan all e liv diwar-benn Breizh : al liv er filmoù a oa nevez flamm d'ar mare-se (1).

Diduamantoù all a veze pourchaset deomp gant mererezh evezhiek ar skolaj. Ur bagad c'hoarierion "Thuet" a oa deuet du-mañ d'ar sadorn 26 a viz Du da zisplegañ div oberenn : "Stradivarius" ha "Le gendre de Monsieur Poirier" gant Labiche, ur pezh a voe diouzh ar c'hiz er paeronajoù gallek epad pell amzer, a gredan.

Dre vras evelato ha daoust da se e oa hir tre an amzer din ha sammet e oan gant an enoe. Ne soñjen e gwirionez nemet en un dra : tec'hout diouzh an toull ma oan bac'het ennañ. Biskoazh ne c'hellis boazañ ouzh ar vuhez skoliad lojet ; n'ouzen ket ha kalz bugale a ra.

(1) Tro hor boa bet da selaou ur saver kanaouennoù gallek gwall-ankounac'haet hiziv, Milton e anv ha zoken da vont d'ar sirk e fin ar bloaz.

Evelkent e teue betek ennomp un nebeut heklevioù eus ar bed diavaez. D'an 28 a viz Du 1938, da skouer, e oa bet graet ur brezegenn er skolaj diwar-benn brezel Spagn ; ne oan ket aet a-hend-all : ur gevezadeg jedoniezh am boa da brientiñ. Kement-se a ziskouez awalc'h ne oan ket tizhet da vat gant keloù an dispac'hoù hag ar reverzhioù a oa o virviñ e pep lec'h en Europa d'ar c'houlz-se, pezh a oa natur goude holl peogwir n'em boa nemet pemzek vloaz e 1938. Tro am boe evelato da arvestiñ a dostoc'h ouzh heuliadoù an darvoudoù politikel a dremene un nebeut kantkilometradoù diouzhin. War-dro fin ar bloaz -skol e oa dichañset deomp ober un droiad vale war hent Redon. Eno e oa bet serret ebarzh ur c'hamp repuidi nevez erruet eus Bro-Spagn da Vreizh war-lerc'h drouziwezh o c'hostezenn (1). O gwelout a raemp o vordilhañ adreñv ar roued-orjal, gwazed, gwraez ha bugale, divi, disliv, truilhoù endro dezho, ha sellout a raemp outo, alvaonet ha saouzanet, hep kompren ervat a belec'h e c'helle dont hevelep reuzeudigezh. A-ziagent, gwir eo, en devoa graet unan eus hor c'helennerion, an ao. beleg Barbet, ur brezegenn diwar-benn ar repuidi spagnat war harzoù Spagn e-lec'h edo oc'h ober e servij soudard d'ar mare-se.

Frometoc'h e oamp bet gant aloubidigezh Tchekoslovakia (a oa bet barnet gant Olier Mordrel d'an ampoent evel ma verzis diwezhatoc'h o lenn "Breiz atao"). D'an 18 a viz Meurzh 1939 e verken kement-mañ ebarzh va

(1) Stank eo bet ar repuidi spagnat e Breizh epad ur penad, zoken war ar maez. Un toullad mat anezho a oa deuet da Gistreberzh, etal Gwened. Eno e tiskouezent o berder kreisteiziz epad an abadennoù mell-droad : lammadeg ha briatadeg a veze ganto pa dizhe o stroll gonit ur pal.

deizlevr : "Abaoc un nebeut devezhioù e komzer bepred eus brezel. Gouezet hon eus ez eo bet aloubet Tchekoslovakia gant an Alamaned hag ez eus emgannoù etre Hungariz ha Poloniz en Oukraina iskarpatiek. An holl a soñj e c'hell ar brezel tarzhañ a vare da vare ; war veno ur skoliad dia-vaez zoken ez eus 90% a chañsoù e c'hoarvezfe an dra-se. Va c'hamaladed a zo tommet mat d'o fenn ha darn a lavar emaint o vont da emouestlañ, egiz pa vije anv a vont da gonikleta. Pep hini a ra marvailhoù diboell evel bugale maz int..."

An iskisañ eo ne gavan notenn ebet a-c'houdevezh diwar-benn an darvoud-se. Hogen aes eo kompren : serret e oamp en hor skolañ evel en ur gouent. Ha peurvuiañ ne zeue nevezinti ebet betek ennomp.

Padal e oa soñj an holl gant ar brezel. Da skouer, e foar Roazhon, d'ar sul 30 a viz Ebrel 1939, war dachenn Veurzh, e oa bet miret ur stand a-ratozh d' an emzwallerezh, evel m'em boa gwelet unan end-eeun -- ha spontus awalc'h - e diskouezadeg etrevroadel Paris e 1937. En devezh-se a-hend-all em boa notet ivez em boa klevet kalz brezhoneg epad ar foar rak diwar neuze e oan dedennet da vat gant yezh ar vro.

\*\*\*\*\*

Pennad 5

Abaoc pellzo e kemeren dudi er yezh vroadel hogen va doug dezhi a oa bet kreñvaet ennon d'an

ampoent dre ma oa deuet va daou dad-kozh da chom du-mañ e deroù ar bloaz 1939. Evel ma ne oa den ebet da ober war e dro e Gwaien he doa lavaret va mamm d'he zad dont da dremen ar goañv er gêr. Tu a oa d'e lojañ war un dro gant va zad-kozh all o vezañ ma oa an holl vugale er-maez eus an ti. Setu, epad ehanou Meurlarjez em boa kavet va zad-kozh Piton e Sant-Jermen. Brav e kave ar vuhez eno ; mont a rae da bourmana-hed ar vriell en tro-war-droioù, en ur vutuniñ bepred e gorn-butun. Gwir eo e oa aet pell war vor gwechall gozh hogen hep dont er-maez eus al lestr, un tammig egiz un astraer en e graonell ; abaoe c'hwegont vloaz n'en doa ket loc'het diouzh Gwaien ha gant souezh e tizoloe ar vuhez arnevez. Ur spered kentidik da sabatuiñ a ziskoueze kaout a-wechoù. N'oa ket evit kompren e c'hell led lakaat mouezh un den da zont er-maez eus ur voest koad bennak. "Ne lakaot ket ac'hanon da grediñ n'eus ket un den ebarzh ar voest-se," a lavare d'am mamm. O komz eus ar benveg skingomz e arnevez. Gwerso avat o deus kollet hor c'hemprediz ar galloud da souezhiñ (1).

Se a lakae va mamm da c'hoarzhin un tammig. Ur wech avat e oa bet sabatuit mik an holl gant pezh en doa respontet va zad-kozh d'ur gouenn he devoa graet va mamm dezhañ - diwar va atiz - a-zivout kudenn an emrenerezh (d'ar prantad-se e oa bet reuz endro da brosezou "Breiz Atao" hag en abeg d'an dezvadoù a oa bet douget a-enep d'ar vroadelourion). Va zad-kozh eta en doa diskle-

(1) Displeget em eus endev ne intende ket va zad-kozh galleg lennegel ar skingomz. Un tammig galleg martolod e oa gouest da gompren.

riet prim e vefe kalz gwell an traoù gant ar Vretoned ma vefe dieub o bro. Anzav a ran e oan bet ken sebezet ha va mamm p'em boa klevet va zad-kozh o komz evel hen. Ne zlejen ket bezañ bet koulskoude : ne oa ket bet er skol koulz lavaret ha Bro-O'hall a chome evitañ ur vro estren.

Un darvoud doanius bras evitañ hag evit an holl du-mañ a c'hoarvezas epad chanoù Pask er bloaz-se : mervel a reas va zad-kozh Olier hag a oa bet ur c'hamalad d'am zad-kozh Piton. Degouezhet e oan da Sant-Jermen gant va breur d'ar gwener 7 a viz Ebrel, Gwener ar Groaz. Toc'hor e oa zad-kozh Olier endev petra bennak ma n'ouien ket gant peseurt droug e oa. Abaoe ma oa bet o chom e Gwaien e-doug goañv 1937-1938, en e unan, e oa aet e yec'hed war fallaat ha ne oa ket bet gwellaet dezhañ nemeur a c'houde ma oa distroet da vevañ ganeomp.

Gant un derzhienn vras e oa moarvat en devezh-se rak alteriñ a rae (daoust ha tizhet e oa gant un danienn-skevent, ne oufen lavarout). Dre e alfo e kave dezhañ edo e Gwaien adarre, en e yaouankiz, hag o pesketa en ur vag ; ober a rae jestroù an hini a denn al linenn eus an dour pe a sach ar rouedoù. A-wechoù all e save pelloc'h ha donoc'h en e dremenet : edo e Santez-Anna-ar-Palud a nevez ha lidambrougadegoù diziwezh a zibune dirazañ.

Da sul Fask e oa deuet e veiz dezhañ un tammig. Komprenet en doa e oa sul Fask anezhi ha fellet en doa dezhañ sevel diouzh e wele ha mont d'an oferenn. Hogen n'en doa ket bet nerzh eveljust. E diwezh ar beurevezh

e oa bet kerc'het ar beleg war e dro. Person Sant-Jermen an hini eo a oa deuet, ur beleg giz kozh, gredus, seurt na weler ket kement hiziv marteze. Lakaet e oa bet va zad-kozh, en e gador-vrec'h aozilh a oa bet prenet dezhañ e Cambrai. Klasket en doa ar person komz gantañ hogen ne ouie ket brezhoneg. Va zud a yeas ur wech ouzhpenn da jubennourion. Tra ma oa ar person ouzh e nouiñ e lavare va zad-kozh e bedennoù e brezhoneg egiz m'en doa o desket en e vugaleerezh - en e bart e unan, serret bepred en e yezh. Klouarijenn an nevez-amzer a blave war ar maeziou tro-dro ; dre an nor damzigor e verzen an oabl glas-gwenn hag en tu all d'ar ganol ar gwez dibourc'h c'hoazh gant o broñsoù tost da ziglorañ.

An tammig gwellaenn a oa deuet em zad-kozh ne oa ket padet avat. Tremenet e oa d'ar merc'her war-lerc'h.

An obidoù a voe graet en iliz parrez Sant-Jermen. Goulennet e oa bet ur wech ouzh va zad-kozh ha fellout a rae dezhañ e ve douaret e gorf e Gwaien ; hogen ne rae ket forzh, emezañ. Evel-se eta e voe toullet e vez ebarzh bered vihan Sant-Jermen, war laez, a-zioc'h ar blaenenn hir a sko war-du Roazhon.

Un nebeut sizhunvezhioù goude e oa distroet va zad-kozh all da Waien.

\*\*\*\*\*

Pennad 6

Pa voe fin d'ar bloaz-skol tri miz war-lerc'h ne soñje ket din tamm ebet, daoust d'an darvoudoù a oa nevez c'hoarvezet, e oa ar peoc'h oc'h ober e dalaroù. Ne oan prederiet, evel va holl gamaladed, nemet gant ehanoù an hañv a oa o tigeriñ dirazomp. D'ar sul 11 a viz Gouere 1939 e oan aet gant kenskolidi all d'ar redva marc'hoù-houarn, st. A. Guérin ha chomet e oan eno etre div eur ha pemp eur hanter o c'hortoz done-digezh rederion "Tro-Vro-C'hall". Ar vuhez a gendalc'he evel a-ziagent, dibreder.

D'abardaez e oa bet aczet un abadenn c'hoariva gant paotred ar skolaj. N'em boa ket kemeret perzh enni a-hend-all. Lodennadeg ar prizioù a oa bet graet antronoz.

Enoeiñ a ris awalc'h epad devezhioù kentañ ar vakañsoù. Soñj ameus e oa bet degaset ur c'hi du-mañ hogen ne chomas ket pell ganeomp : roet e oa bet da skluzierez an Onneg, un hanter-lev izeloc'h war-du Roazhon (1). Ret eo din lavarout e ranken menel er gêr bepred rak glav a reas etre ar pevarzek hag an ugent a viz Gouere. Tremena raen an amzer o lenn pe o selaou ar skingomz. D'ar pevarzek a viz Gouere e oa bet skignet abadennoù brogar diwar-benn dispac'h 1789 gant ar C'hall-

(1) Ar c'hi-se daoust ma oa yaouank a zalc'has soñj mat ac'hanon ha kalz a joa a rae ouzhin bewech ma tremenen dre ar skluz-se a-c'houdevezh.

laoued, na petra 'ta. D'al lun seitek em boa selaouet ur pezh-c'hoari gallek "La nouvelle idole" gant J. Cûrel, gouestlet da vrizh-kravez ar skiant, un oberenn brezegennel awalc'h gant ur skrivagner a zo gwall ankounac'haet e Bro-C'hall end-eeun. Levrioù a lennen ivez, diwar-benn istor, gant Funck-Brentano dreist-holl, hag ivez romantoù gant skrivagnerion c'hallek aet emaez a c'hiz a-grenn hiziv evel Bourget ha Bordeaux. N'hor boa diduamant ebet koulz lavaret ; d'ar sadorn 22 a viz Gouere em boa klas-ket mont da bourmen war varc'h-houarn gant va zad ha va breur. Tremenet e oamp dre Vousterel-war-Izol, Feun, Lenn ar Boulez, Plouzer. Glav puih a rae adarre ha diwar an droiad-se n'em boa dastumet nemet ur pennad-sifern !

Adal ar 25 eus ar miz avat e oa kroget an amzer vrav. D'ar 26 a viz Gouere e oan distroet da lenn ar Boulez gant va breur ha va zad. Kemeret hor boa ur c'hanod ha kantreet hor boa penn-da-benn al lenn. Klasket hor boa pesketa hogen tro-wenn hor boa graet. Ur marc'her-vezh bourrus hor boa tremenet eno evelato : ur gompezennad dour ec'hon ha kaer eo lenn ar Boulez, gronnet gant gwez a-hod he ribloù. Muioc'h a besked hor boa paket adal ar sizhun war-lerc'h pa oad kroget da c'houllonderiñ ar ganol a-benn kempenn ar skluzioù : sili ha trañched dreist-holl a veze tapet ganeomp (1).

Peurvuiañ ez aen da bourmen va unan penn. D'ar meurzh eil a viz Eost em boa douget ul lizher da Roazhon, e skluz ar Mailh ha chomet e oan e kêr goude (1) D'ar sul 30 a viz Gouere e oan aet d'ur pardon bihan - da geñver gouel Santez Anna - en ur chapel digevannez savet a-us d'ar ganol etal bourc'h Sant-Medardh, a voe distrujet gant bombezadegoù an Amerikaned e 1944.

-se, o klask levrioù da brenañ, hep kavout ar pezh a glas-ken. Hiroc'h troiad am boa graet d'an 11 a viz Eost avat: War-lerc'h bezañ tremenet e Roazhon da veure - bepred da zougen lizhiri da skluz ar Mailh ha klasket en aner adarre levrioù er staliou-gwer - em boa ruilhet en endervezh betek Komborn, gant an dezo da zegas d'ur c'hamalad - Lebret e anv - un nebeut dielloù en devoa ezhomm anezho evit e "zeverioù vakañsoù" (izili e oamp hon daou en ur c'helc'h studierion gristen er skolaj hag eskemm a raemp levrioù). N'em boa ket e gavet er gêr. Neuze em boa hedet hent Dinan betek Maelieg hag alese e oan diskennet etrezek ar Chapel ha Kavorieg ; tro-aze ez eus dremmweliadoù ledan ha glasvezhus am boa dizoloet gant dudi, war-lerc'h pinegi Maelieg. Distroet e oan dre Dinteniég, Kêr Hazoù, Gwipel ha Mousterele-war-Izol.

A-hend-all setu un nebeut pajennoù eus va deizlevr en hañv-se.

Diriacoù 17 a viz Eost 1939

Bet on oc'h ober un droiad gant va zad, dre Sant-Lijer, ar riolenn, hent Mousterele-war-Izol betek Denzieg, hag alese betek Kourgalez endro. Chomet omp a-sav ebarzh div vereuri, e ti an it. Liguët, e Mousterele-war-Izol.

Disadorn 19 a viz Eost 1939

Ur redadenn a llo kilometrad adarre. Act e oan d'ar beure-mañ da Roazhon gant ar soñj da brenañ ul levr ha louzeier evit du-mañ. Re zivezhat e erruis du-se. Distreiñ a ris eta d'ar gêr evit debriñ merenn. Ha me en

Kemblizieg

hent adarre en endervezh. Graet ganin va frenañnoù e veizis n'oa ket diwezhat anezhi hag em boa amzer d'ober un dro-vale. P'em boe tizhet hent Redon e kendalc'his da gambliañ betek skluz Moñs. Netra n'eo kemmet eno. Neuze em eus hedet briell ar ganol betek ur pont, un hanter-lev izeloc'h eget milin ar Boel e-lec'h e kemeris an hent a gas war-grec'h ken na dizhis Laelieg war-lerc'h ur sav a zaou gilometrad bennak... Neuze e pakis Bruz, Roazhon ha Sant-Jermen.

Setu daou vloaz n'oan ket bet en ardremezioù-mañ, abaoe miz Du 1937. Kredet em befe em boa kuitaet ar c'horn-bro en derc'hent. Bourret em eus oc'h adkavout eñvorennoù dam-ankounac'haet..."

Ur vuhez disoursi a-grenn am boa eta betek an devezhioù-se. A-greiz-holl avat e oa paret adarre tasman ar brezel. Adal ar merc'her 23 a viz Eost em boa notet sinadur ar feur-emglev etre Bro-Rusia ha Bro-Alamagn a zlee degas an drouziwezh. Epad ur mare koulskoude em boa paouezet a deurel kalz pled d'an ñrvoudoù. D'ar gwener 25 e oan aet gant va zad betek Dinan. Abaoe ur pennad amzer e felle d'am zad testaat ouzh ur gêr bennak a-benn gellout espern ar mizoù skol-lojañ pounner en devoa da baeañ evit tri eus e vugale.

En devezh-se eta hor boa skoet war varc'h-houarn war-du Dinan. Loc'het e oamp da eizh eur hanter ha diraezet hor boa skluz ar C'hasteler, e-harz ramparzhioù Dinan, war-dro dek eur hanter pe unnek eur. Gant plijadur em boa adkavet aergelc'h ar mor ; gant va

breur em boa dizoloet kranked bihan e-harz ar skluz ha paket ur silienn vihan bennak er poullou-dour. Dedennus em boa kavet an tolead, an aber e unan ha pelloc'h kêr Zinan war-grec'h a-dreñv he mogerioù.

En endervezhe oamp distroet dre ar Veskontelezh, Sant-Solen, Tinteniég, Denzieg, Feun ha Lenn ar Boulez e-lec'h e ranke va zad sinañ ul levr-marihañ bennak, egiz ma rae bewech ma tremene.

A-benn ar fin a-hend-all ne voe di-soc'h ebet d'hor gweladenn. Chom a rejomp e Sant-Jermen evit n'ouzon peseurt abeg.

Daou zevezh war-lerc'h hor boa ankou-nac'haet an ergerzhadenn-se a-grenn. Paket e oamp gant korventenn an darvoudoù. D'ar sul 27 a viz Eost e oa bet deoget endev... ar c'hezeg e Sant-Jermen (Doue a oar petra petra a felle da vererezh al lu gall ober gant ar c'hezeg kaezh-se ; pep mererezh a zo hengoungar avat, egiz ma ouzer). Galvet e oa bet dija an adsoudarded - ar re o devoa an niverennoù 1 da 6 war o levrigoù-soudarda oa aet kuit a-ziaraok. Ar pontoù a oa diwallet adarre evel er bloaz-kent (1). Trenladoù soudarded saoz a groge da erruout bemdez dre linenn Sant-Malo-Roazhon end-eeun.

D'ar meurzh 29 a viz Eost e oan aet da Roazhon. Un dro am boa graet er skolaj Sant-Marzhin a oa dalc'het a-benn neuze gant al lu gall. Kavet em boa an Tad Prefed - un okitanad a oa anezhañ, a soñj din -

(1) Linenn Sant-Malo-Roazhon a zo o c'haolmañ ar ganol ul lev uhelloc'h, e Sant-Medardh. An Amerikaned a glaskas he distrujañ e 1944. Ar chapel savet en e gichen a voe tizhet ganto hepken, egiz m'em eus merket araok.

treuzwisket e soudard gall, ar pezh en doa sabotuet ac'hannon awalc'h. Dispac'hadeg a oa e pep lec'h. A-hervez e oa 1.500 a wazed ha 100 a gezeg o terc'hel ar savadurioù. Kement a drouz a oa eno noz-deiz ma ne oa mui tu ebet da gousket. Ar porzhier, an ao. Helen, a glemme ouzhin diwarbenn se. E gwirionez e vordilhe ar soudarded en holl salliou-studi pe salliou-kenteI, en hunvaou, er predvaou ; ken stank all pe dost e oa ar sivilid rak kerentiadoù an nevez-soudardidi o doa o ambrouget betek eno. Ur weladenn am boa graet neuze d'am c'helenner kozh an ao. Percepied, e levracueg ar skolaj ; trejeboulet hag estrenvanet e oa an den kaezh gant an darvoudoù. N'oa mui urzh ebet er skolaj peogwir e oa bet soudardet an holl re a oa atebek anezhañ ; tad Prefed hag an tad rener peurgetket. Ivez e oa bet soudardet ivez an ao Delaunay, kelenner war an istor, emganner kozh ar brezel kentañ. Eus strad e bres en devoa diskoachet e ul livrez kabiten flamm karget a vedalennou ha brabañsal a rae tro-aze en trepasioù.

Neuze, pezh a oa didec'hus a oa c'hoarvezet d'ar c'hentañ a viz Gwengolo. Abaoe em eus lennet meur a levr e-lec'h e oa diskleriet penaos e oa keneret an darvoudoù ken e teuent da vezañ poellek, koulz lavaret. D'ar mare-se avat en em gemmeske an Istor gant an Tonkadur end-eeun, gant un Tonkadur a wiske dremm un doue dall ha didruez. Hag evit an holl dud e oa heñvel. Evito, evel evidon, n'o devoa an darvoudoù ster ebet ; ne sellent ket ouzhimp. Ober a raed anv eus kroaziadeg an demokratelezhioù ; war ar maez avat e-lec'h edon o vevañ ne gave ar ger "demokratelezh" heklev ebet ; ur ger goulllo e oa evit ar gouerion

hevelep tro-lavar, evel hini ar Stad pe vBro-C'hall e unan. N'oant ket a-du ; n'oant ket a-enep ; er-maez eus o emell e oa an emgann-se. Ar pezh a ouient hepken eo n' o doa ket da zibab ; o bugale a wefe kemeret diganto ha kaset d'ar brezel ; gouzañvant rik e oa o emzalc'h ha ne gemerent perzhebet en darvoudoù. Ne lavaran ket eveljust e oa reizh kement-se rak dlead ur stad ezoo lakaat he c'heodedourion da vezañ lodek en hec'h uhelvennad hogen, dres, ar stad c'hall ne oa ket deuet a-benn eus kement-se er rannvro eus Breizh e-lec'h edon.

Heñvel e oa evidon, a lavaran. D'ar mare-se e oan nec'het peogwir ne oan ket fromet gant ar pezh a c'hoarveze pa rankjen bezañ bet, a soñje din, da vihanañ en abeg d'ar reuz divent a oa o vont da zirollañ war ar bed hag an dud. Met, mann, yen e chome va spered ha diverv va faltazi. Kredapl eo e oa koazhet mat ennon ar gred gall peogwir ne oan tregaset tamm ebet gant planedenn Vro-C'hall a oa va bro a-hervez. Ha koulskoude n'em boa ket emskiantet en un doare sklaerva broadelouriezh vreizhat.

Pa brederian evelato e tamverzan un andon all da zic'hred sujidi ar stad c'hall e deroù an eil brezel. E 1914 e oa bet aloubet tiriagezh o stad ha krediñ a c'hellent e tifennet un douar. Netra heñvel ne c'hoarvezas e 1939 peogwir e c'hortozas an Alamaned dek miz arack argaññ. An enebour a droe da dasmant. En eneb e tihunas enno skiant an douar, ar garantezvro hag ar brezel ur wech ma voe bet aloubet o ziriagezh gant ur galloud estren.

Kentañ keloù a oa deuet din d'ar c'hentañ a viz Gwengolo eta e oa hini an holl-lugalvadeg. Edon o lenn ebarzh va c'hambrel laez - "Le siècle de Louis XIV" -pa oa deuet va c'hoar C. da gemenn din e oa bet nevez divizet an holl-lugalvadeg gant ar gouarnamant gall. Diskennet e oan kerkent da selaou ar skingomz. Gouezet em boa neuze e oa Hitler o paouez kas e vagadoù soudarded dreist da harzoù Polonia. Lennet e oa bet deomp embannadenn ar 'Führer' da geñver an aloubidigezh-se, enni meneg eus an arnod emglev diwezhañ en devoa kaset a benn abarzh kemer hevelep disentez (1). War-lerc'h ar c'heloù-se ne oa mui spi ebet da virot. ar peoc'h.

Eveljust n'em boa mui c'hoant ebet goude-se da genderc'hel gant va lennadur. Evel ma n'ouien ket petra ober en doa goulennet va zad diganin - emellet e oa e-lec'h-all - mont da gemenn er skluzioù en doa da eveshaat en hanternoz pegañ ouzh an ti-skluz skritell an holl-lugalvadeg. Aet e oan en hent eta. Chomet e oan a-sav e Sant-Medarzh. Eno edon p'em boa klevet o tont a ziw ar laez lezoù kañvus ar c'hleier aze-gemenne ar brezel. Kerkent ha ma teulis en ti-skluz e oa dirollet an it. Hamon da ouelañ : kollet he doa he gwaz kentañ er brezel 1914 ; hec'h eil gwaz koulz hag he mab. a oa bet soudardet ivez adarre. E pep lec'h ne oa nemet gouelvan gant ar merc'hed mantret a stage da vil-ligañ Hitler.

D'abardaez hor boa klevet troidigezh

(1) Hervez Shirer "Istor an trede Reich", egiz ma ouezer, e oa bet goueliet an digarez gant bagadoù Alamaned treuz-wisket e soudarded polonat a-benn tagañ ur skignlec'h alaman.

prezegenn Chamberlain a zisklerie perak e oa bet galvadeget al lu e Bro-Saoz. Antronoz em boa renet va amzer o selaou ar c'heleier er skingomz. Daladier, ar pennvaodiern gall, en devoa distaget ur brezegenn e-lec'h e tamalle gevier Hitler hag e c'houlenne digantañ tennañ eluoz diouzh Bro-Bolonia, paouez a vombezañ ar vro-se hag a implijout aezhennoù-mougañ (1).

En deiz-se e oa deuet va c'hoar M.H. d'ober un dro er gêr. Edo o labourat c'hoazh d'ar mare-se e burevioù graenti orjal Bruz a oa stag ouzh gwazvaou mererezh al lu gall, a gav din, ha nec'het awalc'h e oa o soñjal e c'helle he lec'h-labour bezañ ur pal-brezel d'ar c'hirri-nij alaman (dont a reas da chom e Roazhon dam-c'houde e burevioù ar "Pontoù-ha-chaoseriou" ha goude er "c'hCorporation paysanne", war al Lisoù ; eno, a soñje dezhi, ne vefe ket ken arvarus eviti).

D'ar sul 3 a viz Gwengolo e oa bet diskleriet ar brezel. Broutac'h e oa an amzer en devezh-se. Treniadoù soudarded a dremene dibaouez war linenn Sant-Malo-Roazhon en tu all d'ar ganol : abaoe ur sizhun bennak e pade an dezougadurioù-se. D'ar beure e oan act d'an oferenn d'ar vourc'h en iliz parrez. Er sarmon en doa graet ar person e oa bet anv eus ar brezel eveljust, dre vras avat, rak ar beleg n'en doa ket klasket tamm ebet ober ur brezegenn vrogar : klasket en doa diskouez hepken e oa an dud o unan kiriek d'o zonkadur. Hogen moarvat, diwar ar mare-se, e soñje an dud muioc'h en em ziwall

(1) Koment-se a verken ebarzh va deizlevr met n'em eus lennet e neb lec'h hevelep munud a-c'houdevezhi.

diouzh ar walenn eget prederiañ diwar-benn kudenn an droug er bed.

O tistreiñ da greisteiz hor boa digo-ret ar skingomzer ha gouezet hor boa edo Bro-Saoz e stad a vrezel gant Bro-Alamagn abaoe unnek eur ; ar gouarnamant gall a gemenne en em gavfe ivez e stad a vrezel gant Bro-Alamagn da bemp eur ma ne dennje ket houmañ he bagadoù soudarded diouzh Polonia. Kement-se n'oa mui dija nemet difraeoù aner.

En endervezh e ranke va c'hoar M.H. distreiñ d'he labour e Bruz. Ambrouget em boa anezhi betek Roazhon. Aloubet e oa leur-gêr ar porzh-houarn ha tachenn -Veurzh gant ur mor a dud ; ar soudardidi hag o zud oc'h en em waskañ dirak savadur an ti-hent-houarn, merc'hed o ouelañ, bugale o c'houlenn o zad, kirri-tan deoget o klask toullañ o hent a-dreuz an engroez, un emganner kozh eus ar brezel kentañ mezv dall ouzh taol ur c'hafedi, señ pezh am boa gwelet en devezh-se.

Tremenet e oan dirak ti an "Ouest-Eclair". Eno e oa gronnet an dud bepred o c'hortoz ar c'heloù diwezhañ didec'hus : hini ar brezel diskleriet. Ne oa ket pemp eur c'hoazh ha darn a spie **btav** ur burzhud.

Pa oan distroet da Sant-Jermen em boa klevet adarre prezegennoù er skingomz. Embannadenn roue Bro-Saoz Jord VI hag hini pennsturier ar gouarnamant gall Daladier. A-hend-all, epad ur sizhun bennak e oa redet brudoù a bep seurt. Galv-diwall a oa bet e Sant-Malo ; o klevout ar vouderez o doa kredet tud zo e oa bet taolet

aezhennoù-mougañ war gêr ! D'ar c'houlz-se c'hoazh e veve an dud gant koun ar brezel araok. A-hend-all, karr-nij alaman ebet n'en doa treuzet an oabl a-us da Sant-Malo en devezh-se, eveljust.

Tamm-ha-tamm, du-se, war ar maez, e oa deuet an dud da sioulaat. Netra ne c'hoarveze ; netra ne oa kemmet ; hini ebet eus an armeoù ne glaske tagañ eben. Gant an dra-se dreist-holl e oa sebezet an dud a oa bepred o c'hortoz ur brezel heñvel mik ouzh an hini kent. A-hend-all e oamp hogoziq bugale c'hoazh ha ne oamp ket tizhet war-eeun gant ar brezel. Va zad en devoa 49 bloaz d'ar c'houlz-se ha ne c'helle ken bezañ soudardet. Neuze e stanke va breur ha va c'hoar yaouankañ ar prenes-ter gant mezer du e sell d'an emziwall, diwar c'hoari.

Dont a ran endro amañ d'ur gudenn am eus damveneget a-gent. Merket em eus ne gemere ket an dud perzh da vat en darvoudoù. Daoust ma ouient e arouezie ar brezel merventioù ha poanioù diniver e plegent dezhañ distourm kaer hag, egiz ma 'm eus lavaret ivez, ganin e c'hoarveze an hevelep tra en ur stumm bennak. Va faltazi ha va zrivlierezh ne respontent ket d'an daoleun a glasken imbroudañ gant va spered. En em gavout a raen er-maez eus an Istor, hep levezon ebet warnañ. A-hervez e oan stag ouzh ar stad c'hall - d'ar c'houlz-se n'em boa ket distac-let ar vroadelezh c'hall ez emskiantek - ha padal e oan divarrek krenn da veizañ e pebezh argoll edo. Burutellet ha tamallet e oa dirazon ar stad alaman kenelwerinat er skingomz hag e-lec'h-all ha ne glasken ket enebiñ ouzh daelerezh ar re a gendaone ar stad-se hogen seurt bruderezh

a chome evidon lavar divuhez rak dic'houest en em santen da zougen va unan ur varnadenn bersonel dre ma n'anavezen netra resis war ar gudenn-se er-maez eus ar pezh a oa kon- tet endro din ha n'oan ket evit gwiriañ tamm ebet (1).

Evidon-me eta e tremenas ar peurrest eus ar mizvezh gwengolo-se hogos evel ur mizvezh ehan or- dinal. Kendalc'het em boa gant va fourmenadennoù. D'ar sadorn 9 a viz Gwengolo em boa graet un dro e Bruz, e ser ober ur gwel d'am c'hoar. Un devezh tomm gwrizias a oa anezhi, splann an heol hag un drugar e oa bale war ar maez. Re ziwezhat e oan degouezhet avat o vezañ ma kemere va c'hoar an tren bep sadorn d'enderv da zistreiñ d'ar gêr. N'em boa gwelet nemet he lojerez, ur vaouez kozh hegarat he doa degemeret ac'honan mat ha kinniget din ur banne sistr stouvet. Evel ma c'hoarveze gant kalz merc'hed e oa strafuilhet he faltazi gant ar soñj eus poanioù ar soud- arded kaezh a ranke en em gannañ e gor an heol : anat e oa edo oc'h adveañ bepred ar brezel kentañ. N'em boe ket tro biskoazh a-c'houdevezh da adwelout ar vaouez-se. Me ' gred e voe lazhet e-kerzh ar vombezadeg a zistrujas Bruz e miz Mae 1944, evel kantadoù a Vruziz all.

O tont endro e oan chomet a-sav e Roazhon. Ur vardell a oa bet savet dirak ar porzh-houarn ha ken stank e oa an dud war ar straed ha da zeizioù kentañ ar brezel. Ne oan ket chomet da lugudiñ ha hag erruet e oan abred awalc'h da Sant-Jermen.

(1) Ne vern penaos, kalz traoù ne oant ket anavezet gant enebourion ar genelwerinelourion alaman zoken.

E diwezh ar miz e ris ur veaj betek Gwaien. Goude marv va zad-kozh Olier e oa distroet va zad-kozh all da Waien. E miz Gwengolo avat e oa bet skoet gant ur barrad all eus e gleaved ha va mamm he doa graet he soñj mont betek du-se betegout na ve aet an droug war washaat. Hec'h ambrouget em boa eta. Loc'het hor boa d'an 22 a viz Gwengolo. Ne oa ket gwall aes beajiñ d'an ampoent eveljust. Degouezhet e oamp du-se war-dro an abardaez. Ne oa ket toc'hor va zad-kozh avat, evel ma oamp en gortoz, yac'h pesk ne lavaran ket. Azezet e oa war ar bank a oa bet lakaet war ar savenn dirak e di, o vutuniñ e gorn-butun egiz pa vije bet o c'hortoz ac'hanomp.

N'em eus ket kemeret notennoù diwar ar veaj-se. Soñj am eus hepken e oa un tiegezh o fourmiñ traon an ti. Va moereb Louise a oa marv un nebeut mizioù arak. Pevar devezh vakañsoù ordinal am boa tremenitvez eno, o vont da gouronkañ va unan e Traezh-Kadeg pe o pourmen war ar c'hae a-gevret gant va zad-kozh. D'ar meurzh war-lerc'h e oan distroet da Sant-Jermen. Ur wech c'hoazh e tleen adwelout va zad-kozh ur bloaz goude, d'ar mare ma voe aloubet Breizh gant an Alamaned. Hogen den, d'ar c'houlz-se ne c'helle rakwelout hevelep degouezhenn.

\*\*\*\*\*

/ Pennad 7 /

Dame'houde em boa adkroget gant va studioù. Distroet e oan d'ar skolaj Sant-Marzhin d'an eil a viz Here. Deuet e oan tre er c'hentañ klas A a oa renet gant an Tad Layec ; un nebeut devezhioù war-lerc'h avate oan bet lakaet da dremen er c'hentañ klas E hag an Tad Geschwind am boe da benngelenner diwar neuze.

Kemmet e oa ar skolaj eveljust. Meur a hunva a oa bet deoget gant al lu gall hag a oa aet d'ober salioù ospital. Tu a oa bet evelato da reiñ bod d'ar skolidi lojet ha tamm ha tamm he doa adkroget hor buhez evel diagent.

N'em boa ket kalz amzer da anavezout an Tad Layec. Genidik e oa eus Ledenez ar Wizh, a gredan : m'en doa gouezet brezhoneg un deiz en devoa ankounac'haet anezhañ pell a oa ha, ne vern penaos, ne reas anv ebet biskoazh dirazomp eus e yezh nag e vroadelezh. Brudet e oa da vezañ ul latinegour dispar hogen kozh e oa d'ar mare m'em boa anezhañ da gelenner ha rondonus awalc'h, evit komz fraezh, em boa kavet an nebeut kentelioù a reas din. Tro pe dro evelato e c'hoarvezañ ganin divizout gantañ er porzh-c'hoari ; soñj am eus e tiskoueze doujañ ar marv ha keuziañ d'ar yaouankiz aet da goll. "A! Me ' garfe bezañ en ho lec'h," a lavare, "kaout ur vuhez klok da vevañ!" Gant souezh e kleven e gomzoù.

Da gelenner jedonieczh em boa ur sivil, an ao. Coulombier, a zo bepred kelenner er skolaj-se hiziv. Ur c'helenner mat e oa hogen ne oan ket douget d'e zanvez

ha ne gemeren ket kalz dudi en e gentelioù. E fizig hor boa an tad Agombard, erru war an oad endev, tarvoal e glopenn, un den sioul hag habask, brudet da vezañ ur sant, kelenner mat a-hend-all, a gav din, daoust ma ne dennen ket kalz frouezh eus e gentelioù. Graet en doa ar brezel kentañ ha ne oa ket bet soudardet e 1939.

Da gelenner istor hor boa an ez-kabiten Delaunay, en doa graet ivez ar brezel kentañ. Ar vicher a gelenner istor a oa deuet da vezañ gantañ ur vicher didorr kenañ : awalc'h e oa dezhañ lenn deomp hon dornlevr istor en ur arallc'heriañ anezhañ un tammig. Bep an amzer e rae addisplegoù a groge peurvuiañ gant an droienn voaz : " Eh bien! mon vieux..." Daoust da se ne oa tamm cholori en e glas. Eus ar brezel kentañ en doa degaset ur sac'had eñvorennoù a groge da zibunañ pa verze e oa hon evezh war-nes skuizhañ. Ur c'honter mat e oa, ma n'oa ket un istorour sirius ha, feiz, muioc'h a vlaz a gavemp gant e desteni diwar-benn darvoudoù tost deomp eget e displegadennoù gouiziek ar saverion dornlevrioù.

Gant an tad Geschwind avat e tremenemp ar pep brasañ eus hon amzer. Kavout a ra din e oa aotreeg war ar brederouriezh hogen kelenn a rae deomp al lennegezh dre vras, latin, gresianeg ha galleg. War a seblant e oa an tad Geschwind diskennad un tiegezh elzasat deuet d'ober e annez e Breizh war-lerc'h ar brezel gall-prusiat. Marvet e oa e dad digantañ en ur gwallzarvoud pa oa c'hoazh ur bugel anezhañ hag emzivad e oa chomet abred tre. D'ar marc m'en anavezis en devoa 35 bloaz pe war-dro ; bez e oa anezhañ un den hirvoan, treut eskern zoken, strizh ha kas-

tiz e zremm, rouez e vlev, daoulagad krak en e benn avat. Kelenner e oa a ouenn, distrob hag aezet e gaoz, prest da gomz hep skuizhañ epad eurvezhioù, oc'h hejañ e reolenn a-wechoù da reiñ ton d'e zispleg pe o sunañ pastilhez da ziraouliañ e vouezh. E gwirionez e oan douget awalc'h da grediñ e kave muioc'h a levez e pleustriañ war e vicher a gelenner eget o seveniñ e gefridi. a veleg, bout ma oa anezhañ ur c'helenner diseurt, gouestoc'h da brezeg eget da gelenn, a gredan. Evitañ da vezañ desket bras ha kizidik meurbet ouzh an arzoù, pergen hini al lennegezh - pleustriñ a rae war ar varzhoniezh ha gouezet em eus da c'houde en doa tapet ur priz evit un dastumad gwerzennoù en devoa savet - e rae diouer dezhañ dre vras an anaoudegezhioù kalvezel diwar-benn yezhadur ha pluenouriezh o defe roet ur stern start d'e gentelioù ; studioù a brederouriezh en devoa graet da gentañ ha barn a rae ar skridoù gant e anien, diouzh ma tizhent un elfenn bennak eus e bersonelezh, en abeg d'o danvez, kentoc'h eget diouzh ur savboent gouezoniell rik a zo hini istorourion al lennegezh hag a zo talvoudus ha rekiz zoken da neb a gar tapout ur poelladur ergorek ha pervezh eus un oberenn lennegel bennak. Evel-se eta ne gav ket din e kreskis kalz va gouiziegezh epad ar bloavezh skol a dremenis o selaou marvailhoù helavar ar c'helenner-mañ. Soñj a zeu din zoken ne veze ket plaenget a-wechoù ouzhpenn div werzenn c'hresianek e korf un eurvezh bennak : ar peurrest eus an amzer a oa gouestlet da addisplegoù liesseurt a denne a nes - pe a bell - da zavez ar skrid e oad o plaenaat rak barrek da sabatuiñ e oa an tad Geschwind da astenn e gaoz war-du testennoù dic'hor-

toz.

O soñjal hiziv e tro-spered va c'helenner kozh en em c'houlennan a-wechoù hag-eñ n'eus ket er c'helenner lennegezh - pe brederouriezh - en deus dibabet a youl gaer e c'halvedigezh danvez ur skrivagner, da lavarout eo un den en deus ezhomm en em ziskuliañ dirak ur 'foran' bennak, a rank tec'hout diouzh e zigenvez, dont e darempred gant e nesañ ha bezañ karet gantañ. Seurt perzh a oa anat en tad Geschwind a glaske hoalañ ha dedennañ e skolidi, derc'hel anezho dindan gazel-ge koulz lavaret ken e teue dezhañ mouzhañ pa soñje en devoa c'hwitet. Gant c'hwervoni e rebeche ouzhip hon digarantez en e geñver. Din-me a oa akoursset da ober un enebour eus kement hini a oa lodek en ur veli a argarzh e oa ar youl-se da vézañ deuet mat deomp un dro bepred nevezet da souezhiñ.

A-wechoù eta e c'hoarveze gant an tad Geschwind huñvreal dirazomp diwar-benn ar vuhez en dije gallet dibab ma n'en dije ket fellet dezhañ heuliañ e c'halvedigezh. Un den ankeniet ha morc'hedet e oa, evel maz eo aliesik an arzourion hag ar genedourion, ha koun am eus en em aterse un drovezh dirazomp a-zivout kudennoù an dreistvuhez ; ne ouied ket kalz tra diogel diwar o fenn, a lavare ; daoust ha bez e oa er baradoz levenezioù evit karourion ar gened ? Ar baradoz, en amzer-se, a seblante din bezañ pell awalc'h hag anzav a ran ne soñje ket din e oa mallus respont d'ar goulenn-se.

Rak ur c'henedour a oa anezhañ hag a brize ar gaerded e pep stumm, er stumm lennegel dreist-holl

eveljust, hep bezañ avat ur c'henedour rik : bez e oa anezhañ, egiz m'em eus lavaret, unan eus an arzourion -se ha na c'hellont bezañ dudiet a-benn ar fin nemet gant an oberennoù a gav un heklebennak en o fersonelezh (1). Un den a faltazi hag a drivli e oa va c'helenner, a gredan, ha n'eo ket souezh eta ma tomme muioc'h ouzh skrivagnerion c'hallek a seurt gant Racine eget ouzh Corneille, lakaomp. Ar garantez, war e veno, ne c'helle bezañ nemet dall ha diboell. Evit an hevelep abeg e oa dedennet gant Rousseau, petra bennak ma ne glote tamm ebet manozioù ar skrivagner-mañ gant e re. Ha se a c'hellan kompren ivez. N'eo ket bet Rousseau nepred ur gwir zispac'her a ouenn, dezhañ paliou pleustrek resis (2). E drivlierezh avat a oa romantel rik hag a glote awalc'h gant hini ar c'helenner-mañ. Ar memes tech a ziskleir perak e touge kalz bri d'un oberenn romantel all : "Le grand Meaulne" gant Alain Fournier en doa lakaet ac'hanomp da lenn. Soñjet em eus a-wechoù ne oa ket fur eus perzh hor c'helenner broudañ evel henn hor faltazi d'un oad m'eur troet awalc'h da gantren e bed an huñvre hogen maz eo kontamm seurt lennegezh ne c'hell ober droug nemet d'ar re o deus anezhañ en o gwad endev.

Ret eo din bremañ lavarout ne oa al lennegezh evit an tad Geschwind nemet unan eus an arzoù

(1) Ur c'henedour rik a drofe buan d'ur gwir robod. N'eo ket bet dedennet kalz, gwir eo, gant ar varzhoniezh a ra gant kealioù rik evel Mallarmé pe Valéry e Bro-C'hall, pe zoken Kerverziou e Breizh, daoust ma anzavan o deus savet ar varzhed-se pennoberannoù.

(2) Pourchaset en deus moarvat ur reizhiad meizadoù a ser-vijas da ziskar brizh-kravez ar roue-Doue e Bro-C'hall hogen e veizadur eus ar bobl a zo difetis krenn ha n'en doa c'hoant ebet da eilpennañ kevredigezh hengounel Bro-C'hall.

e oa gouest da dañva : ar sonerezh a roe dezhañ koment a levenez ha marteze muioc'h. Itiket e oa dezhañ e gwiri-  
onez. Bodañ a rae e skolidi ebarzh "Akademiezhoù bihan"  
egiz ma lavare, a-benn o lakaat da selaou pladennoù ;  
gant ar brasañ emouestl e selaoue e unan, kuzh e zremm  
etre bozioù e zacuarn egiz pa vije bet o pediñ ha gour-  
savet d'un usved bennak. Seniñ a rae ivez ograou ha kement  
a zudi a gave neuze ma save divi a-grenn diwar e vank e  
diwezh an abadenn.

Bremañ avat e rankan merkañ ne dizhas  
ket an tad Geschwind va lakaat da dommañ da vat ouzh ar  
sonerezh a chomas evidon d'ar c'houlz-se un arz dreist  
d'am intent. Petra bennak ma vezen plijet gant an tonioù  
e oan re zic'houzvez eus diazezoù kalvezel an arz-se evit  
gellout meizañ ervat ar gened anezhañ. Ne zeuen ket tre  
er pennadoù sonerezh ambeze tro da glevout hag abarzh  
pell e tec'he va evezh diouto.

Daoust da gement-se holl, din bezañ  
ur skoliad mat ha deuet mat d'am c'helenner, evidon da  
brizout ervat ar striv a lakae da zigeriñ hor spredoù  
ne voen ket biskoazh evit en em stagañ kalz ouzh an tad  
Geschwind. Me ' gav din e voe kiriek d'an dra-se menozioù  
politikel hemañ a oa diforc'h krenn diouzh ar re a c'hel-  
len kaout d'an ampoent. Krog e oan eveljust da emskiantañ  
va broadelezh hogen va emdroadur ne oa ket deuet da benn  
c'hoazh e deroù ar bloaz-skol hag en abeg d'e venozioù  
eus ar gostezenn dehoù gall eo en em santen dispartiet  
dioutañ. Alies e c'hoarveze gant an tad Geschwind komz

diwar-benn politikerezh ha kudennoù kenstag ouzh politi-  
kerezh ; "komz", e gwir, n'eo ket ar ger dik ha moarvat  
ar ger "unangomz" a zerefe gwell rak ne glaske ket an tad  
Geschwind ober bruderezh na kendrec'hiñ ac'hanomp e nep  
doare ; e ratozh oa hepken diskuliañ e venozioù evel ma  
tiskulie e drivliadoù, hep adsoñj ebet emichañs, ha didro  
kaer. Marteze ivez e kave dezhañ e oamp holl mui pe vui  
a-du gantañ, ken skiantek e seblante dezhañ e oa e veno-  
zioù. Ur roueelour gall lennet gantañ skridoù Maurras  
a oa eus hor c'helenner. A-se ne c'helle ket gouzañv ar  
ger "demokratelezh" ha pezh a chife anezhañ pa oa anv  
eus ar brezel e oa al lugan "kroaziadeg an demokratelezh-  
ioù". Pouezañ a rae war an dale a oa bet etre embannoù  
brezel an div "zemokratelezh" evit reiñ da gompren ne oa  
ket an emglev eus ar gwellañ etrezo. Kas en doa e gwirio-  
nez ouzh ar "gwerinrenerezh" ha ne vanke ket un dro da  
vurutellañ ar mennad anezhañ, dre verkañ, da skouer, ne  
oa bet graet poblvouezhiadeg ebet pa oa bet kont a ziskl-  
eriañ ar brezel d'an Alamanned ; den eta ne soñje goulenn  
ali ar bobl evit an aferioù sirius (1). Ar rouelerion  
c'hall ne oant ket distank endro din d'ar c'houlz-se ha  
ne daolen ket kement-se a evezh ouzh komzoù va c'helenner  
a denne evidon d'un diskan anavezet. Tro pe dro avat e  
vezen feuket. Da skouer, p'en em c'houlenne dirazon ha ne  
ve ket emsav, evit mad ar stad, bac'hañ en arak renerion  
ar strolladoù dispac'hel. Gwir eo e oa brezel Spagn o pa-  
-----  
(1) An eneberezh etre unrenegarourion ha gwerinrenegarourion  
a zo diazezet war estreget ur stumm-gouarn. Ar "bobl" e  
Rusia n'he doa perzh ebet en aozadur ar Raktres, da skouer.  
A-se n'oa ket un "demokratelezh" kennebeut.

ouez echuiñ ha gouzout a reer n'o doa ket diskouezet an div gostezenn o doa en em gannet er vro-se kalz a zamantiz an eil e-keñver eben. Damveizañ a raen zoken d'ar mare-se ne vefe mui harz ebet da vac'homerezh ar stad adal ma vefe lamet pep frankiz vrudañ digant ar geodedourion. Soñj am boa neuze eus ar prosezou a oa bet graet da zDe-beauvais ha Mordrel.

Menoziou strizh kenañ en devoa ivez va c'helenner diwar-benn deskadurezh ar bobl ha kement-se ivez a zispilje din. Gouez d'an tad Geschwind e oa didalvez krenn an deskadurezh kentañ derez dre ma ne oa ket gouest da stummañ spered-barn ar vugale; choukañ anaoudegezhioù ebarzh empenn ar vugale ne raed ken er skolioù kentañ derez diazezet gant an trede Republik gall; ar 'bobl' ne oa ket evurusoc'h abaoe ma oa bet savet ar skolioù-se. Hegaset e oan gant seurt komzoù rak damgompren a raen ne oa ket lakaet mat ar gudenn gant va c'helenner: an deskadurezh kentañ derez a roe tu da vihanañ da hini pe hini eus bugale ar werin da gas o studi pelloc'h; aotren a rae neveziañ ar gevredigezh; ret e oa a-hend-all en ur sevenadur war ziorren. Muioc'h eget nikun e ouien pezh a c'helled tamall d'an deskadurezh kentañ derez fardet gant ar stad c'hall e Breizh. Met anat e oa din ivez he doa roet ur chañs din - er gwashañ degouezhioù a gement a vefe evit ur Breizhad, gwir eo - da c'hoari ur roll er gevredigezh. Moarvat e ouien e oa va zud kozh hag int dizek koulz tud ha n'eus forzh peseurt kañfard tapet gantañ un tamm 'santifikad' bennak hogen gouzout a raen ivez e oa anezho tud dizifenn en ur gevredigezh ha na oa

ket bet aozet ganto nag evito.

A-hend-all e oan heuget meur a wech gant an dispriz a ziskoueze kaout va c'helenner ouzh an denelezh en he fed, ouzh an dud dre vras, a oa direizh alies d'am soñj hag a arouezie dreist-holl emlorc'h ar barnier. Moarvat ez eo gwall stank ar sottoni hag al laoskentez, ar c'hrizder hag ar fallagriezh e-touez an darn-vuiañ eus an dud, ha tu a zo d'o zamall atav hogen ouzh henn ober e ankouar ez eo ar stad hag ar gevredigezh kiriek evit darn da sioù ha da bec'hedoù an dud ha nac'hañ seurt kiriegezh a vefe ivez kendaoniñ pep politikerezh a dennfe end-eeun da wellaat ar stad hag ar gevredigezh. Sed pezh a veze graet koulskoude en amzer-se e kelc'hia-durioù ar gostezenn dehoù gall a soñje ne oa ket dav kempenn ur gevredigezh a zisoc'hfe ne vern penaos d'an direizhded hag a oa dibareüs koulz lavaret. Hava c'helenner ne oa egwirionez nemet heklever ar c'helo'h-iadurioù-se (1). Meur a berzh fall - d'am sell-me - en doa eta an tad Geschwind (an hini gwaashañ o vezañ an emlorc'h) ha kement-se a vire outañ a gaout evel beleg al levezon a vefe deuet dezhañ m'en defe gouezet marzout e sioù ha diwall diouto. Poan a gemere koulskoude gant e gentelioù kravez a rae bep yaou mintin hag a chome difrouezh, a gredan, dre ma troent alies da brezegennoù pe zisplegadennoù hanter buhezal hanter lennegel diwar-benn testennoù hollek evel ar garantez, ar marv, hep darempred (1) Ivez n'eo ket yac'hus da unan en em c'horren a-us d'an denelezh ha kendaoniñ anezhi a-vloc'h rak emeur war var da chom hep marzout talvoudegezh hini pe hini pe c'hoazh da chom dall war hor mankoù hag hor sioù hon unan.

war-eeun gant ar relijion. Eno c'hoazh e pare savboentoù politikel ha na glotent ket gant va re. An den a renkad en em ziskoueze a-dreuz ar beleg. Kement-se a laka anat pegen diaes eo roll an Iliz en un amzer a zistabilded kevredigezhel evel hon hini.

A-benn ar fin e voe nac'hus dreist-holl levezon ar c'helenner-mañ a brizen en abeg d'e entan, d'e spered ha d'e zeskadurezh. N'oa ket evit mirout a zisteurel gant nerzh e venozioù eus ar gostezenn dehoù gall ha na glotent tamm ebet gant va buhezadur betek neuze. Evel ma oa brogarour gall a-hend-all - perzh arbennik paotred ar gostezenn dehoù gall ez eo ar vrogarouriezh, gouez dezho o unan - ne c'hellen nemet pellaat muioc'h dioutañ er mizvezhioù war-lerc'h dre ma teuen d'en em stagañ da vat ouzh Breizh.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 8

Niverus awalc'h e oamp er c'hentañ klas E e-lec'h e oa degouezhet skolidi a bep lec'h, repuidi a-wechoù, evel ur c'henskoliad kozh din e Cambrai, Dekasteker e anv. Darn anezho a oa Gallaoued, unan zoken - n'em eus ket soñj eus e anv - a zeue eus kreisteiz Bro-C'hall. A-benn ar fin e oa mesket awalc'h ar c'helc'h-iadur a oa ouzh va gronnañ rak, gant an tenn ma oa kavout

plas er c'helenndioù all o doa plantet kerent zo o bugale e Sant-Marzhin a-benn kaout an dizober diouto un tu ben-nak. Darn eus ar re-se, koshoc'hik marteze eget o c'henskolidi, a glaske ober o fabored dirazo ha diskouez dezho ne oant ket mui bugale. Kement-se a zo boutin awalc'h er skolaioù, dreist-holl e-touez skolidi lojet a vez o vevañ a-gevret bepred hag o rannañ o frederioù kenetrezo a-hed marvailhoù diziwezh. Unan avat am boa kavet dizoare, a gonte da neb a gare e oa ur praktik d'an tiez-kloz hag e oa c'hoarvezet gantañ kejout gant e dad ebarzh unan eus an tiez-se. Unan all, un hanter inosant a-hend-all, a oa aet ivez da bremañ e skiant eno (ur skoliad diavaez e oa hemañ) ha kañfarded all a c'hoarzh leizh o c'hof pa glevant anezhañ o tezevell e 'brouiadoù' war ar porzh-c'hoari.

Doareoù all a oa eveljust da ziskouez e oad ur gwaz, ha dieub, doareoù muioc'h dinoazh a-hend-all : butuniñ. Se ' oa difennet ivez. Ha bec'h eta d'ar sigaretinier, e kuzh ouzh an holl, er privezioù (1)! Devezhioù zo e oan douget da rannañ menozioù va c'helenner diwar-benn sotonì an dud.

Albac'henoù a servije da re all da brouiñ o doa ur bersonelezh hag e oant dishual. Dont a raed da vezañ itik da ganerion zo a veze klevet er skin-

(1) Klevet em eus paotred zo o lakaat ar butun war ar memes pazenn hag ... ar merc'hed. Neb na brize ket ar butun ne c'helle ket bezañ ur gwaz gwirion. En hor stuzegezh arnevez ez eo deuet ar butun da vezañ un tu d'ar grennarded da ziskouez o gourelezh (ha d'ar merc'hed da ziskouez ez int par d'ar baotred emichañs ha da zegas ar re-mañ d'ober outo evel ouzh kamaladed).

gomz c'hall (en amzer-se ne oa ket deuet giz ar blev hir evit ar grennarded : ne oa skinwel ebet, 'keta!'). Unan eus va c'hamaladed, an hini a oa genidik eus kreisteiz Bro-C'hall end-eeun, ur paotr seder ha jentil a-hend-all, a rae un doare doue eus Maurice Chevalier, ar c'haner gall, a oa neuze e barr e vrud, hag a oa o paouez ijinañ ar ganaouenn ken brogar a reas berzh e deroù 1940 :

Et tout ça, ça fait  
d'excellents Français,  
d'excellents soldats  
qui marchent-t- au pas...

(egiz pa vije pennañ micher ar soudard moarvat bale war-bouez e gammed) Va c'hreisteizad gall eta a veze bepred o kanmeuliñ e zen-meur, ma sellen outañ gant souezh ha truez, oc'h en em c'houlenn penaos e c'hell led bezañ nay awalc'h evit reiñ ken bras pouez d'ur furlukin. Ret eo krediñ evelato e klote e awen gant tro-spered kalz Gallaoued d'an ampoent rak estreget an estlammer-se en devoa ar saver kanaouennoù-mañ (1).

Arabat e vefe krediñ e oa va holl gamaladed heñvel ouzh ar re emañ o paouez menegiñ. An darn-vuiañ, eveljust, a oa sirius tre ; reoù zo a yeas da veleg pe da lean ; hini pe hini a oa a-du gant Breizh met eus ar re-se em bo tro da gomz e-lec'h-all.

Ne vern penaos, euidon-me ne oan ket trubuilhet gant albac'henoù a seurt gant ar re am eus nevez deskrivet. Va c'hemm oad ne c'hoarvezas nemet war dachenn ar spered hag ar menozioù. Er bloaz-se en em stumas da vat va galvedigezh ha va zonkadur peogwir e krogis  
-----  
(1) Klevout a ris e oa bet lazhet an estlammer-se eus Maurice Chevalier a-c'houdevezh, e-kerzh ar brezel.

neuze da zeskiñ ar yezh. Hogen dre vras e voe va buhez spered birvidik er bloaz-se. Prenañ ha lenn a ris nousepet klasik gallek. Lakaat a rae va c'henskolidi diavaez da brezañ oberennoù skrivagnerion c'hallek a oa neuze diouzh ar c'hiz. Degadoù ha degadoù anezho a lennis epad va c'hentañ klas. War va c'harnedoù e adkavan an anvioù anezho : Louis Hemon ('Maria Chapdelaine'), F. Mauriac (daoust ma oa katolik ne oa ket erbedet gant hor c'hellennerion dre ma c'helle strafuilhañ ar baotred yaouank, a-hervez. E gentañ romantoù am boa lennet d'ar mare-se : 'Préséances', 'Le fleuve de feu', 'Le baiser au lépreux', 'La chair et le sang', 'Genitrix') ; Estaunié (kemeret em boa notennoù diwar e romant 'Les choses voient') ; Barbusse (e romant 'Le feu' diwar-benn ar brezel kentañ a oa c'hoazh diouzh ar c'hiz) ; Duhamel (brud en doa atav e 'Scènes de la vie future') ; Henry Bordeaux (un toullad mat a romantoù hemañ am boa lennet) ; Barrès (embannour ar vroadelouriezh c'hall ; e romant 'Colette Baudoche' am boa kavet dister) ; Paul Bourget (kalz eus romantoù hennezh am boa prenet ivez) ; ha skrivagnerion all evel Daniel-Rops, Mabo, Brada, Boylesve, Chéreau, Daudet, Billy ha me 'oar-me. Hogen n'em boa lennet skrid ebet eus Bernanos (klevet em boa lavarout gant beleion e oa c'hwezhet ha diwirion e 'Journal d'un curé de campagne') ; Eus Malraux n'em boa klevet anv ebet.

Prenet em boa ivez un rummad teskadoù barzhoniezh c'hallek embannet gant Lemerre ha levrioù diwar-benn istor, dreist-holl hini an dispac'h gall (Madelin ha Funck-Brentano). Ret eo ouzhpennañ un nebeut klasikoù

alamanek am boa pourchaset ivez.

E gwirionez e paouezis buan awalc'h a lenn galleg er bloavezhioù war-lerc'h daoust ma pourchasis un nebeut levrioù a varzhoniezh e fin ar bloaz hag er bloaz war-lerc'h : Valéry, Claudel, Mallarmé, talvoudoù diogel mat evel ma weler. Diwar ar mare ma stagis avat da studiañ a-zevri ar brezhoneg hag ar yezhoù keltiek all, da skrivañ ivez - rak boulc'hañ a ris va labour skrivagner kerkent ha ma ouezis disklipañ un tamm brezhoneg - n'em boe mui tamm goarebet da blediñ gant lennegezhioù estreget ar re geltiek. Eus kement-mañ em eus tennet ur gentell : ne gredan ket nemeur e c'heller kemer perzh da vat e div vuhez lennegel. Pezh a lavar rannvroelourion zo diwar-benn an dra-se a seblant din bezañ diboell a-grenn. Evel e sigur va broadelezh e vezis diouzhtu koulz lavaret e oa dav din dibab.

Un evezhiadenn all a rin. Didalvez eo klask skrivañ e galleg en hon amzer pa n'eur ket gall a ouenn o chom e Paris. Ken stank eo ar skrivagnerion c'hallek hiziv an deiz gant al ledañ-deskadurezh m'o deus mil poan da gavout ur foran bennak. Ha pa c'honzont un tammig brud zoken e vez kollet hemañ antronoz o marv o vezañ n'eo ket frammet en ur gevredigezh bennak. Piv a anavez anvioù ar skrivagnerion am eus nevez meneget e touez ar c'hallegerion zoken en hon amzer ? Dec'h koulskoude int marv.

Padal ne gav ket din e voe didalvez va lennadurioù gallek er bloaz-se rak kreñvaat a rejont ennon va doug d'al lennegezh ha reiñ nerzh d'ar c'halve-

digezh a skrivagner a oa o tiwanañ ennon d'an ampoent.

Lennadurioù all o tennañ da Vreizh a ris er bloaz-se ivez. Hogen eus ar re-se e komzin diwezhatoc'h.

\*\*\*\*\*  
 Pennad 9

Un aergelc'h diseurt a oa o ren er skolañ Sant-Marzhin er bloavezh 1939-1940 eveljust. Kalz eus ar gelennerion a oa bet soudardet ; meur a hunva a oa troet da sal-ospital. Er predva e oa bet staliet ur benveg skingomz ha selaou a raemp ar c'heleier epad merenn pe goan, dreist-holl a c'houde ma tarzhas ar brezel etre Rusianed ha Suomiiz hag a doullas kement a dud diwar-benn gwir nerzh ar Rusianed. An tad Prefed en doa aotreet deomp ivez lenn kelacuennoù. Klemm a oa avat dre ma oa re gozh ar c'helaouennoù a veze pourchaset deomp. Naon hor boa a geleier ha n'hor boa ket hor gwalc'h er c'heñver-se, pell edo.

E pep lec'h e kêr e kaved soudarded, Gallaoued eveljust hogen Saizon ivez a oa stank endro da Roazhon e-lec'h o doa savet meur a gamp war hent Redon hag unan eus hon diduamantoù e oa epad ar baleadegoù mont da arvestiñ outo gant o fasoù ruz hag o zokarnoù ront - ha klask komz saozneg outo, na petra 'ta. Repuidi eus hanternoz Ero-C'hall a oa erruet dija ha c'hoarvezout a reas ganin kejout gant ur c'henskoliad kozh eus ar skolañ

"Notre Dame" eus Cambrai, Decasteker e anv.

A-hend-all e kendalc'he ar vuhez evel er bloavezhioù ararak gant an hevelep baleadegoù enoëis endro da Roazhon, betek Sant-Gregor, Sant-Jakez, tachenn Sant-Visant (a zo dalc'het gant savadurioù hiziv), liorzh Vorpaz a oa o paouez bezañ digoret, hep darvoud e kêr, nemet douaridigezh an arc'heskob Mignen d'ar seizh a viz Du dindan barradoù glav puilh.

War-dro ar mare-se a-hend-all e oa kroget ar brezel d'en em astenn a nevez. Notet em boa kement-mañ ebarzh va deizlevr :

Disadorn 2 a viz Du 1939

Graet eo an taol. Ar Rusianed o deus aloubet bro-Suomi. Amzer o deus kemeret ; gwir eo e felle dezho diskouez o habaskted dirak daeadennoù divergont pobl Suomi (tri milion a Suomiiz a-enep da gant-tregont milion a Rusianed!) Evelato e tleje ar re-mañ bezañ klas-ket digarezioù all ha tremen hep ober ouzhimp evel pa vijemp genaouecion. Hitler en deus kavet d'e drevezañ unan hag a raio gwelloc'h berzh egetañ marteze. Brudoù a bep seurt a red e sigur ar brezel-mañ : a-hervez e vije bet savet ur gouarnamant suomiat a-du gant ar Rusianed e Rusia end-eeun. War a seblant koulskoude en em gann Suomiiz taer kenañ hag ar Rusianed a yafe d'ar brezel gant diegi..."

Keleier all a zeue deomp diwar-benn stad Polonia a oa gwasket spontus gant an Alamaned, hervez a lavared, daoust ma ne oa diskuliet netra resis war an divoud-se.

Klask a raed a-hend-all derc'hel da hengounioù an amzer beoc'h er skolaj. D'ar meurzh 5 a viz Kerzu e oa distroet ar bagad c'hoariva Thuet da Sant-Marzhin evit reiñ un abadenn evel m'o doa graet er bloaz ararak. Ar wech-mañ avat ne oa mui anezho nemet an ozhac'h hag e wreg. Displeget o doa ur pezh-c'hoari eus Courteline ha ... distaget ur brezegenn diwar-benn barzhoniezh, a oa dic'hortoz awalc'h.

Antronoz, a-benn klokaat roll an didu-amantoù, e oa erruet ur spagnad bennak da ziskouez d'ar skolidi loened gouiziek gourdonet gantañ : ur marmouz hag un tatou.

Evel-se e oa echuet evidon ar bloavezh 1939. Goude bezañ tremenet al 'lez-vachelouriezh' e oamp bet kaset d'ar gêr d'an 23 a viz Kerzu.

=====

1940

D'ar c'hentañ a viz Genver 1940 e kavan ebarzh va deizlevr un nebeut prederiadennoù diwar-benn ar brezel. Ar pezh a skoe va spered - evel hini an holl a-hend-all - e oa eveljust ar 'brezel iskis' a oa o ren d'an ampoent. N'oa ket a emgannoù, koulz lavaret. Hag en em c'houlenn a raen a-benn pegeit e c'hellfe an nerzh-lu alaman bezañ kaset da get en degouezhennoù-se.

"Ne verzer ez eus brezel nemet dre maz eo diank ar c'hafe hag ar chokolad. An 'Ouest-Eclair' a zo o tiouganañ ar peoc'h a-benn hevlene. Gwir eo, un nebeut mizioù zo e asure e oa tu da dec'hout diouzh ar brezel hag ur bern abegoù mat a zisplege da harpañ ar soñj-se. Er c'heñver-se ez eo heñvel an holl gelaouennoù. Mat e reont rak neb a ra gwall ziouganou a vez degemeret fall peurvuiañ. Me gav din e rafent koulz o chom hep diouganañ mann ebet. An istor a zegas bepred gantañ ul lodenn a zic'hortoz hag a c'hell a-wechoù eilpenañ stad an traoù. Goude-se e teuy endro ar c'helaouennoù da ziskouez e c'helle an dic'hortoz-se bezañ gortozet ha rakwellet hep poan, eveljust...

Ma pad ar brezel-mañ keit hag ar brezel kentañ (Doue ra viro) ez eus chañs e vin galvet d'al lu ur bloaz bennak war-lerc'h m'em bo tremenet ar vache-louriezh. A-benn trizek miz em bo triwec'h vloaz...

Diriaou 4 a viz Genver 1940

Kentañ baleadeg ar bloaz war an hentoù fankek. Ur wech ouzhpenn omp aet da bourmen war hent Sant-Malo, betek ti-debriñ ar 'Brohinière'. Kejet hon eus gant danvezioù soudarded ar bloavezh 1940. Gwall izil e kavan darn anezho. An holl a vez kemeret ganto da gas d'ar brezel.

Dimerc'her 10 a viz Genver 1940

Geschwind en deus adkroget gant e 'Akademiezhoù' bihan, egiz ma ra anezho. Aet on dija da hini al liverezh hag ar varzhoniezh 'barzhoniezh an tre-

mened'. Ne oamp nemet pevar ha dudius e voe an abadenn. Pa vezer niverus avat n'eus ken tamm plijadur.

Diriaou 11 a viz Genver 1940

Pourmenadenn gant Geschwind betek tuchenoù Gwenn. Neuze omp distroet dre hent Saizon. Enoe, evel boaz.

Disul 14 a viz Genver 1940

Hiziv on aet d'ar fiñvskeudenndi gant va breur, pezh am lakaas da gounañ an amzer maz aemp hon unan e Cambrai hep bezañ eveshaet gant un diwaller bennak. Gwelet hon eus 'Ne garin nemedout', ur film a santimant ordinal, (holl int heñvel) hag unan all o tegounañ brezel Iwerzhon gant un istor a garantez.

Dilun 15 a viz Genver 1940

Arvestet hon eus ouzh 'Britannicus' hiziv. Setu va barnadennoù : Néron a c'hoarie mat koulz ha Narcisse ; Agrippine ha Britannicus a oa etre ; Junie avat, gant he mouezh raouliet, a oa dister kenañ he c'hoari, ha farsus war ar marc'had rak kemeret e vije bet evit mamm-gozh Britannicus. Peadra a oa da c'hoarzhin.

Digwener 19 ha deizioù war-lerc'h

Krisoc'h-krisañ eo ar yenijenn. War ar porzhe vezan skornet, va zreid dreist-holl. Kouezhet ez eus erc'h ha chomet eo war an douar. Diwar-benn ar brezel netra da verkañ. E ser se, Geschwind a vez bepred o voutañ perzhioù mat an Alamaned, eus darn anezho atav. Eveljust ne fell ket dezhañ bezañ touellet gant ar bruderezh a-berzh -stad (dre ar c'helaouennoù, ar skingomz h.a.) a glask

sankañ menozioù zo e penn an dud. Gwall-ziskrediñ a ra war balioù brezel gwirion ar Saozon. Karout a rafe hol lakaat da grediñ n'en deus ar brezel tamm ebet ar stumm a fell da lod reiñ dezhañ. Diegi en deus da vezañ ali gant an tropell ha fellout a ra dezhañ en em zistagañ dioutañ evel-se...

Disul 21 a viz Genver 1940

Ermaeziadenn gant M.H. he deus kontet deomp istorioù diwar-benn an Iwerzhonad Patrick a zo o klask deskiñ galleg e Bruz.

A-hend-all, yenc'h-yenañ eo an amzer : - 15 d'ar beure-mañ. Rak-se ivez an tad R.\* gant kalz a vadelezh en deus aotreet deomp sevel da c'hwec'h eur hanter e-lec'h pemp eur hanter (kousk-mintin a reomp!) ha da noz e vez diskennet deomp pep a vanne gwinn tomm (lenn : dour klouar). Prederiet omp a zoare ; n'eus ket da nac'hañ.

Disul 27 a viz Genver 1940

Ermaeziadenn evel boaz. Kroget eo an diskorn : fank ha bouilhenn e pep lec'h. An tad R d'ar mintin-mañ en deus graet ur sarmon brogar gant jestroù bras diwar-benn ar brezel hag ar strivoù a zo goulennet digant pep hini en abeg dezhañ...

Diriaou lañ a viz C'hwevrer 1940

Hiziv eo bet tennet ar c'hoari-sac'h. Goude ur pennad bale omp distroet da ziv eur hanter.

(\*) An tad Raffleugeot, ur Breizhad genidik eus Gasilia e-kichen Redon, a voe e penn ar skolañ e-doug an daou vloaz diwezhañ a dremenis er skolañ.

Graet eo bet an dennadeg evel boaz : Geschwind an hini eo a rae ar fentigelloù e ser al lodennoù hag hañval eo gannin e oa an hini kentañ o c'hoarzhin war o divoud... A-benn hon diduellañ e voe roet deomp da c'houde un abadenn kaniri ha c'horiva, fiñvskeudennerezh evit echuiñ : "Kammadro an Ankoù" a oa farsus, ken diwirheñvel e oa.

Disadorn 3 a viz C'hwevrer 1940

Pevar devezh ehan. N'eo ket kalz.

Disul ha deizioù war-lerc'h

War-bouez lenn e teuan da enoeiñ e Sant-Jermen. Hast am eus e teufe an hañv. Aozañ a ran div gaozeadenn a zistagin a-benn ma vo krog ar skol endro. A-hend-all, keloù ebet diwar-benn ar brezel er c'hazetennoù a veneg Beljik ha Balkanioù er mare-mañ.

Diriaou 8 a viz C'hwevrer 1940

Kerzhet hon eus gant Geschwind betek Sant-Gregor. Er vered em eus kavet ur bez gant ar bloaziadoù : 1734-1833.

Enoeiñ a reer. Tamm keloù ebet eus ar brezel koulz lavaret. Ne ouzer ez eus anezhañ nemet an arbenn ag ar soudarded saoz ha gall a zo staliet endro da Roazhon. Ne vern, an holl a venn diouganañ ar pezh a zo o vont da c'hoarvezout ha klevout a reer brozennoù a bep seurt : da skouer, bombezadeg Roazhon a vefe bet komennet e skignlec'h Stuttgart.

Dimerc'her 14 a viz C'hwevrer 1940

Kouezhet ez eus erc'h adarre met teuzet eo kerkont. D'ar

beure-mañ, e-lec'h ober e gentel, evel ma c'hoarvez alies gantañ, Geschwind en deus rondonet a nevez diwar-benn an diouganou politikel a anaveze hag a rakwel, eveljust, distro ar roue war d'ron Bro-C'hall war-lerc'h ar brezel "e-lec'h ar c'hwec'h-kant breubaour a zo o tivian hag o korvoiñ Bro-C'hall". E berr gomzou, gant ar roue e vo ar baradoz war an douar. D'ar mare-se moarvat e vo adsavet ar reizhded hag anzavet dellidoù Geschwind. War e veno ez eo hor gre-ni gwashoc'h eget ar re washañ ha kement-se en abeg d'ar Republik ; soñjal a ra ivez ez eo an holl dud genaouecion, dreist-holl e-touez ar werin. Komz a ra, da skouer, eus ar "gouerion ha na oant ket desket awalc'h gwechall evit poellata a-dreuz..."

Diriaou 15 a viz C'hwevrer 1940

Goude bezañ komzet diwar-benn ar garantez endeus prezeget Geschwind diwar-benn Tereza Neumann. En endervezh, baleadeg gant Geschwind a seblante bezañ imoret fall betek ar Prevalez.

Digwener 18 a viz C'hwevrer 1940

Seitek vloaz am eus bet dec'h. Ere'h a zo kouezhet adarre hogen n'eo ket chomet pelloc'h eget ar wech kentañ. Ar glav a zo deuet war-c'horre ha troet eo ar porzh da fank penn-da-benn. Pebezh amzer !

Nonoch a zo aet sod gant e reoliadur.

Berzet e vo mont d'ar fiñvskeudenni pa vo glav hiviziken.

Dilun 19 a viz C'hwevrer 1940

War a seblant eo krog Suomiiz da skuizhañ.

Ar c'hontrol a vije souezhus. Evelato n'eo ket gwall varrek ar Rusianed pa n'int ket deuet a-benn abretoc'h eus ar bobl vihan-mañ.

Diriaou 22 a viz C'hwevrer 1940

Emaon o vont d'ober 'gourdonerezh soudard'. Dres an oad rekiz am eus : seitek vloaz. Sabatuet on o welout emañ an holl a-du gant al lu pa oant a-enep n'eus ket keit all. Ar gourdoner a zo e soñj degas ur vindrailherez da ziaozañ. Marteze ez aimp d'an tenna ha dudius awalc'h e vo moarvat.

Digwener 23 a viz C'hwevrer 1940

Henozh pleustradeg emziwall. Diduellus eo bet ; ar bouderezed a hañval bezañ gwall gañvus.

Diriaou 29 a viz C'hwevrer 1940

Geschwind a ra un doare sarmonioù epad e glas a-zivout ar marv, ar pec'hed h.a. Daoust d'e youl -vat ne gav ket din e ra kalz berzh. E stumm da gelenn ar relijion a zisplij krenn da lod. Ne oar ket ouzh piv e vez o komz.

Diriaou 2 a viz Meurzh 1940

Krog eo ar strishadurioù : war an alkohol, ar bara, an eoul-maen. Daoust da se e konter deomp ez eur mestr war ar mor hag e c'heller beajiñ warnañ egiz ma karer. Al listri-spluj alaman a ra muloc'h a freuzh eget a ziskulier deomp marteze, petra bennak maz eus bet kaset 50 diouto d'ar strad hervez a voul ar c'hazetennoù.

War a seblant e fell d'ar Rusianed echuiñ ganti e Suomi. Al lu suomiat ne c'hello ken dere'hel pell

'm eus aon.

Diriaou 7 a viz Meurzh 1940

Kerzherezh adarre gant Geschwind war hent Filger hag hini Menez Sant-Mikael, o tremen dre ar c'hoad ...

C'hoant am eus prenañ levrioù da zeskiñ brezhoneg. Pellzo emañ ar soñj-se war va spered.

Abaoe ma wel e kred darn embann ez int Breizhiz e teu Lejeune da anzav ivez ez eo Breizhad.

Disul 10 a viz Meurzh 1940

O welout ur match en T.A. on bet. Enoet em eus. Plomet en deus prometet pourchas din barzhonegoù o tennañ da Vreizh. Hemañ atav n'eo ket evel ar c'henaou-eion-se ha na gomprenont netra e kudennoù Breizh. Graet en deus din un displegadenn dedennus diwar-benn ar spered breizhat ha keltiek.

Dimerc'her 13 a viz Meurzh 1940

Nevez klevet hon eus e oa bet sinet ar peoc'h etre Suomiiz ha Rusianed. War a gonter e oa prest Daladier da gas du-hont ur bezen-ergerzh a 50.000 soudard, ouzhpenn pourveziou-brezel. Bezet pe vezet, gwall zister eo nerzh-lu ar Rusianed p'o deus ranket kodianañ gant ur bobl ken bihan.

Diriaou 14 a viz Meurzh 1940

War urzh brokus bras Nonoch a garfe di-huediñ e skolidi gaezh omp bet kaset da welout ar film... 'Thérèse Martin' a oa dudius a-hend-all. Sinema mat ha sinema fall a zo, na petra 'ta !

Disul 17 a viz Meurzh 1940

Bet omp o pourmen a-hed ar ganol. Hir em eus kavet an amzer. O tistreiñ endeus roet din Plomet ul levr diwar-benn Kalloc'h a oa ur gwir Vreizhad hag ur barzh en deus savet e obereñnoù e brezhoneg ; war an digarez-se o defe nebeutoc'h a dalvoudegezh, a lavar din so-dion zo n'anavezont netra diwar-benn Breizh hag ar brezhoneg. N'eus forzh penaos e talvez ar brezhoneg muic'h eget al luc'haj a gomzer e pep lec'h e Bro-C'hall hiziv an deiz...

Dimerc'her 20 a viz Meurzh 1940

Ehan evit teir sizhun, gant ur brezegenn am eus bepred da ober a-benn ma tigo ar skol endro. Degaset em eus ganin ur bern levrioù skol ha na sellin ket outo emichañs, ha romantoù ha levrioù brezhoneg o deus muic'h a chañs da vezañ lennet pe studiet. Marteze avat e vo diaesoc'h eget a soñje din komz brezhoneg ouzh va zad ha dreist-holl va mamm a gav dezhi ne oar ket mat brezhoneg daoust ma oar mat tre e gwirionez. Dinerzhet e vez an emskiant vreizhat gant an harlu, 'm eus aon. Ar gwellañ oveljust a vefe bevañ e goueled Breizh.

Dimerc'her 21 a viz Meurzh 1940

Stroll-ministred Daladier a zo bet diskaret ; abaoe daou vloaz m'edo en e sav e teued da grediñ ne gredfe den stekiñ outañ. En dro-mañ avat, war a hañval, ne zispleg ket ar gannaded a fougas da leuriadiñ ar bobl monnez an darn-vuiañ eus an dud e Bro-C'hall tamm ebet. Diboc'h eo seurt distabilded en amzer beoc'h ; seul vuic'h eo en amzer vrezel. Moarvat evelato ez eo kement-se

un arouez eus emgav fall ar politikerezh diavaez evit ar gouarnamant gall. Gwall-ziougan a zo en emwel ar 'Brenner' (1) hag aferioù Norge a ziskouez ivez dre vras ned a ket an traoù endro egiz ma karfe ar Re Unanet, daoust d'ar pezh a gouter deomp a-hend-all...

\*\*\*\*\*

P e n n a d 10

D'an 22 a viz Meurzh em boa skrivet ebarzh va deizlevr un displegadenn hir awalc'h diwar-benn darvoudoù politikel ar mare, dreist-holl savidigezh ar gouarnamant gall nevez dindan renadurezh Paul Reynaud, netra gwriziennel eveljust, o vezañ ma n'em boa keleier n'eus forzh penaos nemet diwar lenn ar c'hazetennoù gall a zegouezhe du-mañ ha dreist-holl an 'Ouest-Eclair', na petra 'ta. Doujañ a raed neuze'n en em ledfe ar brezel er Balkanioù. Ur mavdiern hungarat a oa deuet d'ober ur gwel da renerion an Italia fagat hag en em c'houlenn a a raed ivez gant piv ez afe a-du Bro-Roumania. Spiañ a rae ar re Unanet d'ar mare-se e vije alcubet Hungaria gant an Alamaned hag o kaout soñj eus an diaesterioù a oa savet etre Hitler ha Mussolini d'ar mare m'en doa staget hennezh e vro gozh ouzh ar 'Reich' e klaskent krediñ e oa deuet Hungariz da c'houlenn skoazell an Italianed kenkas

(1) E-kerzh emwel ar Brenner e oa bet divizet emzalc'h Italia er mizioù da zont, goude trec'h an Alamaned er c'hornog peurgetket. Eus kemont-se ne ouieomp netra avat.

e vefe taget o bro gant al luoez alaman. D'an holl e oa anat d'ar c'houlz-se e felle da Hitler astenn e graban - e-keñver armerzh da vihanañ - war Hungaria ha Roumania. Setu e tlee Rusia en em gavout neuze en arbenn dezhañ. Kontañ a raed ivez war enebiezh Italia ha Rusia evit rediañ Hitler da zibab etre e gevredad eus ar c'hreisteiz hag hini ar Reter. Goanagiñ a raed zoken e teufe Italia hec'h unan war sikour ar Re Unanet ma rafent berzh mui pe vui e-kerzh ar mizioù war-lerc'h. E fed ne zeuas hini eus ar goanagoù-se da wir, war verr dermen atav (1)...

Seurt prederadennoù avat a oa un tam-mig 'akademek' evidon rak e gwirionez e oan chalet kalz muioc'h d'ar mare-se gant emdroadur va mennozioù. Tamm ha tamm, diouzhin va unan, en un amzer ma ne oa Emsav ebet ken na bruderezh broadel breizhat e paouezen a vezañ gall evit dibab ar vroadelezh vrezhon. Se avat ne c'hoarvezas ket hep marc'hed nag arvar na poan spered dre m'en em gaven dispartiet ha disrannet diouzh an holl, ha diouzh va zud da gentañ penn, o sentif ouzh va freder. D'ar 25 a viz Meurzh 1940 e kavan ebarzh va deizlevr, evit ar wech kentañ, un displegadenn hir awalc'h - pemzek pajennad eus va deizlevr - e ser kudennoù Breizh evel m'en em ziskouezent din d'an ampoent. Darn eus al linennadoù -se a c'hellan menegiñ amañ :

"...Deverrañ a ran va amzer o studiañ

(1) Va zud ne zougent ket kalz bri d'an Italianed, evel an darn-vuiañ eus an dud du-mañ en amzer-se, hag eus kemont-se e kavan un heklev ebarzh va deizlevr.

ar brezhoneg hogen va unan on o kemer dudi ennañ pe e Breizh dre vras hag e kement a zo breizhat ; Breizhiz int moarvat, lorc'h a zo enno gant an dra-se en ur stumm bennak ha ne fell ket dezho e vefe graet goap ouzh Breizh met a-hend-all ne verzer ket nemeur ez int Breizhiz : o yezh, al lennegezh a c'hellfe kaout, hengounioù ha perzhioù dibar ar sevenadur breizhat n'o deus talvoudegezh ebet evito. Gouzout a reont koulskoude ar brezhoneg ha ne garfent ket e ve tamallet an dra-se dezho ; yezh o c'havell eo hag he c'homz a reont c'hoazh gant plijadur n'o devez tro hogen n'o deus ket kalz istim eviti. Kement-se a c'heller kompren o vezañ m'eo bet berzet outo komz brezhoneg er skol ha m'o deus ranket bevañ bepred er-maez eus Breizh ... Lavarout a reer ez eer d'ar brezel evit difeñn pezh o deus legadet deomp hon tadoù, o hengounioù, o sevenadur, douar ar vro ha me 'oar-me, evel ma skriver en dornlevrioù a vuhezouriezh evit ar skolioù kentañ-derezh ; petra o devo ar Vretoned da zifenn er brezel-mañ avat mo re-dier e stumm pe stumm da zilezel ar pezh o deus legadet dezho o gourdadoù, o yezh hag o hengounioù ? Estrenion a zifennint avat peogwir n'o devo bet o yezh hag o sevenadur gwir a-berzh-stad ebet er Frañs..."

Ne dalv ket ar boan menegiñ penn-da-benn eveljust ar pennad hir-mañ e-lec'h e tiskouezan evelato bezañ komprenet savboent ar re a anven an "emrenerion" : dibabet o doa etre Breizh ha Bro-C'hall peogwir e soñje dezho n'oa ket tu da chom hep dibab a-benn ar fin. Hogen prest e oan-me d'ober kemend-all diouzh ret hag eno emañ, a gav din alc'hwez an emdroadur a reas ac'hanon ur

broadelour breizhat a-benn ar fin ; d'ar c'houlz-se avat n'oa ket gouest d'ober da vat hevelep dibab ha klask a raen digarezioù a bep seurt da chom hep mont a-du krenn gant an emrenerion rak spontet e oan gant ar soñj e c'hellfen emezelañ en un emsav a oa dister, dic'halloud, flas-tret a-grenn d'ar mare-se peogwir e oa barnet d'ar marv ar renerion anezhañ, brudet fall a-hend-all peogwir e veze graet tamalloù diwir a bep seurt d'ar vroadelourion en amzer-se. Kement-se ne vire ket ouzhin eveljust a zifenn anezho a-hed ar wech dirak va c'hamaladed ken e lavare unan anezho - Guibourg a oa e anv, eus Kastell-Jiron - e trofen da emrener 'a vicher' a-c'houdevezh, un diougan a ranke dont da wir hogen a gaven nec'hus awalc'h ivez d'ar poent-se rak sklaer awalc'h e oa din ne oa ket buhez un emsaver e Breizh e-kreiz an ugentvet kantved ur vuhez didrubuilh tamm ebet.

Ebarzh ar peurrest eus an displegadenn am boa savet neuze e kavan bremañ un heklek eus al lennadurioù a raen d'ar mare-se (dreist-holl buhez Kalloc'h gant Palaux a oa bet prestet din gant an Tad Plomet). Ar skrid-se a-hend-all, savet gant ur broadelour-rannvroadelour, a oa amsteriek ha forc'hellek a-grenn ha ne c'helle va degas nemet en un hent-dall. Hogen e meur a lec'h a-hed ar pajennadoù-se ez eo gwriziennelec'h va freder ha meur a wech e c'hoarvez ganin damvenegiñ degouezh va zud o doa ranket divroañ ha servijout ar Stad c'hall a-benn gellout bevañ, 'en em werzhañ' dezhi koulz lavaret. "Ret eo dezho," a skriven "da skouer, mont da vartoloded pe da gargidi o vezañ ma ne c'hell ket Breizh magañ he holl vugale ; ne

zeu den ebet pinvidik gant ar pesketaerezh hag ar vugale re niverus a rank divroañ. Gwir eo en deus kavet ar gouarnamant gall an tu da implijout an dreist eus ar boblañs epad ar brezel evel kig-kanol..." Rak soudarded kalonek eo ar Vretoned, a zisplegen pelloc'h. "Ha daoust da se e kaner an diskan 'An avaloù-douar evit ar moc'h h.a. Hep kontañ 'Bécassine' h.a. Anv a raen neuze eus monumant Santez-Anna Wened hag eus an enskrivadurioù brezhonek a oa merket war-c'horre. Hep dale, a skriven neuze, en em gavfe ar monumant-se war un douar estren peogwir e vije skarzhet ar yezh diwarnañ.

Heverk e oa avat dibenn va frederiaden. Nac'hañ a raen degemer e oa va gourdadoù tud disteroc'h eget ar C'hallaoued war zigarez e oa chomet yezh ha sevenadur ar C'hallaoued dianav dezho epad kantvedoù. Hevelep nac'h da zegemer dreistelezh ar galleg hag ar sevenadur gall a oa ivez an hent digor d'ar vroadelouriezh vreizhat rak skrivañ a raen : "Daoust ha ret e vo deomp anzav ez omp bet paour kaezh tud dre ma oamp Brezhoned, betek ar mare ma vos desket deomp anavezout splannderioù ar yezh hag ar sevenadur gall?..."

Pa skriven an notennoù-mañ ebarzh va deizlevr e oan deuet da vezañ broadelour breizhat koulz lavaret. Kement-se a oa souezhus awalc'h, pa ouezer ne oa deuet betek ennon skrid na kelaouenn ebet a spered broadel. Pa gemeris ar boaz, un nebeut mizvezhioù war-lerc'h, da lenn an "Heure Bretonne" ha kelaouennoù brezhonek, e oa diazezet va mennozioù da vat endev.

Abaoe pell avat e oan prederiet gant kudennoù ar yezh hag ar vro hep dont a-benn da reiñ un diskoulm dezho. Da skouer, adal m'edon en eil klas e c'hoantaen deskiñ ar yezh. Kement-se avat, d'ar c'houlz-se a oa ur wir huñvreadenn a saven din va unan, da noz ha me o c'hortoz ar c'housked da zont - gwall abred ez aemp d'ar gwele - rak n'ouien tamm ebet e pelec'h em befe gallet kavout levrioù da zeskiñ ar yezh ; a zo gwasnoc'h, n'oan ket sur zoken e oa anezho. Nec'het e oan ivez dre ma oa ahat din diwar ar mare-se endev edo ar yezh en argoll hag e vefe diaes hec'h adsevel. Awalc'h e oa din meizañ ar pezh a oa c'hoarvezet ganin ha gant va breur ha va c'hoarezed du-mañ er gêr evit kompren ivez e oa ar yezh barnet d'ar marv en degouezhennoù a oa o ren d'an ampoent e Breizh : ar memes kerzhad divrezhonekaat a zlee en em gavout deiz pe zeiz e pep tiegezh e goueled ar vro. O klask diskleriañ ar c'herzhad-se eo avat e teuis tamm ha tamm da zastum ne oa nemet al labour adsevel ha derc'hel en he sav ur stad vrezhon a gement a oa gouest da herzel ouzh hevelep kleñved.

Padal, er skolaj e unan, ne oa aergelc'h breizhat ebet. Moarvat e oa Bretoned eus an darn -vuiañ eus va c'henskolidi hogen n'o doa eveljust tamm spered broadel ebet evito da ober Bretoned anezho o unan. Unan anezho, Chauvel e anv, ganet war an harzoù, a lavare din e kave gwell tremen da Vreizhad n'eus forzh penaos rak fellout a rae dezhañ ... emouestlañ en arme c'hall ha Breizhiz, egiz ma ouzer, a zo brudet da vezañ soudarded vat. Unan all, Morel e anv, hag a oa mennet ivez da

emouestlañ en arme c'hall - eus Gwinnon, war ribloù ar Winun, e oa genidik - a oa diaes e spered dre ma ne ouie ket yezh e vro hag eñ Breizhad. Kontañ a rae din penaos, un drovezh, e oa en em gavet un danvez soudard unyezher eus goueled ar vro ebarzh ur c'hazarn eus al lu gall ha gwall nec'het e usurzhide da c'houzout piv an diaoul a c'hellfe bezañ intentet gantañ. A-benn ar fin e oa bet diskoachet ur Breizhad all eus kostez Roazhon er c'hazarn ha kerc'het e oa bet kerkent war-dro e genvroad. Henezh avat ne ouie tamm brezhoneg ebet ha dic'houest e oa bet eveljust da dreiñ komzoù e gamalad. Eus an darvoudennig -se e tenne va c'henskoliad un dastumenn dic'hortoz a-walc'h hogen a glote mat gant e orin eus Gorre ar vro : ret e oa, emezañ, deskiñ brezhoneg d'an holl Vretoned evit ma c'hellfent en em gompren kenetrezo da vihanañ (ur'Breizhizelad' eveljust en defe garmet diouzhtu e ranked er c'hontrol deskiñ galleg d'an holl Vretoned). Ur mennad kaer, evel ma weler : disoñjet en doa hepken ar paotr mat-mañ en em c'houlenn da vat peseurt urzhia-dur a vefe karget da gas da wir hevelep raktres.

Al lod muiañ eus va c'hamaladed a oa diseblant hepken. Soñj a zeu din bremañ eus unan a oa Bretagne e anv, genidik eus Laelieg, e kreisteiz Roazhon, a zisklerie e oa prest da zegemer an emrenerezh gant ma vije gallus hogen, eveljust, n'en doa tamm c'hoant ebet da stourm evit dieubiñ ar vro.

Kavout a ra din e tremene ar vroadelouriezh vreizhat er skolaj evit ur mennad trivliadel hepken. Ar re a veze war glask ur gelennadurezh politikel bennak

a droe kentoc'h war-du ar vroadelouriezh hag ar roueelouriezh c'hall. Dav eo din lavarout e oa Gallaoued eus ar re-se meur a wech. Ar pezh a feuke ac'hanon avat, soñj am eus, eo n'oa ket noblañsoù anezho (eus perzh ar re-se e kaven natur seurt menozioù), bourc'hizion vihan pe dud eus ar werin zoken ne lavaran ket : diwar va buhezadur e Cambrai em boa miret ar menoz ez eo ampleget emzalc'h politikel pep hini gant e orin kevredigezhel ha sellout a raen ouzh dibab politikel ar re a yae a-du gant danvez roue Bro-C'hall evel un doare treisoni e-keñver o renkad.

E-touez an nevez-rouelourion-se e oa evelato ur Breizhad eus Filger (a oa ganet eno da vihanañ) m'em eus ankounac'haet an anv anezhañ. Hemañ en em harpe war an hengoun chouant a oa estren a-grenn ouzhin. Unan all a oa genidik eus Sant-Hiler-an-Argoad, en tu all d' an harzoù, e Bro-C'hall, ha Piel a oa e anv (ur breur en devoa en ur c'hlas izeloc'h). Ur paotr dedennus a oa anezhañ, speredek ha skoliad mat (deuet e oa ivez ganin da genstrivañ da ziwezh hor bloavezh eil klas), ur melegan hirvoan, lagadet glas, pikoù panez war e fri. Degaset e oa bet d'ar menozioù rouegar, a gredan, gant an tad Flo-met, un diskibl da Galloc'h, bet skoliad e Keranna, egliz m'em eus market, ha chomet broadelour-rannvroelour hep dont a-benn biskoazh da zibab etre Breizh ha Bro-C'hall. Bep an amzer eta e c'hoarveze gant va c'hamalad breutaat ganin, marteze a-benn va c'hendrec'hiñ, kentoc'h, a soñj din, a-benn en em gendrec'hiñ e unan rak nevez flamm e oa e feiz d'an ampoent. Dre vras e rae gant poellatadennoù

a seurt-mañ, a gaven gwan awalc'h, ne vern penaos : Bro-C'hall a zo bet ur vro veur en amzer ar rouaned ; evit adkavout he meurded eta e oa dav dezhi distreiñ d'ar rouealezh. Hevelep arguzenn avat n'am frome ket nemeur adal ar mare-se o vezañ ma oan digas kaer ouzh mennad an impalaerelouriezh c'hall araok din zoken treiñ da vroadelour breizhat emskiantek.

Un toulladig broadelourion vreizhat a oa koulskoude er skolaj e-touez va c'hamaladed. A-c'houlde 1937-1938 em boa dizoloet enskrivadurioù brogar evel "Breizh atav" er porzh-c'hoari, treset gant ar c'hleiz, pe c'haranet gant ur gontell e prenn an taolioù-skrivañ ebarzh ar sal-studi. Ur c'henglasad din, Rialland e anv, a embanne e oa a-du gant an emrenerezh. E dud a oa o chom e Baen-Meur, war hent an Naoned, ha ma ne fazian ket, en doa e dad kemeret perzh el luskad "Foi et Bretagne" ha marteze "Les Frères Bretons" a oa harpet dreist-holl gant stourmerion eus rannvro Roazhon. Daoust da se avat n'ouie ket ar paotr-se kalz tra diwar-benn Breizh hag eveljust ne ouie tamm brezhoneg ebet. A-hend-all, ne grogas da embanne e venozioù nemet goude m'em boe diskleriet va unan e oan emrener (1).

Un emrener all a anavezis d'ar mare-se e Sant-Marzhin e voe A. Bourgeois, a oa en ur c'hlas uheloch' ogedon. Hemañ a oa taer awalc'h en amzer-se ha brudet

(1) War a gredan e troas e dad a-enep d'an Alamaned pa erruas an Alamaned da Vreiz ha va c'hamalad a gemeras perzh er c'hilstorm gall. A-hervez e voe lazhet oc'h embreger ur mindrailhig dre wall-zarvoud e 1944.

kenañ e oa en abeg d'e venozioù. Ur paotr koujorn gant lunedoù a oa anezhañ, egiz ar Morel am eus meneget, ha p'edon er c'hentañ klas em boe tro da zivizout gantañ. E kuzulig e tisklerie din o defe trec'het pellzo ar Gelled panevet an disranniezh a oa o tinerzhañ anezho bepred. Ne resize ket avat petra oa diazez an disranniezh-se (e gwirionez ne gaver unded klok ebet en emsav ebet). Dre guzh ivez en doa diskouezet din un dornlevr deskiñ brezhoneg (n'em eus ket mui soñj hag-eñ e oa ar c'h"Cours élémentaire" eus Roparz Hemon pe ar "Breton en quarante leçons" eus Vallée). Ul levr marzhus, n'eus forzh penaos, en doa seblantet din bezañ al levr-se rak gouzout a ris diwar neuze e oa un alc'hwez d'an nor a oa berzet a-grenn ouzhin betek henn (1).

P'edon er c'hentañ klas ivez e oa degouezhet du-mañ er skolaj un emrener all a oa Foucray e anv. Hemañ a zeue eus korn-bro Dinan, a gav din ha pouez-mouezh e dolead a oa gantañ a-hend-all. Ur paotr arbennik meurbet e oa e pep keñver - taolet em boa evezh outañ en abeg d'an tres iskis e stumm ur -v- a rae e vlev war e dal - ; epad an ehanou-kentel e chome e unan penn er porzh-c'hoari, en e sav en ur c'horn, hep toullañ kaoz gant nikun (un nevez-skoliad a oa anezhañ ivez), nemet ganin e rae evelato. Ur brogarour taer tre a oa anezhañ ivez, enep-gall ha disrannour. N'ouie ket ar yezh avat ha n'en doa ket klasket en deskiñ kennebout. E vroadelouriezh a oa diazezet penn-da-benn war an istor. Disoc'h e

(1) Muiloc'h a zarempred em boe a-c'houdevezh gant A.B. P'en em gavjomp hon daou studier er Skol-veur ur bloaz war-lerc'h. Eus rannvro Roazhon e tenne ivez e orin.

sturiennoù avat e oa e nac'he a-grenn deskiñ istor Bro-C'hall war zigarez e oa hini ur vro enebour : leun a c'hevier e oa an dornlevriou a oa pourchaset deomp, a zisklerie ; er c'hevezadegoù istor ivez e oa bepred an hini diwezhañ. Ne gaven ket fur eveljust hevelep stultenn hogen ne glasken ket e zibennadiñ. Eñ kennebeut n'en devoe ket kalz levezon warnon a-benn va lakaat da emdreiñ war-du ar vroadelouriezh vreizhat (1).

E-mesk va c'helennerion ne oa emrener gwirion ebet, a gav din, pe, da vihanañ, e voent dianav din. Abaoe avatez eus bet lavaret din e oa ur brogarour eus an tad Hardy a oa kozh d'an ampoent (e verzout n'em eus graet ken) ; n'em boe darempred ebet gantañ. Ma oa broadelour e kuzhe gwall vat e venozioù rak n'em boe bis-koazh diskred warno.

An tad Plomet am eus meneget meur a wech endev. Ur beleg yaouank bourrus a oa anezhañ d'ar mare-se ha deuet mat e oan dezhañ. Eñ an hini eo en doa prestet din buhez Kalloc'h gant Palaux. Evel m'em eus merket ivez, graet en doa e studioù eil derez e kloerdi Santez-Anna-Wened e-lec'h en doa desket un tamm brezhoneg. Hogen broadelour ne oa ket ma intenter dre ar ger-se ar Breizhad en deus meizet ne c'heller saveteiñ ar vroadelouriezh vrezhon nemet dre sevel ar stad vrezhon. Derc'hel a rac ivez moarvat d'an hengoun chouant evel Kalloc'h e u-  
(1) Mont a reas ar paotr-se a-ziwar-wel din epad ar brezel. E 1944-1945 avat e klevis e oa bet barnet da nouspet bloavezh toull-bac'h hep abeg gwirion ebet. E zanvez-pried a zilezas anezhañ damc'houde.

nan ha roueelour gall e oa da gentañ penn, evel maz eo re all komunourion c'hall e Breizh arak bezañ Breizhiz. Ma c'hoanage un dra bennak evit Breizh e oa d'ar muiañ 'statud' ur 'rannvro', diouzh giz an hengoungourion vaorasat.

Evelato ne glaskas ket herzel ouzhin pa emdrois prim awalc'h war-du ar vroadelouriezh. Lavarout a rae din hepken gant un neuz souezhet ha bamet : "C'hwil zo un dispac'her avat !" Ma oan dispac'her, ne oan ket a-ratozh moarvat. Klask a raen hepken d'ar gudenn a save dirazon an diskoulm a seblante din ar muiañ reizhpoell (1).

\*\*\*\*\*

Pennad 11

Hervez ar pezh am eus nevez-displeget er pennad arak e c'heller gwelout ez on bet a-stok un tammig bennak ouzh pezh a c'hellfed ober an emsav anezhañ(2)

(1) Berr e voe hoal an tad Plomet. Epad ar brezel e tapas an dorzhelegezh ha mervel a reas en ur ober un nebeut mizioù. N'en doa ket kalz en tu-hont da 35 bloaz, a gredan.

(2) Nebeut a levrioù o devoe levezon warnon d'ar c'houlz -se, ma lakaer er-maez hini Palaux. Ne glasken ket studiañ istor Breizh ; ne oan ket dedennet gantañ neuze. Duidiet e oan avat gant oberennoù ar Bras hag ar Goffig. Un toule lad skridoù savet gant hennezha lennis er bloavezh-se, da skouer "Au pays des pardons", "Le gardien du feu". Heuguiñ a ris a-c'houdevezh ouzh al lennegezh-se hogen e 1940 e klotent awalc'h gant va buhezadur.

da vihanañ gant hiniennoù o devoa anaoudegezh eus kudenn Breizh hep bezañ izili eus framm na strollad ebet. E gwirionez n'o devoa kelennadurezh resis ebet da ginnig din ha rak-se e voe dister o levezon warnon a-benn ar fin. (1).

Va mennozioù eta a gendalc'has eta da emdreiñ diouto o unan, hervez red va freder, o klask sol dreist-holl em prouiadoù hag em skiant-prenet, hep gortoz ali digant neb.

Komzet em eus diwar-benn ar paotr a ziazeze e vroadelouriezh war an istor. Gouez dezhañ, Breizh a zlee bezañ dieub en amzer-da-zont peogwir e oa bet dieub gwechall ; gant gerioù all, Breizh he devoa gwirioù istorel. Buan awalc'h avat e veizis pegen kleuz e oa seurt poellatadur : n'eus ket a wirioù istorel gwirion er-maez eus an istor bev. Piv a gredfe asuriñ he deus Burgondia, lakaomp, pe vroioù all aet da get gwirioù hiziv an deiz war neuz ez int bet stadoù dishual gwechall ? Ar re varv, ar re n'eus ket mui anezho n'o deus mui gwir ebet. Diazez gwirioù Breizh a zo en Emsav, ne vern a belec'h e tenn hemañ e orin (kv. an notenn a lakaan war ar bajenn war-lerc'h). En Emsav hepken e kendalc'h istor Breizh, maz eo an istor youl emskiantek ur stroll da vestroniañ e donkadur.

Hogen, evel m'em eus merket, n'on ket deuet da vezañ broadelour war-eeun en arbenn a'n Emsav.

(1) Eveljust e kleven komz eus renerion S.B.B. Gouzout a raen o doa klasket Debeauvais hag Olier Mordrel repu er-maez eus ar stad c'hall hag e oant bet barnet d'ar marv. Endro din e oad digas awalc'h en o c'heñver : da nebeutañ, ne oant ket milliget na kunujet.

Klasket em eus hepken an Emsav goude ma voen deuet da vezañ broadelour pe kentoc'h goude m'em boe paouezet a vezañ gall ha se ne c'hoarvezas nemet goude ma voe deuet anat din ne vefen biken evit en em glenkañ er framm gall. Klask a rin bremañ diskleriañ ha resizañ va soñj (1).

(1) Ne c'heller ket lavarout ez eo bet troc'het biskoazh hengoun istorel Breizh. Etre ar stad dishual, ar Breudoù hag an Emsav ez eus ur c'hendalc'h istorel a dremen pergen dre an "Association Bretonne". Dre hanterouriezh ur Breizhad evel R. de l'Estourbeillon a gemeras perzh e labour an "Association bretonne" hag a savas an U.R.B. e diwezh ar c'hantved tremenet ez eo stag an Emsav a hiziv ouzh ar vrogarourion a zifennas diwezhañ frankizoù ar vro.

Pezh a ziskleir perak ne voen ket boleun er penn-kontañ gant an Emsav eo ar pouez a roe end-eeun d'un hengoun istorel ha na glote mui gant emgav kevredigezhel ar vro. A-hend-all, merzet em boa e c'helle an anaoudegezh eus istor ar vro bezañ un anaoudegezh varv o tennañ hep-muiken da skiant an hendraouerezh rak va c'hamaladed a ouie un tamm eus hanez Breizh ne oant ket broadelourion evit se. Gallaoued ne oant ken.

Ivez, o prederiañ diwar-benn degouezh an Emsav, e teuen da vezañ e oa kiriek d'e wanded bezañ bet diazezet ha renet gant ur renkad tud a oa o treiñ muioc'h-mui da C'hallaoued abaoe amzer ar stagidigezh ha dreist-holl an dispac'h gall hag ar chouanterezh. An dispac'h gwashañ eus an dispac'h gall end-eeun ez eo bet lakaat noblañsoù Breizh ha renkadoù all eus ar vro da gemer perzh en istor Bro-C'hall. Ar vourc'hizion - hag a-c'houdevezh darn eus ar werin - o deus en em staget ouzh ar republikoù gall evit enobiñ ouzh o c'hevezerion, an noblañsoù ; hag ar re-mañ d'o zro, a zeue da vezañ kendonkad e planedenn renkad an noblañsoù gall ha lodek muioc'h-mui en hec'h uhel-vennadoù gallgar hag impalaerel, dreist-holl da heul brezelioù 1870 ha 1914, o kenderc'hel da gemer perzh er stourmadennoù politikel e sell da adsevel ar roueelezh c'hall (hep kontañ an dimezioù a stage ivez renkadoù an div vro kenetrezo). A-benn ar fin, ar renkad-se a zo bet gallekaet a yezh a viskoazh koulz lavarot, he deus kollet a-benn ar fin ar spered breizhek brogar o doa bet un toul-

Tamm ha tamm hag hep gouzout din er penn-kentañ moarvat em eus paouezet a en em santout gall. E dibenn an trede klas, da skouer, em boa dilezet ar mennad a oa bet atizet ennon mui pe vui da brientiñ skol an danvez ofisourion c'hall St-Cyr. Twir eo em boa kroa-ziet war an dezo-se evit abegoù pleustrek da gentañ : barrekoc'h e oan war al lennegezh eget war ar skiantoù ha pergen war ar jedoniezh hogen en trede klas hag en eil klas em boa tapet un 'accessit' bennak evit ar ventoniezh, m'em eus soñj mat, ha ma vije bet start va galvedigezh ne vije ket va divarregezh war ar skiantoù sañset ur skoilh war an hent en dije fellet din heuliañ. An dilez-se eta a oa un arouez e oa koazhet da vat ar gred gall ennon.

Pezh a zistanas ar gred-se ivez e voe - ha se a zo iskis awalc'h - studiañ an istor en eil hag er c'hentañ klas. Da gentañ e voen didouellet diwar-benn istor Bro-C'hall e unan. Epad va c'hlasoù kentañ derez e Cambrai e oa bet desket din sellout ouzh Bro-C'hall evel ouzh un doare doueez pe santez, dinamm a-grenn, oc'h en em zifenn a-enep d'ar re zrouk, o chom hep tagañ ar broioù all nepred : ret eo d'ar c'hall kont eus an aergelc'h a oa o ren er stad c'hall war-lerc'h ar brezel bed kentañ. Neuze avat e tizolois ne oa ket Bro-C'hall disheñvel di-ouzh he c'hevezerezed, e oa ken gwazh hag int, ma n'oa Kendalc'h an notenn araok. - Lad izili anezhi betek an dispac'h tost-da-vat. Dija e oa distroc'h spered an "Association bretonne" a oa ur stroll tirberc'henned da gentañ penn. Kement-se a ziskouez ez eo trec'h ar frammoù stadel d'an holl re all hag ivez ne vo ket tu da gas dispac'h ebet da benn er vro-mañ hep adstum-mañ penn-da-benn kevredigezh hengounel Breizh.

ket gwashoc'h. Setu ma voe bruzhunet an idolenn e oan bet akourset da azeuliñ. Evel Breizhad da vihanañ ne gemeren ket perzh en direizhderioù hag er c'hrizderioù ma oa diazezet istor Bro-C'hall warno.

Ur wirionez all a voe diskuliet din gant studi an istor : Bro-C'hall ne oa ket keltiek tamm ebet. Ar stad c'hall ne oa nemet ur grouidigezh c'herman troet fall. Ar broioù-krec'h o doa kollet penn-da-benn o hengoun keltiek ha n'o doa ket muioc'h c'hoant d'e ad-c'honit eget Alamanned ar c'hreisteiz pe Italianed traonienn ar Pô. A-vihanik avat em boa kemeret ar plog da sel-lout ouzh ar C'hallaoued evel diskennidi ar C'halianed (levezon ar skolaerion gentañ a reas war va zro e Cambrai, a glaske en em geñveriañ ouzh an Alamanned-Germaned dre en em dremen o unan da C'hallaoued-Galianed.) Diwar va bout dizonet diouzh ar vojenn-se ez eus chomet ennon an dasfiz didrec'hus ouzh kement a sell ouzh ar Gelted kozh a lakaer en araok bewech ma klasker beuziñ Breizh en un impalaeriezh bennak.

Hogen dre studiañ al lennegezh c'hallek eo dreist-holl e teuis da emouezañ ouzh va estrenelazh. Hor mistri a oa bepred o vorrodiñ hor penn gant "hor yezh", "hol lennegezh" evel ma komzent eus "hon istor". War ar poent-se dres avat eo e teuis abred d'o dislavarout. Awalc'h e oa din distreiñ d'ar gêr e-doug ehanoù ar bloavezh 1938-1939, da skouer, e Sant-Jermen, evit adkavout va zadoù kozh ha na ouient ket galleg. Awalc'h e oa din sel-lout outo evit gouzout ne oa netra boutin etrezon hag an dud seven a oa o vevañ e Paris er XVIIvet, XVIIIvet ha

XIXvet kantved. Ar re-se o doa krouet ur sevenadur ; bez e c'hellen e zisteurel pe e zegemer hogen ne c'hellen ket lavarout e oa din.

An hent eeunañ eveljust e vefe bet ober evel an holl e Breizh hogos gwitibunan, asantiñ d'ar prof a raed din, da lavarout eo bevañ a spered e Paris, pezh a ra pep Gall emouez da vat ouzhe vroadelezh, en em gendeuziñ e pobl ar renerion, dont da vezañ heñvel outo ha rannañ o brientoù.

Se avat ne c'hellen ket degemer anez kaout mezh gant va zadoù ha va gourdadou, anez o ankounnac'haat, o diverkañ diwar va spered, o disteurel a-benn ar fin. Rak o vont da c'hall e troc'hen pep liamm ha pep darempred ganto.

Ha padal, peseurt dibab all a oa kinniget din ? Breizh ne oa ket ur vro ; ar brezhoneg ne oa ket ur yezh ; da vihanañ ne c'helle ket kevezañ gant ar galleg. Ma felle din eta kaout perzh en ur Sevenadur e oa ret holl din mont da C'hall.

D'ar c'houlz-se eo e c'hoarie an Emsav e roll o pourchas din ur framm politikel a glote gant va fersonelezh Vreizhad, ur framm na oa ket kaset da wir moarvat, pell edo zoken, hogen a hanveze velato dre ma oa rakvannet en dazont e mennad hag e labour ar re a boanie d'e sevel ha d'e grouiñ. E-lec'h bezañ ur c'horker a brofer dezhañ ur glad a zo estren outañ e teuen da vezañ un den rez a vev war e beadra pegen distar bennak e ve en deroù.

An Emsav a zeue da vezañ evidon eta un tu da dec'hout diouzh va dismegañs, d'en em gadarnaat, d'

en em anzav hep mezh evel ma oan, a-enep d'ar re a felle dezho bezañ aotrouion din dre o prof end-eeun.

Penaos avat e c'hoarvezas hag e c'hoarvez bepred gant kement a Vreizhiz dibab Bro-C'hall pa veizontervat n'eus netra gall enno ? Un abeg splann a zo da gement-se da gentañ : n'o deus ket awalc'h a fiziñs enno o unan evit empennañ e c'hellfed un deiz sevel ur stad vrezhon ; betek henn ivez n'en deus ket gouezet an Emsav kendrec'hiñ ar Vretoned war ar poent-se.

Hogen daoust hag ar Vretoned e gwirionez a zibab Bro-C'hall egiz m'emañ, en he c'hendalc'h istorel (ur vro unvan krouet diwar ur gêr hepken evel Roma gozh) ? N'her c'hredan ket. Pezh a zibab ar Vretoned ez eo ur stern kevredigezhel a zo stag ouzh ar stad c'hall hogen na c'heller kemmeskañ gant ar bobl c'hall. Evit va zad, da skouer, e oa al lu gall ; evit nouspet re all ez eo bet ar skol-veur c'hall (soñjit, da skouer, e niver ar skolveuridi a zo deuet eus Plozeved e-kichen du-mañ) (1) ; erfin, evit darn all c'hoazh ez eo an iliz c'hall (rak gall eo an iliz e Breizh). Seurt sternioù avat a zo rannel ; n'int stag ouzh amzer ebet (ur vro avat a zo da gentañ ur c'hendalc'h istorel) ; difetis ez int ; a-benn ar fin e kuzhont bepred gwirvoud Bro-C'hall. N'eo ket ur bobl vev a vez dibabet gant ar Vretoned, ur bobl a c'hellfent karout ha servijout en un doare personel, ur gravez, un ideologiezh bennak ne lavaran ket, hini ar Republik (1) Mat e vefe merkañ n'eus ket kement-se a Vretoned a zo gredus d'ober studioù lennek rik. Dibab a reont danvezioù all na roont ket tro dezho da welout Bro-C'hall egiz m'emañ.

gall evit ar skolveuridi, hini an demokratelezh kristen, lakaomp, evit an dud a iliz, an impalaerelouriezh evit ar re a zo emouestlet el lu gall.

Eveljust ne c'heller ket tamall d'ar Vretoned bezañ klasket dont er-maez eus framm enk ar barrez e oant bac'het ennañ d'ar mare ma tarzhas ar reverzhi c'hreantel. O vezañ avat ma ne oa Stad vrezhon ebet evit aotren dezho kemer perzh er sevenadur arnevez a denn muioc'h-mui da aozañ ur gevredigezh kevarzhel ez eo bet dav dezho ober gant ar stad c'hall. O vezañ ivez ma ne glote ket ar stad-se gant o 'foblelezh' e oa tonket dezho kerkoulz kaout darempredoù faoz ganti. Rak ar Stad a chome estren outo ; ne oa ket evito kejllec'h ur bobl o kenvevañ ; kentoc'h, a gredan, ur benveg d'en em c'horren er bed, ur benveg da gorvoiñ e sell da balioù hiniennel, kuit a baeañ diouzh ret an taosoù didec'hus, hini ar gwad en o zouez.

Klask a rin hollekaat ar gudenn emañ o verat amañ. Kavout a ra hini ez on en em gavet en un degouezh boutin awalc'h en ugentvet kantved. Abaoe kreiz an naontekvet kantved ez eo aet war liesaat ar gwiskadoù poblañs o tont d'an deskadurezh (pa ne ve nemet dre c'houlzout lenn). Ar gwiskadoù-poblañs-se o kejout gant ar sevenadur aozet gant ar vourc'hizion a sante anezhañ evel ur sevenadur estren. A-hiniennoù, sur-mat, o c'helle darn en em silañ e kevredigezh ar vourc'hizion, en em heñvelaat outo hag ober berzh eno zouez, goude ankouaat o orin hag o zremened. D'ar c'houlz-se avat eo ez eo bet diorreet kelennadurezh Varks a rae eus ar werin ur bobl distag diouzh

hini ar vourc'hizion ha mac'homet gant houmañ. Un diazez ergorek he devoa moarvat kelennadurezh Varks ; ar sevenadur diorreet gant stad ar c'hladalc'herion hag ar vourc'hizion ne zeree ket outo kennebeut peogwir e rae anezho traoù perc'hennet ha korvoet hep denelezh wirion ebet. Ar youl da gemm ar stad ha da lakaat anezhañ e servij an dudhe deus broudet tud ar werin da zegemer ar varksouriezh. Ar emsav komunour en deus c'hoariet evito eta ar memes roll hag an Emsav brezhon evit ar Vrezhonez : daskoret en deus o larc'h da renkadoù ar werin er broioù impalaerel kozh. En ur stumm eta en defe gallet dereout ouzh va degouezh.

Padal n'on ket aet a-du gant ar gomunourion ha da e vefe, a gav din, diskleriañ perak. Peogwir emañ o komz ac'hanon-me e c'hellin menegiñ da gentañ luskennoù hiniennel. Va zud ha va zad dreist-holl a oa a-enep d'an emsav-se. Hogen, evel dres, seurt luskennoù ne vijent ket bet awalc'h evit termeniñ va mennoziou, anat eo. Abegoù all donoc'h a c'hell diskleriañ va emzalc'h : n'em eus ket buhezet war-eeun an emgav arallekaus a zegasse ar vicherourion en hanternoz Bro-C'hall d'ar gomunouriezh pe d'ar sokialouriezh. Va zud kozh a oa labourerion dieub ; moarvat, va zad-kozh Olier a oa ur martolod e' bech bara hogen darempredoù boutingar a oa etre mestr ar vag hag ar vartolod ; un emglev a izili kevatal a unane an holl. Va zad a oa deuet war-eeun da servij ar stad c'hall. Aet e oa va zud eta, koulz lavaret, e-bieu da brantad an arallekaat greantel-armerzhel. Hengoun ar vicherourion en hanternoz Bro-C'hall a oa ken estren ouzhin a-benn ar fin hag hini ar vourc'hizion c'hall o unan ; en em stagañ

outañ a vije bet en em stagañ ouzh un hengoun estren. Nemet reiñ em befe graet da renkad ar vicherourion er broioù ijinerezhel ur roll mesiazel evit daspren an holl vroadoù hag an denelezh a-bezh n'oan ket evit en em unaniñ ganti en he stourm. Kement-se a vije bet degomer ur relijion ha na oa ket va hini n'eus forzh penaos rak kristen e oan chomet a-hend-all. Dre vras eta e oan renet gant ar mennad da chom feal e pep degouezh d'am hiniennelezh istorel (ha personel, ma karer) da gentañ.

Diskleriadurioù all a c'hellan reiñ.

Pa varnen ar gomunouriezh ne zalc'hen ket kont eus pezh a venne ober anezhi an diazezerion anezhi, eus pezh a c'hellje bezañ bet, hogen eus pezh e oa deuet da vezañ e gwirionez o chom feal pe get da vennoz he meizourion. Ha gwiriañ a raen e oa deuet ar gomunouriezh er Stad c'hall da servij ar vroadelezh hag an impalaerelouriezh c'hall (an dra-se a voe anat dreist-holl epad ha goude ar brezel bed II, ken na darzhas emsavadeg Aljeria a voe harpet gant ar strollad komunour gall a-benn skoilhañ ar gostezenn dehoù gall dreist-holl). En U.R.S.S. e oa ken anat all e servije ar gomunouriezh impalaerelouriezh ar Rusianed, evel ma skoazellas a-c'houdevezh hini ar vroadelezh Han e Sina. Ur gaou e oa eta tezenn bennañ ar gomunouriezh : an etrevroadelezh.

Ouzhpenn-se on deuet d'ar politikerezh d'ar mare ma oa ar stalinouriezh en he gwashañ : hini ar prosezou, hini ar feur-emglev stre Hitler ha Stalin. Kement-se eveljust ne c'helle ket va dedennañ. Moarvat em eus klevet komunourion o klask digareziñ an torfedoù

sevenet gant Stalin ; dre vras e implijent ar memes arguerezh hag ar re a zifenne torfedoù Hitler : en tu all d' an holl vilderioù-se e vefe brav ar bed.

Ne fell ket din amañ, eveljust, reiñ abegoù hollek da zisteurel ar varksouriezh - an euzhusterioù ne vankont ket, da skouer, en istor an Iliz - hogen diskleriañ hepken penaos, dre-benn va emgav hiniennel, on bet degaset, me va unan, da zisteurel anezhi (1).

Meizadoù zo eus ar varksourion a voe diaes din degemer evelato p'em boe tro da studiañ o mennoziadeg. An arallekaat, lakaomp, n' eo ket dalc'hmat armerzhel rik (droch eo klask henn muzuliañ dre niveroù, evel ma reer a-wechoù); kerkoulz all ez eo politikel; arallekadur va zad a oa politikel, gwriziennet en isdiorreadur ar vro; d'an isdiorreadur avat e oa kiriek mac'ho-merezh ar Stad c'hall e Breizh. Diouzh un tu all, e c'hell an arallekaat bezañ dispisaet ha diverket hogos pa vez kenderc'het madoù fonnus awalc'h evit m'o defe an darn-vuiañ eus an dud perzh en hoal-vat armerzhel; an dispac'h d'ar mare-se, hini Marks atav, a goll e ster : setu pezh a zo c'hoarvezet er Stadoù-Unanet, hag a c'hoarvezo war-c'hoazh marteze e Bro-C'hall. An dud, erfin, a c'hell bezañ korvoet hag arallekaet e sell da balioù ha n'int ket armerzhel rik, gant kenurzhadurioù a zo diazezet war un uhelvennad hogen a rank ober gant an arc'hant evit kas o labour war-raok. Kement-se a c'hell degouezhout e diabarzh

(1) Kresket eo va disfiziañs ouzh ar gomunouriezh a-c'houdevezh en arbenn a guriou kalvezel ar Rusianed end-eeun, en egor pergen, dre ma tiskouezent eus o ferzh ul lorc'h impalaerel dizenel kentoc'h eget damant ouzh ar werin.

n'eus forzh peseurt iliz pe strollad diouzh ma implijont tud ha n'int ket lodek penn-da-benn en o uhelvennad pe n' o deus atebegzh ebet er framm end-eeun. Al lodegezh hag an atebegzh hepken a c'hell lemel an arallekadur. D'ar c'houlz-se e ranker anzav ez eus estreget enebiezhoù hag arallekadurioù renkadel en istor, pezh a oa nac'het betek henn gant meizourion ar varksouriezh (1).

Amañ e rin un distro-prezeg a-benn displegañ penaos e emdroas va mennozioù a-c'houdevezh. Deuet on da soñjal e vefe diboell n'eus forzh penaos diazezañ ur stad vrezhon war ur brezel renkadoù (pezh a zo c'hoarvezet e broioù zo a zo bet dieubet gant komunourion hag a vefe hetet, a gredañ, gant kleiziz zo e Breizh, bet e skol gant meizourion ar gostezenn gleiz c'hall ha douget awalc'h d'un doare gouennelouriezh speredel, 'm eus aon), dacust ma ne c'heller ket nac'hañ e ve ur stourm dieubiñ en ur vro suj ur stourm diabarzh koulz hag ur stourm diavaez o vezañ ma kav bepred gwiskadoù zo eus ar boblañs en ur c'heneñsklav o mad oc'h harpañ ar mac'homer (pa ne ve nemet ar re a zo implijet en e vererezh). Ar pezh a zo gwirheñvel ivez eo e vo pourchaset an nerzh dieubiñ gant ar renkad he devo bet ar muiañ da c'houzañv diwar an arallekadur a-berzh ar stad c'hall hag a vo bet emkiantekaet, politi-

(1) Hiniennoù eus dalc'hidi Varks hiziv evelato a **segemer** e c'hell an arallekaat bezañ politikel koulz hag armerzhel, da lavarout eo en em gavout war bazenn an darempredoù etre broioù, etre stad ha bro, pe etre stad hag hinienn zoken. Mat e vefe er c'heñver-se lenn skridoù meizourion evel Pierre Fougeyrollas pe gKostas Axelos. Gwir eo e klask ar re-mañ en oberennoù Marks andon o awenadur kentoc'h eget ur c'helennadur. Hogen prederourion all a embann ez int marksourion evel F. Châtelet pe Louis Althusser (hep kon-tañ ul Lefebvre ha n'eo ket mui gwall reizhkredenek) a zo aet e gwirionez en tu-hont d'ar varksouriezh.

kelaet gant an Emsav ha framm etennañ. A-hend-all, men-nad broadel ar stad vrezhon a zivizo kerkoulz all stuz kevredigezhel Breizh ; da skouer, an tammig kevala a zo oc'h oberiañ e Breizh er mare-mañ a zo a orin estren. Evit adsevel rezid ar vro e ranko ar stad broadelañ ar c'hevalla-se, ingalañ anezhañ diouzh ret etre ar c'humu-niezhoù lec'hel ha ma aotre d'ar c'hevalla estren -se - evit abegoù pleustrek, lakaomp, evit chom hep freu-zañ un armerzh bresk endev- kenderc'hel da oberiañ e Breizh e tleo ivez kontrolañ anezhañ a dost.

Ne gredañ ket avat e c'hell ur stad en em gemmeskañ gant ur renkad ; diboell e vefe krediñ zoken e c'hellfe e plegenoù an ugentvet kantved en hor bro en em gemmeskañ penn-da-benn gant ar bobl a-bezh. Kement-se a c'hoarvezo marteze en amzer-da-zont ; evit ar poent n' eo c'hoarvezet e neb lec'h er bed ; n'eo ket c'hoarvezet er stadoù komunour zoken : eno ez eo diforc'h bepred stad ha strollad komunour diouzh ar bobl kerkoulz hag e -lec'h-all. Ne lavaran ket ez eo se un uhelvennad hogen ret mat eo anzav ez eo ar Stad ur boud dioutañ e unan er gevredigezh. Ar pezh a c'heller spiañ er gwellañ de-gouezh eo un eilgerierezh etre ar stad hag ar bobl a roio tu da bolitikelaat ar vroad -a-bezh ha tostaat evel-se tamm-ha-tamm ouzh ar gevredigezh peurvat.

N'eo ket avat va dezo endro-mañ disple-gañ va soñj dre ar munud war an divoud-se. Aet on pell awalc'h diouzh va arrouden ha da e ve din, a gav din, distreiñ d'am zestenn gentañ.

Ar gudenn a save dirazon e gwirionez er bloavezhioù-hont e oa meizañ penaos en em glenkañ en Istor. N'em eus komzet eus ar varksouriezh em eus graet dre ma soñje din e c'helle ar geleñnadurezh-se pourchas a-wechoù da dud gwerinoù zo un tu d'en em glenkañ en Istor hep renaviañ o fersonelezh, en ur skarzhañ a-grenn un tremened n'o doa perzh oberiant ebet ennañ petra bennak maz eo touellus meurbet seurt mennad o vezañ ma ne c'helllo biken ar gomunourion c'hall kroaziañ war istor ar stad c'hall hep dilezel war un dro an talvoudoù sevenadurel a zo ennañ ha ma vevont diwarno (1).

Evidon-me avat e verzis buan ne c'hellen diskleriañ va fersonelezh ha va zonkadur nemet en arbenn a istor Breizh pegen kozh ha pegen pell bennak e ve hemañ. Va zud a gomze brezhoneg dre ma oa divroet ar Vrezhoneg d'an Arvorig, dre ma oa bet trec'h o broad e Ballon pe e Kistreberzh, lakaomp. Hogen ar faezhidigezhioù o unan o

(1) Mat e vefe evelato, a-benn klokaat ar pezh am eus merket diwar-benn roll gwirheñvel ar Stad en ur vro is-diorreet ha digevala, evel Breizh, resizañ e ranko ar Stad Vrezhon emichañs kemer penn al labour diorren, da lavarout eo pourchas arc'hant ha reoliñ kresk an armerzh. Diouzh un tu all, adal ma ne glasker ket lemel war-eeun ha dre heg ar renkadoù en hor bro ez eur rediet ivez d'o lezel da genc'hoari etrezo en ur framm demokratel klasesel a zegemero al liesstrolladegzh hag ar frankiz brudañ. En abeg da se ivez e kredan e vo ar stad epad ur prantad amzer diderminus diforc'h diouzh ar bobl ha zoken diouzh gouarnamant ha gouarnerezh, dre ma ranko bepred obergant kargidi anvet en o c'harg evit o buhez pad. D'ar c'houlz-se en devez ar Stad - sellit da skouer ouzh degouezh ar Stadoù gall, saoz pe rusian-soviedat - , evel mererezh, un hengoun dioutañ e unan, un natur diouti hec'h unan ; a-se e vo gouest, a-dreuz kenc'hoari nerzhioù-gwaskañ liesseurt ur vroad liesrenkadek, da werediñ e sell da ziazezañ tamm-ha-tamm ha muioc'h-mui an unvaniezh kevredigezhel a lamo kuit ar c'henstokoù arvarus evit unded ar bobl. Roll ur rener laz-seniñ e vo roll ar stad, koulz hag hini un tredeog-barner. Emdreiñ a ray ar Stad eveljust ha mont a ray e roll war zisteraat dre ma kresko emskiant politikel an dud. Hogen ne c'hellomp rakwelout netra resis war ar poent-se.

deus graet ac'hanon pezh ez on ; hep Sant-Albin-an-Hiliberenn ne vefe digloret biken ar seurt Brezhoned a zo o tinodiñ bremañ. Ar yezh a skrivan hag hi glan a zo frouezh un adsav hag ur stourm da adc'honit pezh a oa kollet. Sammañ a reomp darvoudoù hon istor hag ober anezho danvez hor rezid dre reiñ ur ster dezho. Hep Sant-Albin-an-Hiliberenn ne vije bet hini eus an emsaverion o deus bevet war an douar-mañ abaoe ur c'hantved, lakaomp : na Kervarker, na Frañsez Vallee, nag hini ebet eus ar re o deus krouet an Emsav o kenderc'hel Istor Breizh. Breizhiz all a vije bet moarvat hogen nikun ne vije bet heñvel. En arbenn ivez ag an Emsav e vo disheñvel kement Breizhad a zeuio er rummadoù da zont. Kaer a zo ober eta ne c'hell den en em ziforc'hañ diouzh an istor. Anez nac'hañ pep fersonelezh eo dav deomp en em glenkañ ennañ.

Sed pezh o deus graet Bretoned zo koulskoude, Renan er c'hantved tremenet, pe dostoc'h deomp, tud evl an ao. Falc'hun, a gav din, a glask diskouez abaoe ugent vloaz ez omp Gallaoued. Ne verzer ket mat peurvuiañ en deus klasket Renan dreist-holl o fardañ termenadur ar vroad a anavezomp - graet eo ar vroad gant youl an dud da vevañ ha da oberiañ a-gevret - didamall e zilezidigezh eus ar vroadelezh vrezhon. Kemendall en deus klasket ober ivez an ao. Falc'hun p'en deus asantet en araok da varv hor yezh war zigarez, emezañ, ez eus bet komzet nousep yezh war al Ledenez-mañ abaoe maz eus tud o vevañ warni. Ma heulier savboent an daou zen-mañ e teuer da zastum ez eo dibouez a-grenn kemm yezh ha broadelezh hag e c'hell neb a gar dibab e vro egiz ma plij dezhañ.

Moarvat n'eus ket anv a nac'hañ e ve graet ar vroad gant ar youl da genveañ ha da genoberiañ en ur gumuniezh politikel. Seurt keal avat ned a ket en tu-hont da lavarout ez eo dieub pep stroll-tud koulz ha pep hinienn. Ar rezid, padal, mard eo ampleg hon ober er bed, n'eo ket un didamalladur dioutañ e unan. Pep hini a zo 'lib', evel ma lavar darn. O verkañ se en em lakaer war dachenn ar bred ha n'eo ket war hini ar vuhez, da lavarout eo hini ar mad hag an droug, rak hon oberoù o devez ur ster bepred.

Anat e oa din moarvat e oa prest ar rummad Bretoned a oa o vevañ endro din da zegemer ar framm gall. Hogen ken sklaer all e oa din e oa diwar-c'horre an asant-se, heñvel ouzh an hini a ro an den trec'het d'an Tonkadur, divizet e gwirionez gant bruderezh pounner ar Stad c'hall, he skolioù, he c'hazarnioù, he skingomzerezh h.a. Gwallet e oa youl ar Vretoned rak ne gemerent ket perzh a-zevri e buhez Vro-C'hall.

Eveljust e c'hell an hinienn, en hec'h unan, o tivroañ da vat da skouer, dibab e vro. D'ur Breizhad a chom er vro avat, a anzav a-hend-all ez eo Breizhad - ha piv a gredfe nac'hañ andra-se e Breizh? - ez eo disheñvel krenn ar gont. Ne c'hell ket mont da C'hall hep troc'hañ a-benn ar fin pep liamm gant e vro c'henidik. Bezañ Gall evit va zad ha va mamm a lavare dilezel ar brezhoneg ha deskiñ din galleg hogen kement-se ne vire ket outo a chom dic'houzvez a-grenn eus gwir sevenadur Bro-C'hall.

Dav eo din bremañ displegañ peseurt mennoz am luskas dreist-holl da chom hep dibab ar vroadelezh c'hall en desped d'an holl ha da bep tra. Ar pezh am brou-

das, a gredan, e voe merzout pegen tidel e teus ar vroadelezh da vezañ adal ma c'helled he dibab evel ma kared. Diwar ar mare m'en em zistagen a-grenn diouzh ar stuzegezh a oa bet hini va gourdadoù betek neuze e c'hellen en em stagañ ouzh n'eus forzh peseurt sevenadur kêrel : an holl a oa ken tost din pe ken pell diouzhin ; an holl a oa kevatal din. Ne c'hellen en em stagañ ouzh Bro-C'hall ez arbennik nemet evit abegoù pleustrek - desket e oa bet galleg din - pe neuze oc'h aotren d'ar Stad c'hall warnon un doare gwir perc'hennañ doueel a oa bet hini ar rouaned c'hall ergentaou. En em santout a raen neuze ur 'sujad' ha rak-se, a gredan, em eus nac'het.

A-c'houde ma oan deust da veizañ tidadezh ar vroadelezh c'hall evit ur Brezhon e troe a-enep dezhi kement e oan bet akourset da estlammiñ outañ dre ma oa se-venet evit mad ar "vro". Pep talvoud a gemme ster. Marv ar soudarded vreizhat er brezel bed kentañ a zeue da vezañ diboell hag euzhus : perak e oa aet da vervel evit ur yezh hag ur sevenadur n'o doa perzh ebet enno kantmiliadoù eus va c'henvroiz ? An didamalladur nemetañ a c'helle bezañ da seurt aberzhadeg divent e oa tremen yezh, sevenadur ha broadelezh Vro-C'hall d'ur Peurc'hroñs digomprenus, par d'un doue bennak. Bro-C'hall a zeue da vezañ evidon un idolenn, un idolenn leun-wad am lakae da hañgiñ.

A-benn ar fin eta e tizoloen ne oan ket dieub, e veven en ur framm ha na glote na gant va natur na gant va istor. An dra-se eo a zo an tennañ da zegemer d'ur Breizhad aet da C'hall rak diaes e teu e spered pa zeu da emouezañ koulz ouzh e baourentez hag ouzh e sklavelezh

dizifenn. Didorroc'h eo dezhañ bevañ en touell en lak da gemer perzh a faltazi en ur c'hlod estren. Rak-se ez eo dedennet gant mennad an impalaeriezh e-lec'h e koll an holl vroadoù o hiniennelezh. Opiom ar re n'o deus mui bro na douar ebet eo an impalaerelouriezh. Setu pezh a soñjen pa welen va zad stag a galon ouzh meurded Vro-C'hall (1).

Un nebeut evezhiadennoù all a rin ouzhpenn diwar-benn ar c'hudennoù emañ o verat er mare-mañ. War va meno ez eo heñvel en holl vroadoù suj ar broud o lusk d'en em zivazhyevañ, Iwerzhoniz derc'hent-dec'h, evel dec'h Aljeriz. SKlaer eo e c'helle ar re-mañ koulz hag ar re-se mont da C'hallaoued pe da Saozon. Ne vefe bet evito nemet degemer dichipot kaer ar sevenadur greantel nevez en em led er bed a-bezh. Labourerion Aljeria koulz ha re Iwerzhon a c'helle kerkoulz diskoulmañ kudennoù o renkad e framm ar Stad c'hall pe ar Stad saoz. Pa studier avat emsavioù ar broioù-se e veizer ez eus *gr' er* sichennanezho, hep gouzout dezho marteze, - rak ster un emsav a c'hell mont en tu all d'ar pezh o deus meizet an diazezerion anezhañ - ar youl da grouiñ ur stad a vefe

(1) N'em eus ket komzet eus kudenn rannvroioù ar reter peogwir e kredan n'eo ket disheñvel o c'hudenn diouzh hini ar c'hornog. Ma lakaer a-gostez ar rannyezhoù romanek komzet ganto hiziv e oa heñvel o stuzegezh vaezel ouzh hini o c'henvroiz eus ar c'hornog (perzh dibar pobl Vreizh ez eo bezañ bet betek nevez zo ur werin a vaezidi war-bouez 80 - 85 % eus ar boblañs dirak ar bobl a hengoun kêrel ez eo Bro-C'hall.) Ne vern penaos ez eo bet stummet an holl Vretoned gant an hevelep istor ha gant an hevelep yezh a zo bet diazez ar vroadelezh hag ar stad vrezhon rak en arbenn d'o yezh eo o deus nac'het ar Vrezhoned plegañ da veli ar Stad c'hall.

muiloc'h diouzh ment Mab-den hag a glotfe klokoc'h gant e natur, gwriziennet ha ma vefe en un douar, e-lec'h ar stad impalaerel ha kreizennet evel an hini C'hall a zeu da vezañ difetis ha dizenel.

Seurt stadoù dister o galloud a ziwallo Mab-den diouzh huñvre an dreistdenelouriezh, diazezet war an engroez hag ar c'halvezerezh, a zo oc'h ober he reuz er c'hantved-mañ e-touez renerion hag atebeion ar stadoù impalaerel : kredet e vefe awalc'h e soñj ar re-mañ ez eo talvoudegezh un den diouzh ment ha galloud ar stad ma aparchant outi. Un touellwel med eo ken avat hag evidonme ne gredan ket kalz ez-ec dreist talvoudegezh tud ar rummad kalvezel-mañ da hini tud ar remzi kent. Netra ne ziskouez deomp ez eo ereet araokaat danvezel hag araokaat speredel. Moarvat e c'hell an deskadurezh reiñ ur vent ouzhpenn d'ar speredelezh hogen diouti hec'h unan ne c'hell krouiñ speredelezh ebet. Nemet, evel just, eo deomp divizout a-benn ar fin peseurt talvoudoù a zle bezañ diazez ur sevenadur.

Krediñ a ran eta he deus savidigezh ur Stad brezhon e Breizh ur ster hollek ; me ' fell din lavarout dre se ne glaskomp ket hepken e Breizh diskoulmañ ur gudenn lec'hell. Ken anat all eo avat ne c'hellimp ket seveniñ ar mennozioù-mañ hep en em gavout enebet ouzh ar Stad c'hall evel m'emañ bremañ. An emsaverion ne vezont ket mat peurvuiañ doare an darempredoù a c'hellont kaout gant renerion ar Stad c'hall. Kavout a ra dezho ez eo prest ar re-mañ da gendivizout ganto war ar memes pazenn. Fazioz bras ez int o chom hep merzout mat dispac'halezh o ober.

Gwelloc'h eo dezho emskiantañ diouzhtu an islonk a zisrann anezho diouzh mistri ar Stad c'hall. Heñvel eo an dispriz o deus ar re-mañ outo - ne vern a be gostezenn e vent - ouzh an hini a vag an den a beadra ouzh an den didra a zis-taol e veli : ra soñjor hep muiken, da skouer, e pouez hag e niver an ensavadurioù o deus diazezet ar C'hallaoued aba koun, e kementad divent al levrioù hag an oberennoù lennegel ha skiantel o deus kenderc'het hag embannet, en ur ger, e pinvidigezh an hengoun a biauont hag a nac'homp bremañ lodañ ganto. Moarvat e c'hellomp kemer hor mad er sevenadurioù all : Roparz Hemon en deus merket mat kement-se mat. An dra-se eo avat a vez argarzhed ar muiañ ganto rak dre se e nac'homp reiñ d'o sevenadur-int an dalvoudegezh kravezel - koulz lavaret - a roont-int dezhañ. Distreurel o sevenadur a ziskouez bezañ evito distreurel ar Sevenadur e unan.

Aes eo avat dizarbenn Iorc'h an dud -se. Da gentañ, estreget perzhioù meizel en deus ur sevenadur. Hogen lakaomp n'en defe nemet ar perzhioù-se : erru d'un derez a zo a binvidigezh e teu ur sevenadur d'en emvougañ e unan e meur a stumm. Kemeromp skouer al lennegezh : pa zeu ar skrivagnerion da vezañ re stank ne c'heller mui embann nemet oberoù darn anezho hag ar re a vez moulet gant an embannerion ne vezont ket dibabet evit o zalvoudegezh wirion hogen en abeg d'ar c'hiz, evit abegoù a vruderezh (egiz ma c'hoarvez hiziv gant ar saverion ganacouennoù) ; nebeutoc'h-nebeutañ o deus perzh ar skrivagnerion e Bro-C'hall e buhez wirion ar vro ; ha kement-se a zo gwir evit an arzourion dre vras. Diouzh un tu all, al lennerion n'int ket mui evit heuliañ buhez veizel ar vro, dreist-holl

m'emaint o vevañ er-maez eus Paris a zo ar Vro-C'hall wirion nemeti.

Lavarout a raen en deus ur sevenadur perzhioù speredel ha buhezel da gentañ. E gwirionez, meur a hini a zo eginet diwar ul levr hepken : An Iliad hag an Oduesseia o deus estaolet an hen sevenadur gresian. Ha ganet eo ar sevenadur kristen diwar ar Bibl.

Darn eus ar re a zo a-du gant ar Stad c'hall a damall d'an Emsav e hiniennelezh strizh, ma enebont outi hollvedelezh ar sevenadur a erbedont. Hevelep rebech a vez graet, a gav din, gant kleizidi pe "frankizourion" dreist-holl. Ar re-mañ eo ivez a vag huñvre ar yezh hollvedel.

Soñjal a ra din avat ez eo an hollvedelouriezh-se (pa ne guzh ket an impalaerelouriezh hep muiken) un hent da dec'hout diouzh an atebegzhioù tostañ. Ne c'heller ket eveljust nac'hañ ez eus tu da ziorren/e pep den e pep lec'h er bed (hag un dreistnatur ivez evit ar re a zo kristen). Hogen seurt uhelpl n'eo da dizhout nemet e pep a vro gant broiz o unan.

Ivez, evel ma tamvenegen bremaik, ned eo spez an hollvedelezh nemet un touell implijet gant an impalaerelourion evit digareziñ o gourveli hag o gwaske-rezh.

Dav eo deomp avat barn ar Stad impalaerel(1) e kement lec'h m'emañ oc'h ober he reuz er mare-mañ, en Europa koulz hag er c'hevandirioù all. Mard eo mat ken-urzhiañ Afrika evel Europa evit aesaat an diorreadur

(1) Nag an U.R.S.S. nag ar Stadoù Unanet nag ar "Trañs" nag ar "Spagn", na "Breiz-veur" n'int broadoù gwirion, stadoù impalaerel ne lavaran ket.

armerzhel eo arabat ivez e trofe seurt dezo unvaniñ d'ur mennad impalaerel hep muiken, ar pezh a zo war var da c'hoarvezout o vezañ ma tiwan an impalaeriezhoù an eil diouzh eben diwar gevezerezh. Da lavarout eo, an dispac'h o deus ar Vretoned da gas da benn war o douar a zo da vezañ kaset da benn er broadoù suj all azo a-skign er bed a-bezh. E pep korn eus an tir e tle an dud strivañ da grouiñ ur Stad nevez a sello outo evel personiezhoù dieub ha n'eo ket evel traoù perc'hennet. Dre se e tizh hon Emsav an hollvedelezh wirion.

Hirik eo bet an displegadenn on bet degaset da ober diwar-benn orin va mennoziou. Ar re-mañ avat o deus emdroet dreist-holl etre 1939 ha 1941. Dre vras, a gav din, on bet awenet gant ar youl da empennañ ur framm stadel a glotfe gant va gwir emgav istorel, a vefe diazezet war al lodegezh hag an atebegzh, ken e-keñver politikerezh ken e-keñver armerzh, petra bennak ma ouzon ne vo ket tizhet en un taol ar paliou-mañ, o vezañ ma ne vezo ar Stad vrezhon nemet ur poent-loc'hañ, kentoc'h eget ur pal.

Aner e vefe skritellañ va mennoziou dindan talbennoù a-gleiz pe a-zehoù : n'oufed henn ober nemet diouzh ur savboent gall a zistaolan dres. Eus va emgav Brezhon e-kreiz an ugentvet kantved em eus klasket derc'hel kont hepken (1).

(1) Darn eus ar re a zo bet stummet gant ar gostezenn gleiz c'hall a zo techet d'ober eus houmañ un doare Iliz ha da gemer da c'her-stur : er-maez eus ar gostezenn gleiz silvidigezh ebet. Eus ar gostezenn gleiz c'hall e komzan eveljust. Douget int ivez d'un doare gouennelouriezh speredel o lak da dec'hout diouzh ar re e tiskredont warno bezañ Dehouiz, egiz pa vijent lovred.

Me ' gred em eus merket awalc'h ne oa ket ar Stad ur pal dicuti hec'h unan. Er c'heñver-se e tleer diwall diouzh daou zañjer enebet :

- diouzh un tu ar vesiazelezh ho lak da grediñ - pe da embann da vihanañ - ez eo tizhet an uhel pal pa n'eo ket ;

- ha diouzh un tu all an 'dirvoudouriezh' pe ar 'faezhouriezh' a zegasfe ar stourmer da blegañ da sioù ar gevredigezh, mac'homerezh hag arallakaerezh, dre ma vezont didec'hus. Kempenn ar gevredigezh ne dennfe d' ar c'houlz-se nemet da aotren d'ur rumm nevez a vriention sevel ur sevenadur nevez. Dizenel e vefe seurt savboent rak disoc'hañ a rafe da zidamall youl-vac'homañ un nebeut aotrouion nevez (1). Ar wirionez eo e tiwan bepred an treuzvoaziou hag ar mac'homerezh, evel c'hwenn en ur prad. Hogen emouezañ ouzh an treuzvoaziou-se a zo ar surañ tu da c'hellout stourm outo ez efedus. Ar gwashañ e vefe e teufent da hañvalout 'natur' (evel m'eo c'hoarvezet er c'hantvedoù kent) ken na santfed mui tamm ezhomm ebet d'o dizarbenn.

Ar Stad n'eo e gwirionez nemet ur benveg da gearzhelaat buhez an dud ; n'he deus ket evit se da aloubiñ ha da enstummañ ar vuhez-se. Me ' fell din lavarout n'eo ket ar Stad ar beurgvedigezh ; un hanterour hag ur c'henereer etre ar c'hevredigezhioù liesseurt a ya d' ober broad Vreizh ez eo da gentañ penn.

(1) Djilas e Yougoslavia en deus tamallet an arvar-se ha war un dro mistri nevez ar vro. Evit se ez eo bet la-kaet en toull-bac'h epad nouspet bloavezh.

P e n n a d 12/

Adkregiñ a ran gant va danevell. Ehanou  
 Pask a oa tremenet adarre evel n'eus forzh peseurt ehanou  
 amzer beoc'h. Ne oa ket echu mat ar goañv avat ; glav a  
 rae ha ranket em boa chom er gêr. A-benn ar fin em boa  
 renet ar pep brasañ eus va amzer o lenn romantou gallek,  
 hini Chateaubriant "La Brière", da skouer hogen an oberenn  
 -se n'he doa ket plijet nemeur din : n'he c'haven ket  
 'breizhat' awalc'h ! Romantou all gant Estaunié em boa  
 lennet ivez, pergen "L'ascencion de monsieur Baslèvre"  
 hag aozet em boa zoken un displegadenn hir a-zivout ar  
 skrid-mañ (un displegadenn skolek kenañ, na petra 'ta!)  
 Hag ergerzhout ar maeziou kerkent ha ma kaerae an amzer  
 un tammig. D'ar gwener 28 aviz Meurzh e oan aet war varc'h-  
 houarn betek Etraon, un tregont kilometrad bennak diouzh  
 Sant-Jermen. D'ar mare-se, egiz m'em eus merket e oan o  
 paouez lenn levrioù Anatol ar Bras ha klask a raen adka-  
 vout er gweledvaou a zibune dirak va daoulagad 'patrom'  
 ar gweledva breizhat evel ma oa faltaziet gant ar galle-  
 ger-mañ, pezh a ziskouez e oa isdiorreet awalc'h va bro-  
 garouriezh er penn-kentañ. D'ar yaou e oan aet kuit da  
 vale bro adarre, gant ar soñj da dizhout Sant-Malo. Hogen  
 en devezh-se, ur wech ouzhpenn, e oa kroget ar glav da  
 gouezhañ ha war-lerc'h Plouenn em boa kavet gwell mont  
 betek Dinan. Kantreet em boa e kêr, Eweladennet ar  
 c'harterioù kozh hag araok dont war va c'hiz em boa pre-  
 net un toullad levrioù en ul levr di, en o zouez un ober-  
 enn all eus Anatol ar Bras : "Au pays des pardons" (undastum-  
 adnotennoù beaj e Breizh e-lec'h e kaver un nebeut

bommoù brezhonek : an disterañ bruzhun a oa un teñzor  
 evidon). Distroet e oan o tremen dre Gemblizieg.

D'ar sul 7 a viz Ebrel hor boa bet gwe-  
 ladenn ur soudardad genidik eus Gwaien, an Henaff e anv  
 (kavout a ra din e oa perc'henn e dad da fritur 'Penn-ar-  
 Marc'had'; eus un tiegezh niverus e oa, pemzek a vugale  
 ennañ, ma n'on ket faziet). Edo d'an ampoent o chom er  
 vourc'h ; ur bagad eus al lu gall a zalc'he e garter eno  
 (an darn-vuiañ eus ar soudarded a denne o orin eus han-  
 ternoz Bro-C'hall). Chomet e oa da goaniañ ganeomp. Bamet  
 e oan bet dre ma tiskoueze bezañ ur brogarour breizhat ;  
 e gwirionez e oa anezhañ un doare broadelour-rannvroelour,  
 diouzh giz ar Bleun-Brug pe an Duparc kozh, mar karit ;  
 ken skars e oa gouenn ar vrogarourion endro din d'an  
 ampoent ma voen laouen bras o kejout gant unan a seurt  
 se. Ur paotr mat e oa a-hend-all an Henaff-se ; siwazh,  
 ne oa ket chomet pell ganeomp ; antronoz e oa loc'het d'  
 an Naoned.

Sioul e oa bet an ehanou eta. Kerkent ha  
 ma voen distroet da Roazhon avat e oa tarzhet endro tan-  
 gwall ar brezel a oa chomet morgousket epad un nebeut mi-  
 zioù. Etre ar meurzh 9 hag ar gwener 12 a viz Ebrel em  
 boa notet aloubidigezh Bro-Danmark ha Bro-Norvegia.  
 "An taol edod o c'hortoz a zo c'hoarvezet : evit parrat  
 ouzh ar seziz-adoù ha kavout houarn eo deuet tre an Ala-  
 maned e Bro-Danmark ha kaset o deus bagadoù soudarded da  
 Vro-Norvegia. Kemeret o deus Olen, Bergen..." Krediñ a  
 raed ivez d'ar mare-se e oa ar brezel o vont d'en em astenn  
 e kreisteiz Europa hag e oa an Almaned war-nes aloubiñ

Yugoslavia a-gevret gant an Italianed.

Padal e e rae ar brezel e reuz pell di-ouzh Breizh bepred ha ne santen ket muioc'h eget a-gent e selle an darvoudoù ouzhin. Dalc'het e oa va spered penn-da-benn gant studi ar yezh. Evidon da chom hep kaout kelenner ebet e oan aet buan awalc'h war-raok ; aes awalc'h e oa din kounañ ar gerioù o vezañ m'em boa klevet anezho er gêr a-ziagent. Hep gortoz pelloc'h em boa staget ivez da skrivañ enni. Adal an 11 a viz Ebrel em boa savet va c'hentañ lavarennoù e brezhoneg ebarzh va deizlevr, ur brezhoneg ken disneuz ma n'eus ket tu d'e lakaat dindan d'houlagad al lenner. Epad seizh pe eizh miz bennak e kendalc'his da skrivañ gwech e galleg, gwech e brezhoneg. A-benn ar pennad amzer-se avat em boe dilezet krenn ar galleg.

An diacsañ d'ar mare-se avat e oa kavout levrioù brezhonek. D'ar yaou 18 a viz Ebrel e skriven kement-mañ :

"Aet on er-maez gant C., N. ha Y. Bet on o prenañ levrioù brezhonek e 'ti-Breizh' (1). N'e gaver ket kalz diouto. Kemeret int bet gant ar Prefed peogwir int bet embannet gant an emremerion, a-hervez..."

Evelato, war-dro ar 25 a viz Ebrel em boa pourchaset levr "Frañsez Vallee : "Le Breton en quarante leçons" a oa dalc'hmat e gwerzh d'an ampoent hag am boa kavet talvoudus tre. Ret mat e oa bet din klask un dornlevr nevez rak va "c'hcours élémentaire" a oa bet

(1) Ar stal-mañ a gaver bepred war leurgêr ar Breudoù, e korn-stread Victor Hugo. En amzer-se e oa lec'hiet dek metrad uheloc'h. Soñj am eus em boa pourchaset e-touez va levrioù brezhonek kentañ ur pezh-c'hoari divyezhek gant Kaouissin, a gav din "Bécassine vu par les Bretons". Kalz a reuz a oa endro da "vBécassine" araok ar brezel. Kollet em eus al levr-se abaoe.

skrapet diganin gant va c'helenner an tad Geschwind. Hemañ, a soñj din, a oa displijet awalc'h o welout e pleden gant ar brezhoneg hag e klasken deskiñ anezhañ. A-benn va hegañ, emichañs, e c'houlenne ouzhin e peseurt rannyezh e oan mennet da skrivañ. Diot e kaven hevelep aters : ma n'em befe ket gouezet adal ar penn-kentañ e oa ar brezhoneg ur yezh unvan n'ouzon ket ha kalon am befe bet d'e zeskiñ. Padal ne glasko ket an tad Geschwind herzel war-eeun ouzhin ha diouzh e glevout n'en devoa lamet va levrioù diganin nemet a-benn mirout ouzhin a foraniñ va amzer o vezañ ma tostae poent an arnodenn : d'ur c'houlz e oa bet anv a lakaat ar skolidi da dremen ar vachelouriezh e fin miz Ebrel.

Ar pezh a nec'he ac'hanon ar muiañ d'ar mare-se e oa chom va unan penn gant va mennozioù hep kaout darempred gant brogarour ebet. Bep an amzer e soñje din em boa kavet unan;abarzh pell avat e vézen disqezhet. Komzet em eus eus ar 'vrogarourion' am boa kavet er skolaj : dre ma ne bledent ket koulz lavaret gant ar yezh ne c'hellent ket en em glevout mat ganin. Ne oant ket gwall daer a-hend-all daoust d'ar pezh a embannet. E fin miz Ebrel e kredas din bezañ kavet unan a oa dedennet gant ar yezh : ur Gwenedad e oa, - nevez-skoliad emichañs ha na chomas ket gwall bell er skolaj rak e ankounac'haat a ris kerkent. E pep lec'h ivez e klasken brezhonogourion; kejet em boa gant unan un drovezh, d'ar yaou 3 a viz Mae, p'edon och obar ur gerzhadeg a 25 kilometrad war droad - e ser gourdonerezh soudard - etre Roazhon, Bezon ha Toriniég, un douarnenezad a-hend-all ha klaskbet<sup>em</sup> boa komz

brezhoneg gantañ, da lavarout eo eskemm un nebeut geriennoù diwar-benn an amzer moarvat.

E gwirionez e oan digenvezet a-grenn.

E derc'hent an devezh-se e skriven : "Petra a c'heller ober pa chomer e unan penn? An emrenerion o unan n'ouzon ket petra a dalvezont. Ar pezh a zalc'han ar muiañ dezhañ n' eus ket tu d'her c'has da benn... Lavarout a reont ez int Breizhiz ha ne reont forzh ebet eus Breizh..."

El lavarenn a skrivan amañ diwar-benn an 'emrenerion' eo ret gwelout levezon ar pezh a oa moulet er c'hazetennoù pe a veze lavaret endro din. E gwirionez ne ouien ket ouzh piv treiñ evit gellout stourm evit Breizh.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 13

D'an 10 a viz Mae e oa deraouet argadadeg an Alamaned war dalbenn ar C'hornog. E Sant-Jermen edon en devezh-se (moarvat evit gouelioù ar Pantekost). Abred diouzh ar beure (ne oan ket savet c'hoazh) em boa klevet ar c'heloù er skingomz. Fromet bras e oa bet an holl gant ar c'heloù-se, egiz pa vije tarzhet ar brezel a nevez. En em voazet e oad ouzh an doare peoc'h a rene er c'hornog abaoe mizvezhioù ; meur a hini, moarvat, a zamc'hoanage e vefe padet ar peoc'h-se da viken hag e vefe bet tu mar-teze da herzel ar brezel kent na vije dirollet da vat.

D'ar beure e oan aet betek ar vourc'h hag eno, eveljust, em boa kavet an holl dud mantret, dreist-holl

ar merc'hed o devoa gwaz pe vab war an talbenn.

Epad an devezhioù war-lerc'h em boa heuliet argadadeg an Alamaned o selaou ar skingomz hag o lenn ar c'hazetennoù. Ar re-mañ a vemege hepken avat an emgannoù a c'hoarveze er Beljik, dalc'h ar Breudoù e Brussel, hag ar bombezadegoù. Diaes bras e oa d'ar mare-se eveljust rakwelout penaos e oa ar brezel o vont da emdreiñ. Va zud endro din a soñje e vije ar brezel-se heñvel ouzh an hini kentañ : harzet e vije an Alamaned un tu bennak, stabilaet an talbenn hag e vijed krog gant ur brezel fozioù nevez. Tregaset e oan gant ar soñj-se rak en em c'houlenn a raen pet kantmiliad a Vretoned a vefe lazhadeged adarre kent ma vije fin d'ar walenn. "Penaos en em gavo Breizh," a skriven "m'hé devez kolloù ken spontus hag ar wech diwezhañ? Ha daoust da se e vo graet graet outi ken gwazh ha biskoazh gant ar gouarnamant gall..."

Diwar neuze e oa ar spont o ren e pep lec'h, broudet gant ar c'helaouennoù a vourre o tezevell 'euzhusterioù' ar bagadoù soudarded Alaman. Kentañ a raed e lakae ar re-mañ en Izelvroioù o frizonidi da gerzhout dirazo d'o gwareziñ. Seurt kacziou a voe kiriek evit darn d'an dec'hadeg a luskas milionoù a repuidi war an hentoù hag a strobas bagadoù soudarded al lu gall e-kerzh ar si-zhunioù da heul.

Setu a-hend-all un nebeut pajennadoù eus va deizlevr d'an ampoent-se :

Disul 12 a viz Mae 1940  
Bombezadegoù er Beljik hag e Bro-C'hall

:148 den lazhet ha meur a gant den gloazet e Bro-C'hall, e Nancy, Dijon, Pontoise Lille h.a. Meur a gant den lazhet e Beljik. Harzlammerion alaman, a-wechoù gwisket e sivil (1), a gouezh eus an neñv e pep lec'h e Bro-C'hall, er Beljik, en Izelvroioù; ambrougadegoù repuidi a gej war an hentoù gant ar bagadoù soudarded saoz hag gall o sevel d'an talbenn; boulc'het eo an emgann etre ar Stêr Vozel hag an Izelvroioù; taer eo ha krennus e vo, hervez a lavar an holl; aet eo an Alamaned un tammig war-raok met kolloù bras o deus bet: sed pezh a glevan amañ e Sant-Jermen er skingomz a ro bep eur keleier nevez. Fromet bras eo an holl, dreist-holl ar soudarded c'hall eus hanternoz Bro-C'hall a zo o terc'hel o c'harter er vourc'h, a oar emeur o vombezañ o c'hêrioù hag a glask kaout keloù a bep tu (dec'h ez eus deuet daou anezho du-mañ da selaou ar skingomz). D'ar beure-mañ ahend-all eo bet distaget ar sarmon gant ur beleg eus ar vro-se: awenet e oa eveljust gant an darvoudoù.

Er skingomz hon eus klevet un danevelladur diwar-benn pezh a c'hoarvez er Beljik: un daolenn eus Brussel; hini an hentoù strobet gant ar repuidi, ambrougadegoù soudarded iueoz ar Re Unanet h.a. Un danevelladur ivez diwar-benn ar Balkanioù: anv a zo bet eus Yougoslavia hogen pezh a c'hell c'hoarvezout eno a hañval bezañ a eil-pouez hiziv; ne glever mui kel eus Italia.

Hinon eo an amzer; an nevez-hañv a zo o vleuniañ. Poan a zo da grediñ ez eus tud o vervel war (1) Setu pezh a lennen er c'hazdennoù pe a gleven er skingomz. N'ouzon ket ha gwir eo pe get seurt diskleria-  
durioù.

an tachennoù-emgann eizh-kant kilometrad ac'hann.

Dimeurzh 14 a viz Mae 1940

Hiziv e teuan endro d'ar skolaj. Dont a ra ar c'heloù o deus tizhet an Alamaned at stêr vMeuz e Liège, Dinan, Sedan, Namur. Arloupet eo an emgannoù etre Gallaoued, Belgiz hag Alamaned a dag gant ernez. An harzlammerion a gouezh atav eus an neñv ha darn a zo bet linchet e Brussel. An Alamaned a ya war-raok dalc'hmat en Izelvroioù. War a lavarer e vez bombezet ar c'hlañv-drenioù gant an Alamaned, ar c'hlañvdiou, an trenioù hag ambrougadegoù repuidi, e Bro-C'hall, er Beljik, en Arden, Krogadoù a zo endro da Longwy, e Bro-Luksemburg, e pep lec'h. Mard eo degouezhet an Alamaned da Namur avat e c'heller en em c'houlenn petra o deus graet Belgiz epad ar c'heit-se. Er skingomz a-hend-all e roer bepred alioù ha kemennadurioù war wel ar bombezadegoù. N'ouzon pegoulz ez echuo an emgann-mañ na peseurt disoc'h en devo hogen diwar vremañ e c'heller bezañ sur e vo bet lazhet tud a zekmiliadoù. Pebezh follentez! Egiz pa vije re-boblet Europa. Kement-se a rofe c'hoant da unan da rannañ Europa en un niver a stadoù bihan nep-tu na c'hellfent ket ober brezel an eil d'eben...

Diriaou 15 a viz Mae 1940

Aet eo an Alamaned dreist d'ar stêr vMeuz eus Sedan betek Namur. Rotterdam a zo en em zaskoret d'erc'hent dec'h. Dec'h eo bet kemeret Sedan. Leurgêr ar marc'had a zo bet mindrailhet e Mézières. Lille a zo bet gwall dizhet...

Gwallstrafuilhet e oa an holl er skolaj en devezhiou-hont eveljust. A bep seurt mennoziou droch a veze estaolet gant hini pe hini ; an tad Layec, kelenner ar c'hentañ klas A, da skouer, a oa ali e ranked diouennañ an Alamaned. Roazhon, padal, ne oa ket tizhet war-eeun gant ar brezel hag ar vuhez a gendalc'he c'hoazh d'ar mare-se didrubuilh awalc'h. D'ar yaou 15 end-eeun em boa tremenet ar 'Brevet sportif' egiz pa n'em bije bet netra ken d'ober. Koulskoude e oa krog ar repuidi da erruout eus ar Beljik hag ar gwel eus o reuzedigezh an doa plantet kalonad e meur a hini.

Evidon-me e oa ar marevezh-se ur marevezh diaes ha poanius. Ne dizhen ket diferañ un emzalc'h politikel start. Sachet e oan etre va mennoziou nevez a oa o tiwanañ em c'hreiz hag a denne da gemm a-grenn va spered-egedh oc'h ober ac'hanon ur Brezhon penn-kil-ha-troad ha va stummadur gall rik a oa seul ziaesoc'h da hejañ kuit ma oa kreñvaet d'an ampoent gant un aergelc'h gall trelatet diwar an darvoudoù hag entanet gant bruderezh ar c'helaou-ennou hag ar skingomzerezh. Daoust ma komprenen ervat e oa ret da Vreizh kaout ur stad evit mirout be broadelezh e klasken abegoù evit chom hep en em gavout distaget a -grenn diouzh ar re a gemere perzh a-zevri er brezel endro din. Gwech e c'hoarveze ganin imbroudañ ar pezh a c'helle bezañ uhel ersevenadur gall (an talvoudoù a vefe bet da zifenn ennañ - ha moarvat e kounen neuze pezh am boa nevez lennet ebarzh levr Palaux) ; gwech e tagen dizamant an unrenerion a oa kiriek d'ar brezel. Seurt savbontoù e gwirionez n'oa doa netra da welout gant Breizh war-eeun. O vezañ avat ma

ne oa emsav ebet ken d'ar mare-se, o vezañ ivez ma n'em boa darempred gant stourmer gwirion ebet (ar 'vrogarourion' a oa endro din n'oa doa mennoz gwirizennel ebet diwar-benn Breizh, egiz m'em eus merket) e chomen va unan penn a-grenn hag an emgav-se a oa diaes tre padout outañ. Evel brogarour breizhat va unan en em santen tamallet gant an holl ha rak-se e klasken moarvat derc'hel un ere bennak gant ar gevredigezh c'hall e tennen d'en em ziframmañ diouti, goude ma ve en desped din. Rak-se ivez em boa graet evel ar re all oc'h heuliañ pleustradennoù ar gourdonerezh soudard. Va c'hamaladed avat a wels sklaeroc'h ennon egedon va unan peogwir e rebechent ouzhin heuliañ ar c'hentelioù-se evit stourm evit Breizh diwezhatoc'h, nemetken, rak a-hend-all en em zougenn penn-da-benn evel ur brogarour breizhat ; diwirion ha pilpouz e oan eta oc'h ober evelto (1) : ret e oa bezañ gall pe chom hep bezañ. Ar wirionez a oa ganto hag abarzh pell e ris ivez va dibab.

Ur gobidell a c'hoarvezas ganin en devezhiou-se a ziskouez pegen forc'hellek e vane va mennoziou ha penaos n'em boa ket skiant e gwirionez eus an dalc'h anezho. En deiz ma oa bet toullet talbenn al lu gall e  
(1) An hevelep c'hoant d'en em zidamall a lusk re all hiziv d'en em dremen da sokialourion, lakaomp, er framm gall ha da genlabourat gant strolladoù ha kenurzhadurioù ha na reont foeltr ebet gant Breizh e gwirionez.  
E ser bruderezh eo ret merkañ ez eo start tre d'un den, pogen desket bennak e ve, en em ziwall diouzh ur bruderezh ha na denn ket war-eeun d'e gendrec'hadurioù donañ. Un nebeut mizioù war-lerc'h e teuis da vezañ tizhidik d'ar bruderezh alaman dre ma oa dalc'het va meiz gant an anataenn e vefe distro ur gouarnerezh gall egiz araok ar brezel un droukzegouezh evit Breizh (pezh a oa gwir in abstracto). Mankout a rae din d'ar mare-se mennoziou start diwar-benn ar c'hudennoù a bolitikerezh hollek. Ur c'hoarvezad boutin ez eo unan a seurt-mañ. N'eus nemet sellout penaos darn eus ar re yaouank e Breizh a zo bet dedennet gant ar sokialouriezh, evit darn, dre ma harpas ar gostezenn sokialouriezh gall an emsaverion aljeriat etre 1954 ha 1962. Ne gomzan ket eus sokialouriezh hec'h unan met eus kenlabour etre strolladoù gall na breizhat. Daoust hag ar sokialourion c'hall hag alaman a genlaboure er memes framm epad ar brezel ?

Sedan e oan deuet er-maez e kêr n'ouzon mui war beseurt digarez. Graet va c'hefridi ganin e tanzeen distreiñ d' ar skolaj pa oa troet ennon mont betek hall an "Ouest-Eclair". Ur gronnad stank a dud a oa bodet eno o lenn ar c'heleler edod oc'h enskrivañ war an taolennou e lein ar sal. Dres avat e oa bet merket munudoù diwar-benn drouziwezh Sedan. An dud a chome dilavar, skodeget moarvat gant an nevezinti. Gwell em biije graet o tevel evelto moarvat. N'ouzon ket peseurt stultenn am luskas da estaolañ va sebez dirak un darvoud a oa dic'hortoz kaer din. D'am amez-eion, dievezh a-grenn, em boa lavaret, a gav din : "En dro-mañ ez eus bet graet un taol-kaer avat ! " pe, marteze, rak n'em eus ket mui soñj mat : "An Alamaned o deus graet aze un taol-kaer." Dleout a rajen bezañ diwallet muioc'h ouzh piv e oan o komz rak bez e oa anezho daou ofisour eus al lu gall a oa o tichañsañ tremen dre aze. Ar re-mañ, na petra 'ta, n'o doa ket prizet meurbet va sellboent 'estetek' pe 'sportel', mar karit, eus an afer rak o c'hlevout a ris o c'hrozmolat adreñv va c'hein. A-greiz-holl en em strinkjont warnon hag int da begañ ennon ha d'am stlejañ betek komiserdi leurgêr an ti-kêr e-lec'h am daskorjont d'ur c'homiser bennak en ur ziskleriañ peseurt komzou am boa distaget a-hervez. Diouzh o ali ne c'hellen bezañ, faezhour egiz ma oan, nemet un ezel eus pezh a oa anvet ar 'pempvet ban'. Aze e oan paket brav avat!

Ar strafuilh ar brasañ a oa o ren e dia-barzh ar c'homiserdi d'an ampoent hag ar c'homiser em boe afer outañ a oa kollet e skiant gantañ, pe dost. Goude bezañ kunujet ac'hanon epad n'ouzon pegeit amzer en doa savet

un danevellskrid diwar-benn ar gobidell (1). Goude-se e oan bet serret ebarzh ur c'hell-bac'h a-gevret gant ul lonker bennak a oa mezv dall, hogos, ha na ehanas ur vunutenn a rogetlat keit ha ma chomis gantañ. A-benn ar fin, war-dro dek eur noz e oa deuet rener ar skolaj da gerc'hat ac'hanon : moarvat e oa bet pellgomzet outañ evit gouzout hag-eñ e oan skoliad eno evel m'em boa diskleriet. Den n'en doa goulennet diskleriadurioù diganin er skolaj. Trubuilhet awalc'h e oa an holl gant an darvoudoù hag ar re-mañ a oa bet lakaet kiriek d'ar pezh a sellent evel ur barr diskiantegezh. a-berzh an daou ofisour gall.

E gwirionez, da e ve din klask diskleriañ (2) va emzoug o vezañ ma klasken c'hoazh en devezhiou-se digad

(1) Ne voe ket klasket trouz ouzhin diouzhtu en abeg d'an danevellskrid-se : an Alamaned a oa erruet damc'houde. Epad ar goañv 1945 pe e deroù an nevez-amzer e oan bet dec'halvet evit an afer-se. En arme c'hall e oan bet soudardet d'ar mare-se avat ha va mamm a oa aet da welout eus petra oa kont. Ne voe heuliadenn ebet d'an afer-se.

(2) Evelato em boa meizet mat d'ar mare-se endev ne oa ket tu da saveteiñ ar yezh hag ar vroadelezh hep ar stad. Adka- vet em eus un notenn hep deiziad war un tamm paper hogen zo bet savet e tro an devezhiou-se emichañs e-lec'h e notan peseurt gonidoù a vefe deuet da Vreizh m'he defe gellet mirout he dishualded : he lennegezh, he sevenadur, he gouizieion he defe bet h.a. En notenn-se e tamallen ivez Bro-C'hall en abeg d'ar Bonedoù ruz ha da lazhadegoù ar brezel araok.

En ur c'harned all, dindan an deiziad 25 a viz Ebrel 1940, e skriven ar prederiadennou-mañ : "A-benn ar fin, ar vroadelezh' a zo ur bourd, ha gant an nerzh... Diouzh an degouezh eo ar 'vroadelezh' : gwir an hini kreñvañ en deus stummet alies ar 'vroadelezh'... Goude holl, ma vefe lezet an Tcheked dindan beli an Alamaned, e teufent da vezañ marteze alamanoc'h eget an Alamaned a-benn 300 pe 400 vloaz. Neuze eta..." Anat eo e klasken en em zieubiñ d'ar mare-se diouzh meizadur kravezel ar 'vroadelezh' c'hall. Gwelout a reer ivez e implijen ar ger 'broadelezh' diouzh ar ster lezennel a 'stad-aparchanterezh' evit darn.

reziou evit mirout un ere bennak gant ar C'hallaoued.

Diouzh ma kounan hiziv e oa bet skoet va spered gant doare dic'hortoz an darvoud ; en em gavout a raen en un taol dirak un degouezh ha n'em boa ket kredet biskoazh e vije gallus un deiz : diskar ar Stad c'hall ; moarvat n'em boa ket hetet kement-se a youl gaer betek neuze ; evel m'em eus merket, argarzhia a raen an ditak-tourion fagat egiz an holl endro din ; hogen bremañ ma oa c'hoarvezet an diskar-se e klasken diouzhtu an tu da dennañ dioutañ pezh a c'helle bezañ bevez evit Breizh ennañ a-benn sevel ur stad broadel.

Eveljust ne oa ket fur va emzoug ; e gwirionez e oa aniel rik. Moarvat ez eo bet savet ar stad tchekat, lakaomp, diwar zispennadur an impalaeriezh aostriat c'hoarvezet war-lerc'h ur brezel kollet ; heñvel, adkavout a reas Aostria he frankiz pa gouezhas an trede Reich en e boull. Hogen ma ranker sevel ur Stad e Breizh evit saveteiañ yezh ha broadelezh eo anat ivez ne c'hell ket ar Stad-se bezañ savet n'eus forzh penaos da n'eus forzh pe vare. E 1940 avat ne oa ket prest pobl Vreizh da zegemer an emrenerezh na da dennañ he mad dioutañ. Ha lakaomp e vefe bet prest e vefe bet ret divizout ha reizh e oa degemer ar frankiz digant ur stad na stourme ket hepken evit paliou broadel klasel, ma c'heller lavarout, hogen ivez war wel ur mennad politikel ha na glote ket gant hini hor pobl n'eus forzh penaos.

(1) Ken diboell all eo, a gav din, gortoz diskoulmadur kudenn Vreizh diouzh trec'h ur gostezenn c'hall bennak. Muioc'h diboell eo zoken gortoz n'ouzon peseurt frankiz digant ne vern pe ouarnerezh gall. Ar bobl hec'h unan a zle sevel he frankiz.

Kement-se a lavaran avat seizh vloaz warn-ugent war-lerc'h. E 1940, an Istor a hañvale bezañ digor ha pep tra gallus daoust ma oa ar gredenn-se un touell (1).

\*\*\*\*\*

Pennad 14

War-lerc'h Sedan e oa aet an darvoudoù buan war-raok. D'ar sul 26 a viz Mae e oa emgannoù endro da gCambrai. "Gwell a se," a skriven ebarzh va deizlevr, "n'emaomp ket mui o vevañ eno. Moarvat ne chom ken kalz tra eus pezh a zo bet hon ti..." Ar soñj-se am lakae da euzhiañ ouzh ar brezel, dreist-holl unan e-lec'h n'o doa ar Vretoned netra da c'honit hag e-lec'h o doa er c'hontrol pep tra da goll.

Damc'houde e oa bet paket al luoez gall ha saoz ebarzh godell Dunkerk. D'an 28 a viz Mae e noten e oa erru an Alamaned da vBoulogne ha da Ostend e Flandrez (di ez a Flandreziz ha Walloniz da dremen an hañv war an aod). D'ar c'houlz-se he doa en em zaskoret an arme velgiat. An emzaskoridigezh-se avat a oa bet tamallet c'hwerv da roue Belgiz neuze, Leopold e anv, egiz un taol trubarderezh. Er skolaj, goude-se, ne oa mui anv gant an impalaerelourion c'hall en em gave endro din nemet a stagañ ... Belgik ouzh Bro-C'hall hag ober anezhi ur rannvro c'hall, evel ar re all (e-touez ar re-se e oa ar paotr a oa prest da zeskiñ brezhoneg d'an holl Vretoned)!

(1) N'em eus notenn ebet diwar-benn ar gobidell an eus danevelllet er pennad-mañ ha gallus eo e vefe c'hoarvezet en deiz ma oa bet paket ar Saizon-Gallaoued ebarzh godell Dunkerk pe c'hoazh en deiz ma voe toulllet an talbenn gall war ar Stêr Somme.

Padal ne zeuen ket a-benn d'en em santout a-unan gant va c'hamaladed e nep keñver. Setu a-hend-all un nebeut linennadoù tennet eus va deizlevr :

Diriaou 30 a viz Mae 1940

Kenderc'hel a ra kad Flandrez hogen abaoe m'eo ellet Belgiz ne c'hell ken bezañ kaset da bennvat gant ar C'hallaoued hag ar Saozon. Dunkerk a zo deuet da vezañ un doare kreñvlec'h ha n'ouzer ket re vat petra a c'hoarvez en diabarzh. An holl a gomz eus ar gad-se dibaouez hogen dija eur krog da voazañ. A-benn ar fin n'eo deus ket kalz a faltazi ; mennet int da vont d'ar brezel ha d'en em gannañ ha n'int ket gouest da veizañ petra eo ober brezel ha petra en em gannañ. Ar marv n'eo nemet ur ger evito. Re all a sell ouzh ar soudarded evel ouzh 'kig-kanol' hag a soñj dezho ez eo gwell koll tud eget binvioù-brezel. Diseblant ha disant a-grenn ez int. Marvailh a sav etrezo alies ivez diwar-benn ar goudevezh-brezel ; nec'het int en dro-mañ : gwall ziasur eo an amzer-da-zont a zo ouzh o gortoz.

Italia Mussolini a zeu da vezañ distrellet muioc'h-mui hag hervez a lavarer e vefe gouest da zont tre er brezel abarzh pell, pezh a zegasfe marteze an Amerikaned da stourm a-gevret gant ar Re Unanet ; marteze ivez en em ledo ar brezel er Balkanioù (1) ...

Setu da belec'h e tisoc'h an unrenerezhioù. Diskiant eo Hitler ha Mussolini ha diskiant ar re o deus roet kement ha ken groñs beli d'un den hepken war gemend-all (1) Kement-se a lommen moarvat er c'hazetennoù. Spi diwezhañ ar C'hallaoued en amzer-se e oa an Amerikaned.

a dud... Ne c'heller ket gouzout pezh a c'hell tremen ebarzh empenn un den..."

Diwar neuze ha ken na voe echu kad Vro -C'hall ne gavis ken amzer koulz lavaret da skrivañ nemet. notadhoù ! diskrahet war ar prim. Heuliañ a raen pleustradennoù ar gourdonerezh soudard bepred ; d'ar c'hentañ a viz Mezheven e oan aet da dennañ fuzuilh e redva-kezeg ar 'Gayeul', war hent Filger ; d'ar sul eil hor boa graet adarre ur gerzhadeg a 25 kilometrad war droad gant ur samm a 15 kiload war ar c'hein ! Emichañs e tlee soudarded allu gall mont betek Berlin war o zroad.

E-keit-se e errue dalc'hmat ar repuidi eus hanternoz Bro-C'hall, a engroezioù stank, ebarzh kirri-tan pe gant moziou-dezougen all. Unan eus va c'henskolidi T. a oa aet da emouestlañ el lu gall. Ar speredoù a oa krog da alteriñ. Klevout a raen lavarout - ne oa ket ar wech kentañ eveljust - e oa gwerzhet an emrenerion d'ar 'Voched' hag e oa bet serret ti-Breizh gant ar polis (en ti-se em boa prenet va dornlevrioù brezhonék) (1) dre ma oa a-du ganto dre guzh ar re a zalc'he ar stal.

D'ar merc'her 5 a viz Mezheven e oa bet boulc'het dalc'h diwezhañ brezelekadenn Vro-C'hall. Skrivañ a raen :

"Argadadeg nevez adal ar stêr Somme betek ar mor. Pezh a lavar Pichon ha... (n'em boc ket amzer da verkañ hag eveljust em eus disoñjet krenn hiziv). Londreziz a zo o c'hortoz kas da benn emgannoù-straedoù en o c'hêr.

(1) N'em eus ket gallet gwiriañ ar vrozenn-mañ. Diskred a oa eveljust war gement hini a blede gant ar yezh e stumm pe stumm.

Gwrizias eo an amzer atav. Skuizh on.

Diriaou

Deiziad ar vachelouriezh a zo bet lakaet abretoc'h. L. a zo bet kaset kuit eus ar skolaj. 41 emamp er c'hlas ; unan a zo deuet eus Cambrai, unan all eus Valenciennes. A-hervez e vo aozet ur vachelouriezh arben-  
nik evit ar repuidi.

Diriaou 13

Mont er-maez gant C. ha N.

War-lerc'h an deiziad-se ez eo echu ar c'harned e-lec'h e skriven va deizlevr ha va notennoù. Heuliañ a rin hiviziken un danevell am boa savet e Gwaien e-kerzh an teir sizhun a dremenis eno e fin miz Mezheven hag e deroù miz Gouere. Bez ez eus anezhi ur c'haicrad a 60 pajennad a zezrevell donedigezh an Alamaned e Breizh. Diglok eo avat an danevell-se.

Digwener 14 a viz Mezheven 1940

Abaoe maz eo bet divizet da vat deiziad ar vachelouriezh, Geschwind - en doa kredet e teufemp a-benn diboan kaer da welout ar program penn-da-benn - a hast afo bremañ da zrailhañ deomp ar pep retañ eus pezh a ranker anaout diwar-benn pennañ skrivagnerion ar program a chom deomp da vras-studiañ (rak n'eus ket anv a studiañ anezho a-zevri eveljust). Daleet en deus pell amzer gant Musset en deus roet tro dezhañ da sevel ur studiadenn gentelius diwar-benn ar garantez. Goude-se en deus diskleriet testenn un dezrevelladenn e sigur "arourgerz Napoleon el lenne-gezh c'hallek" ; ne echuas ket e zisplegadenn hep bezañ

bet ginet meur a wech en abeg da "incorrection" un nebeut skolidi (e-touez ar re-se edon rak paket e oan bet gantañ o lenn "Pâques d'Islande" gant Anatole Le Braz, bet pourchaset din da veure). E-pad ar peurrest eus ar gentel eo chomet Geschwind da vouzhat egiz ma ra bepred war-lerc'h e varradoù imor, ma tibunas a-benn-herr g'hag a vouezh izel e sac'had notennoù en ur resizañ bep an amzer ne dalveze ket ar boan e gwirionez en em skuizhañ evit "une bande de goujats pareils".

Sioulaat a reas ar barrad arnev goude ar gentel ha bez e c'hellis kaout va levro tont er-maez eus ar c'hlas.

Bemdez ez a war vihanaat niver ar skolidi a chom er c'hlas. An holl a ya kuit, war-du ar Su peurlie-sañ ; Dejeux a zo erru er 'Massif Central', a-hervez ; Dauvergne, de Fellin, Angôt ha re all ne zeuont ket mui d'ar skolaj ; Bittebière a zo loc'het ivez etrezek ar Su a-gevret gant e dad. Padal e konter n'eus ket tu da dreizhañ al Liger : ur mignon da dTostain n'eo ket deuet a-benn ; Bourdin - o chom e Flers emañ - en em c'houlenn pelec'h emañ e dud a zo en em lakaet en hent war-du ur gêr bennak eus ar 'Char-entes'.

Bepred e sav marvailh diwar-benn an darvoudoù ; ali eo an holl ez eo aet an traoù da fall hogen arabat eo embann an dra-se re fraezh rak tamallet e veger diouzhtu gant paotred ar "mont a ra an traoù eus ar gwellañ" a serr ho kenoù dre ober 'faezhourion' eus ar re - eveldon - a nac'h krediñ evel gwir bater kement keloù-mat a vez embannet gant ar re-se a vare da vare.

Gant Layec hon eus bet tro da gomz ivez. Hemañ n'eo ket gwall drugarezus ouzh ar gouarnamant gall, ma tezarverner diouzh pezh a lavare d'abardaez goude koan, araok ar veilhadeg. Ma selaoujed outañ e vije fuzuilhet an hanter eus ar C'hallaoued da vihanañ ; gant an hanter all avat e vije tu d'ober brezel a-zevri. Reynaud hag e vandenn a vije da fuzuilhañ e-touez ar gentañ : furzod e ranker bezañ evit strafuilhañ ar boblañs gant ar galv dic'hoanaget en deus graet Reynaud da Roosevelt (1).

Ouzh an Alamaned avat e ranker bezañ muioc'h didruez c'hoazh. A-benn o dizonañ diouzh an doug mantrus o deus d'ober brezel e ranker implijout "la manière forte..." An Actrou Doue en deus roet skouer deomp peogwir en deus krouet an ifern, emezañ evit hor c'hendrec'hiñ. An holl re a zo o selaou ouzh e brezegenn n'int ket evit mirout a soñjal ez a dreist un disterañ hag a-unan int evit anzav ez eo deuet da vezañ may o lakaat e al-bac'henn gant ar Romaneda zo egiz ma lavar "des mitres d'énergie qui n'eurent aucun sentiment" ; erru eo poent kas anezhañ da gemer e leve, a glevan endro din.(2)

Da c'hortoz em eus roet va c'hartenn piv-oc'h da c'hGaudry evit reoliekaat anezhi : ezhomm a zo anezhi evit kemer an tren. A-hend-all n'en em chaler ket kement-se ; Bretagne a ren e amzer o lenn levrioù en deus lakaet Druart da brezañ hag e soñj emañ lakaat prenañ

re all ; Druart a ra kemendall evidon ken ez eo krog hor

(1) Reynaud ha paotred all ar gouarnamant gall a oa kement a c'hwenn en o loeroù en devezhioù-se ma oant doreket da "Notre-Dame" e Paris, marteze evit pediñ, kenkas e vije ur "Bon Dieu" bennak en neñvoù (ne ouzer morse!) Poent e oa.

War ar marc'had en doa diskleriet Reynaud e oa prost da grediñ er "burzhud" peogwir e krede e Bro-C'hall (egiz pa vije Doue ur sigoter bennak). Ar wellañ pedenn e seurt degouezhioù e oa c'hoazh en em gannañ.

(2) Ul latinegour hep e bar e oa bet an tad Layec p'edo e barr e vrud. Hogen, egiz m'em eus merket, ne oa ket mui gouest tre da gelenn d'ar mare m'en anavezis.

c'hefridiour kaezh da grozal, sammet ha maz eo gant al levrioù stank a c'houlenner digantañ prenañ pe werzhañ. Gwir eo ivez n'hon eus ket mui kalon da studiañ pa welomp penaos e tro an darvoudoù, petra bennak ma kredomp start atav e tremenimp ar vachelouriezh (ne vo lodenn dre gomz ebet avat, hervez a zo bet kemennet deomp).

Disadorn 15 a viz Mezheven 1940

D'ar beure-mañ, goude ar gentel, dispac'hadeg. Dav eo deomp diannañ ha mont d'en em staliañ ebarzh studi ar skolidi lojet bihan, gwechall hini ar skolidi diavaez bras. Ar skolaj a zo aloubet penn-da-benn ; n'eo ket avat gant repuidi, evel ma oa bet lavaret - daoust maz eus un toullad anezho er c'hlasoù - hogen gant gloazidi o tont eus Paris ; lumzeion a dremen-distremen hep ehan er c'hlasoù war glask kambroù goullo.

En em staliet hon eus well-wazh en hor manva nevez a seblant brasoc'h eget an hini emacomp o paouez kuitaat. Gant kement-se avat n'eus ket mui tu tamm ebet da labourat ; an holl a lenn romantoù pe gelaouennoù. Dre ziouser a well lennadur em eus staget da lenn un dorn-levr a vredoniezh am eus kavet dre aze ha na oa ket gwall fentus.

Gortoz a reer respont Roosevelt hogen hep en em chalañ ; n'eur ket evit faltaziañ e c'hellfe an Alamaned degouezhout e Breizh ; evelato e kav d'an holl ez eus bet graet goap outo e-kerzh ar mizioù araok : lakaat int bet da grediñ e vefe awalc'h aod-sezizañ an Alamaned evit rediañ anezho d'en em zaskoriñ a-benn ar fin (1).

(1) Ger-stur ar bruderezh brezel gall a oa neuze : "Nous vaincrons parce que nous sommes les plus forts." Met, egiz er vojenn, n'eo ket awalc'h bezañ kreñv : ret eo bezañ speredek ivez.

Hini pe hini en deus c'hoazh andezo da skeiñ war varc'h-houarn etrezek ar Su, evel Gaudry. Kontañ a reer ez eo bet bombezet porzh-houarn Laval hag emeur o c'hortoz mui pe vui e ve bombezet hini Roazhon, hep krediñ e c'hellfe an dra-se c'hoarvezout da vat. A-hend-all, Geschwind a ali ac'hanomp d'en em lakaat er goudor ma tegouezhfe - "par impossible", emezañ - an Alamaned e Breizh rak ar re-mañ, a-hervez, o deus gwall-vennadoù evit pezh a sell ouzh yaouankizoù Bro-C'hall (1). Evitañ, e unan, a ouzhpennas, prest d'ar verzhierinti, kement-se n'en devoa pouez ebet."

D'abardaez en devoa graet an tad Geschwind e 'gentel ziwezhañ', ur gentel vrogar entanet evit Bro-C'hall, na petra 'ta. Kemeret en doa da destenn gerienn an hanezour gall Michelet 'La France est une personne' 'Bro-C'hall a zo un ene'. Ur wir brezegenn en devoa graet neuze, ur brezegenn aozet gant kalz aked, en ur ober jestroù e-leizh, trivliet e vouezh, daerou en e zaoulagad ; gant seurt prezegonn avat e oan bet hegaset kentoc'h eget fromet. Re anat e oa din e soñje va c'helenner, lennegour ha ma oa e kontadenn anavezet mat ar skrivagner gall Alphonse Daudet e-lec'h eo danevellet kentel c'halleg diwezhañ ar skolaer gall en Elzas da zerc'hent donedigezh an Alamaned e 1871. Eñ ivez eta a rae e gentel c'halleg diwezhañ araok donedigezh ar varbared. Me avat n'oan ket evit mirout a soñjal, tra m'edon ouzh e selaou, penaos e oa mouget hor yezh gant

(1) Ar brud a rede e oa an Alamaned e soñj ... spazhañ an holl dud yaouank o defe gallet skrapañ hag ur c'hamalad din er skolaj - dont a reas d'ar S.B.R. epad ur pennad a-c'houdevezh - a chomas da guzhat er parkoier epad eizh devezh bennak war-lerc'h ma voe erru an Alamaned.

ar galleg-se end-eeun hag awalc'h e oa ar soñjezon-se evit reiñ da brezegenn va c'helenner liv ur c'hoariva pilpouz am lakae da heugañ. An darn-vuiañ eus va c'hamaladed ne oant ket evit lodañ va savboent eveljust ; hag esmaet e oant bet gant komzoù an tad Geschwind ; hini - ennoù zoken o doa stlaket an daouarn dezhañ e fin ar gentel.

Da beder eur e oa deuet va div c'hoar henañ d'am c'havout en divizva. O klask distreiñ da Sant-Jermen en abeg d'an darvoudoù e oant hogen ne ouient ket penaos ober : ouzhpenn ur gartenn piv-oc'h e ranked kaout neuze un aotre arbennik evit kemer an tren. Kavet e oa bet ganto ur c'hozh karr-tan - ar perc'henn anezhañ a oa eus Sant-Jermen ; edo o c'hedal war ribl ar straed - hogen re vihan e oa ha n'oa mat nemet da sammañ pakadoù. Degaset em boa eta va mal hag hini va breur, ouzhpenn-se ur vali-zennad levrioù a oa didalvez da dremen ar vachelouriezh, war a soñje din. Goude-se avat ne oa mui tamm plas ebet. Va c'hoar he defe karet e vefe distroet d'hor c'herc'hat hogen ne oa ket tu da gavout eoul-maen e neb lec'h. Goude bezañ klasket en aner pellgomz er gêr eus Roazhon e reas va div c'hoar o soñj mont betek Bezon war o zroad ha pellgomz alese adarre, ma oa gallus, a-benn ma vefe kaset ur c'harr-tan d'o c'herc'hat.

Goude kimiadiñ diouzh va c'hoarezed e oan chomet da varvailhat gant ur c'henskoliad, Vitry e anv, en ur sellout ouzh an dud a zifraee war ar straed evel saout e breskenn. Vitry a zremme ouzh dalc'hidigezh ar vro gant an Alamaned hogen, eveljust, ne rae ket a-zevri.

Eñ ivez a zisklerie e kavfe furoc'h loc'hañ war-du ar Su ha Bourdel evit mont diouzh an dalc'hidigezh alaman.

Ar sulvezh 16 a viz Mezheven a oa bet sioul awalc'h da gentañ. Hinoñ a rae da veure hogen an amzer ne oa ket re domm. War-lerc'h un oferenn-blaen evel war ar pemdez e oamp chomet er sal-studi, o kenderc'hel da labourat pe oc'h ober van da vihanañ (a-hervez e tleemp tremen ar vachelouriezh abarzh pell e Roazhon) ; e gwirionez e renen va amzer o lenn levrioù a bep seurt, prederoueriezh, klasikoù gallek, romantoù ha me' oar-me. Epad an ehanoù, war ar porzh-c'hoari, e chomemp da selacu ouzh hor c'helennerion, an tad Geschwind en o zouez, o trabel-lat dibaez diwar-benn an drouziwezh, oc'h imbroudañ an abegoù anezhañ, o villigañ Leopold, o tamall an Italianed (o devoa-nevez diskleriet ar brezel da Vro-C'hall), o jediñ peseurt chañsoù a oa d'ur respont mat a-berzh Roosevelt da c'halvadenn Reynaud. Bep ar mare avat ez aen skuizh gant seurt kaozioù aner ha treiñ a raen da vrentaat gant hini pe hini diwar-benn va lennadurioù.

En endervezh, war-lerc'h ar c'homplidoù, e oamp bet lezet da vont da bourmen evel boaz. Skoet hor boa war-du kouronkva ar skolañ, adreñv tachenn 'Yaouerion Vreizh', e-harz 'Tuchenn-Vrulu'. Eno e oamp chomet e-doug an endervezh hep gouzout re vat petra ober, o sevel marvailhoù goull, o c'hoari damez, oc'h enoeñ tra ma kouronke are all en dour lous. Den avat ne gomze diwar-benn politikerezh. D'ur mare e oa erru an tad Rener a oa war glask ur skoliad tec'het kuit, ur repuad eus Le Tréport, mab ur c'horonal, degouezhet un nebeut devezhioù. kenñ.

ha na oa ket bet gwelet al liv anezhañ e neb lec'h abaoe ar beure (ur paotr un tammig oristal a rene e amzer o vutuniñ e kornioù kuzhetañ ar porzhioù). Ne oa ket ganeomp avat hag an tad rener a rankas mont d'e glask e-lec'h-all. War e lerc'h e tegouezhas an tad Geschwind, sioul hag habask, dilezet gant an awen en dro-mañ. N'en doa rannet ger ar wech-mañ diwar-benn an ñrvoudoù.

War-dro pemp eur e voe goloet an oabl gant koabrennoù pounner ha broutac'h e teuas ar wrez da vezañ. D'ar c'houlz-se avat e kavas deomp edod o vombezañ Roazhon ; tarzhadennoù damvouget a zeue betek ennomp a vare da vare. Hogen o sellout war-du kêr ne verzemp netra a gement a c'helle aroueziañ ur vombezadeg. En em c'houlenn a raemp eta petra oa kiriek d'an tarzhadennoù pa glevjomp kirri-nij o fraoñval a-us d'hor pennoù hag int kuzhet gant ar pallenad koumoul a zalc'he ar pep brasañ eus an oabl. An difenn enep-kirri-nij gall an hini a oa o tennañ d'an ampoent emichañs.

Pa voemp distroet d'ar skolañ avat e voemp saouzanet mik gant ur c'heloù a oa dic'hortoz a-grenn deomp. Bourdin (1) a zeuas da zegemenn deomp ne vefe dalc'h ebet eus ar vachelouriezh e Roazhon ; tu a oa da dremen e bepred avat e kêrioù Breizh ar C'hornog, adal Dinan ha Gwened d'an deiziadoù merket (2). Un todilhon kaer a savas pa voe gouezet ar c'heloù-se. Daoust pegen diwirheñvel e seblanto bezañ d'al lenner ne oa hini ebet eus va c'hamaladed en gortoz eus an disoc'h-se a lavare a-hend-all e oa emgav

(1) Ur gall eus Flers am eus meneget endev, skoliad er memes klas ganin.

(2) An disentez-se a glote moarvat gant mennad - berrbad - ar gouarnamant gall da ober eus tiriegezh Vreizh un doare kreñvlec'h-repu a-enep d'an Alamaned hogen diempret kreñn e oa al lu gall d'an ampoent.

ar brezel grevusoc'h eget a empenne an darn-vuiañ hag ivez e rankfemp ober hor pak prim-ha-prim ha skarañ, herr warnomp, betek Dinan ma ne felle ket deomp en em lakaat war var da goll frouezh ur bloavezh studi. Dav e oa deomp avat mont d'ar gêr da gentañ hag evit darn eus va c'hama-laded e oa an dra-se dic'hallus krenn o vezañ ma oa tec'het o zud diouzh o c'hêr hep gellout kas keloù da zen. A-hend-all n'oa ket tu da veajiñ, diaozet kehenterezh an t'renioù, serret ar porzhioù-houarn ha diank an eoul-maen evit ar c'hirri-boutin.

Ar soñj da dremen ar vachelouriezh kous-tet pe gousto a zeue da vezañ evidomp ur wir stultenn. Evel-se em boa en em glevet kerkent gant un toullad ken-seurtes eus rannvro Roazhon evit tremen an arnodenn e Dinan. Lebret - ur paotr eus Komblizieg-a anaveze ar gêr-se un tammig hag a oa bet karget da bourchas deomp Kambroù er gêr-se. N'oa ket sur da gavout avat hag a-benn hon diennañ e kinnige prestañ deomp un deltenn vras, kenkas na gavfemp ket plas en ostalerioù. An dalc'h avat e oa mont betek Dinan hep moz dezougen ebet. Ne welen nemet un diskoulm d'ar gudenn - evidon atav : kemer va marc'h-houarn ha bale - sammet gant va geriadurioù ha me 'oar-me - betek du-se.

Goude koan e teuas an tad Rener hag an tad Prefed da zegemenn deomp ar c'heloù a-gefridi : poent e oa deomp aozañ hor pakadoù a-benn distreiñ d'ar gêr antronoz veure, emezo. Kentizh e krogis da zastum va zraoù, hogen ne ris ket hep poan, e-kreiz an dispac'hadeg, an holl o redek a bep tu, a hunva da hunva, a bredva da bredva, dre douez ar vezeion hag ar c'hlañvdiourezed a oa oc'h

ober o difraeoù dre an trepasioù. Bepred edon gant ar sorc'henn da dremen ar vachelouriezh ha ne oan ket re nec'het. Ar gelennerion o unan a guzulier ac'hanomp da chom hep en em chalañ : antronoz e vefe sinet an arsav-brezel, a lavarent, sioul da sabatuiñ, egiz pa vefent disammet gant ar c'heal-se end-eeun : c'hoarvezet e oa pezh a ranke c'hoarvezout ; ne oa ket mui dav stourm. Seurt tonkad-garouriezh am boa kavet souezhus. Iskisoc'h c'hoazh : darn - Bretoned eveljust - a lakae bremañ o goanag en emrenerion o unan. Morel - hemañ a felle dezhañ stagañ ar Veljik ouzh Bro-C'hall un nebeut devezhioù araok - a sederae o soñjal e oa a-drugarez Doue renerion . broad-elourion vreizhat divroet en Iwerzhon-hag -alc'h-all ; en arbenn anezho emichañs ne vefe ken garv-egar Breizh ; ha menegiñ a rae meuleudioù bet graet d'ar Vretoned er skingomz alaman ; marteze, piv 'oar, a gloze ar paotr, hor befe an emrenerzh.

Estreget marvailhat em boa d'ober avat. Goude bezañ redet penn-da-benn ar skolaj war glask malizzennoù a oa diank din evit pakañ va c'hreziou em boa tizhet kaout daou sac'h skaut digant an tad Agombart. Darnaouet e voe deomp neuze hol levriegoù-skol : ar pep retañ atav evit tremen ar vachelouriezh daonet-se.

Eveljust e oamp aet diwezhat da gousket. Chomet e oan da gaozeal gant hini pe hini ; bremañ e kleven ar memes Morel dalc'hmat oc'h en em c'houlenn ha ne rafe ket gwell evelato o skeiñ eñ ivez etrezek ar Su evit tremen e vachelouriezh jedoniezh. Lod a ziskrede e vefe bombezet Roazhon gant an Alamaned ha n'houlent ket diwiskañ o dilhad evit mont da gousket. Ne greden ket avat en hevaler

degouezh hag aet e oan d'am gwele evel boaz.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 15

Daoust d'ar pezh a c'hortoze lod ne c'hoar-  
vezas gwall-zarvoud ebet epad an noz. Savet e oan da bemp  
eur - an deiz a oa o tarzhañ - ha goude bezañ paket lein  
diwar herr e oan loc'het war-du ar porzh-houarn a-gevret gant  
gant tri c'hamalad all (1) ; unan anezho a oa ur gall ;  
an daou all a oa Breizhiz ; ar c'hentañ, Lejeune, a oa  
genidik eus Sant-Kae ; egile, Le Cadre, eus Pondivi. Am-  
brouget e oamp gant an tad Agombart en doa prestet din  
daou sac'h skaut.

O tont war ar straed e c'helljomp lenn  
skritelloù niverenn ar seitek a viz Mezheven eus an 'Ou-  
est-Eclair' : reiñ a raent da c'houzout e oa bet savet ur  
gouarnamant nevez e Bro-C'hall hag e oa bet lakaet Pétain  
er penn anezhañ. Eus ar c'hemm gouarnamant-se e tastumas  
va c'henseurtek kerkent e vefe renet taeroc'h ha nerzhus-  
oc'h ar stourm a-enep d'an Alamanned diwar neuze. Ha Lejeune  
- hemañ en doa diskouezet bezañ a-du mui pe vui gant Breizh  
epad ar bloaz : "Pétain a rankje bezañ bet lakaet e penn  
ar gouarnamant adal deiz kentañ ar brezel!" An tad Agombart,  
a oa un den deol, en doa tennet e vad eus an dro-se evit  
ober deomp un omelienn diwar-benn tonkadur Bro-C'hall ha  
(1) Pemzek a oa da zont a-hervez. A-benn ar fin e oamp  
en em gavet pevar hepken.

ha Ragevezh-Doue, gant un ton hag ur stumm o doa lakaet  
ac'hanon sebezet, ken distag hag habask e oant, a roe da  
soñjal da unan e vije an dud er-maez eus an afer ha ne oa  
nemet lezel Doue da ober.

Ur gloued a oa bet savet dirak ar porzh  
-houarn hag ur bagad soudarded a oa o sevel gward adreñv  
dezhi. Gant hon aotreadur e voemp lezet da zont tre. Daoust  
ma oa abred anezhi e oa leun ar sal-c'hortoz, gant tud eus  
Roazhon, war a seblante. Goude m'hor boe kemeret hor bilhed-  
où e kimiadas an tad Agombart diouzhimp ha goude bezañ  
prenet un nebeut levrioù e levrñi ar porzh-houarn e hastis  
da grapat betek ar c'hec'hvet kae ; eno avat e voen kerseet :  
edo tren Sant-Malo e paouez loc'hañ ha den ne ouie pegoulz  
e vefe aozet unan all.

Epad div eur hanter bennak e chomis da  
bazeal war ar c'haeoù, ha me o c'hedal un tren all a skofe  
war-du Sant-Malo, - endro din ne welen nemet trenioù  
repuidi, soudarded pe chatal, difiñv avat, o c'hortoz  
den ne ouie peseurt aotre da zilec'hiañ, egiz pa vijent  
bet dindan gazell-gae - an em zizoneñ. - raeñ bep an amzer  
gant va c'henseurt Lejeune a oa ivez o c'hortoz un tren  
ha na zeue ket. Kaer am boa aters an implijidi ne dizhen  
gouzout netra resis diwar-benn netra : d'abardaez, Marteze,  
e vefe un tren evidon, a responted din. Aet e oan skuizh  
a-benn ar fin ha war-dro dek eur en em grennis da zistreiñ  
d'ar gêr war va zroad. Seitek kilometrad a c'hellen ober  
e korf teir eur pe deir eur hanter bennak, war va fouezig.

Deuet e oan er-maez eus an ti-hent-houarn  
eta ha skoet em boa kerkent war-du ar Mailh gant ar soñj

da hedañ ar ganol betek skluz Sant-Marzhin ha Sant-Gregor. Hep dale avat e veizis ne oa ket fur va dezo : sammet evel ma oan gant tregont kiload bennak a bakadoù e voen brevet araok bezañ graet ur c'hilometr. Erru d'ar Mailh eta ezis diouzhtu d'an ti-skluz hag eno e c'hellis pellgomz a-benn ar fin da 'm zud e ti-skluz Sant-Jermen. Goulenn a ris e vefe kaset ur c'harr-tan d'am c'herc'hat e Roazhon. Gra-taet e voe din e teufe unan etre kreisteiz ha teir eur. Neuze e lezis va fakadoù en ti-skluz ha mont a ris da azezañ war ur bank e gwasked gwez ar vali, e-tal ur bagad soudarded saoz a oa oc'h aozañ o stalikerezhioù hag o kempenn o c'hirri a-benn loc'hañ emberr. Sioul e labourent, war o fouez, hep tregas na fourgas. Eno edon bepred, abaoe ur c'hardeur bennak, oc'h arvestiñ ouzh ar Saizon, hanter moredet a-wechoù gant ar skuizhder pa glevis a-daol un darzhadenn damvouget. Kentizh e oan savet em sav o krediñ da gentañ e oa an difenn-kirri-nij gall o tennañ. N'oa ket avat : o parañ va selloù war-du ar porzh-houarn em boa spurmantet ur goabrennad arruz ha gwenn a oa bet strinket er vann a-daol-trumm; ur predig goude e tarane ar bombez o tarzhañ. N'em boa ket bet amzer da emouezañ mat ouzh ar pezh a oa o c'hoarvezout pa oa difoupet ur c'harr-nij alaman izel a-us d'ar vali ; kavout a reas din e oa o vindrailhañ aridennad ar c'hirri saoz ; war un dro e welis ar soudarded oc'h en em skignañ a bep tu hag o skeiñ war-du tiez tostañ ar Mailh ; redek a ris war o lerc'h hag un hanter munutenn goude en em gaven ebarzh trepas un ti a 3 solieradur, hep kav ebet avat, dic'houder a-gre eta ; eno o doa klasket repu un tiegezh hag un toullad

soudarded saoz ; unan anezho - n'ouzon ket petra oa krog ennañ - en doa tennet e vaskl diouzh e voest hag a stage da wiskañ anezhañ.

Padal ne oa distroet karr-nij alaman ebet hag an holl a reas o mad eus ar galmijenn evit skampañ ha klask ur c'hledour startoc'h. Gant reoù all em boa treuzet ar Mailh war va c'hiz ha deuet e oan betek an ti-skluz ; Eno avat ne oa kav ebet kennebeut. Hedet em boa neuze ar c'hae, o weladenniñ an tiez unan hag unan hogen n'oa goudor mat ebet e neb lec'h. Erruet e oan war ar Mailh a-benn ar fin. Ar Saizon o doa adkavet o emreizh d'ar c'houlz-se : e-tal o armoù edont, habask kenañ, pennet o mindrailherezed ganto war-grec'h, bep 25 metrad bennak, - hogen goulo e chome an oabl.

Echu va zro ganin e oan en em gavet adarre en ti-skluz. Eno em boa kejet gant ur c'houblad Parizianed war an oad a stagas da hirvoudiñ ha da gunuc'hañ ouzh va gwelout : n'oa ket dav dezho, emezo, bezañ aet kuit diouzh Paris, a-benn tec'hout diouzh ar brezel, evit adkavout anezhañ e Roazhon ; an dra-se ne oa ket reizh evelato.

Goude bezañ frealzet an dud kaezh-se epad ur frapadig e oan deuet er-maez evit meizañ penaos edo an traoù. Kenderc'hel a rae bepred an tarzhadennoù etrezek ar reter (1) ; ur vogeriad moged du a c'hronne bremañ ar porzh-houarn hag a seblante en em astenn war-du kêr ; d'ur mare e tregernas un darzhadenn greñvoc'h eget ar re all

(1) Trenadoù pourvezioù brezel a oa bet buket ha tizhet gant an Alamaned, war blaenenn Vaod dreist-holl. En o c'hichen avat e oa trenadoù repuidi ha soudarded, war a glevis a-c'houdevezh, ha spontus e oa bet al lazhadeg. Epad meur a zevezh e kendalc'has an obuzioù da darzhañ.

hag ur bomm maged gwenn a flistras a-greiz-holl dreist d' ar mogeriad du. Aon am boe na vefe tangwallet kêr petra bennak ma n'oa ket evit dezvarn ervat ment ar freuz a oa bet graet e kêr. Soñjal a reas din avat ne oa ket dav din daleañ pelloc'h e Roazhon.

Pa zeuis endro e oa graet va mennoz ganin. Ne c'hortozfen ket ar c'harr-tan. Kemer a ris unan eus va seier ha sakañ ennañ va levrioù ha, na petra 'ta, va levrig -skoliad (rak bepred em boa va bachelouriezh da dremen!) O welout e tanzeen mont kuit, an ozac'h hag e wreg - ar vaouez paour a oa o stardañ gant an dic'hoanag he c'hi -dimezell ouzh he c'halon - a voe pennfollet tost-da-vat: fellout a rae dezho dont war va lerc'h da glask repu war ar maez! Ne oa ket fin c'hoazh d'an emziwalladenn avat ha ne gredjont va heuliañ.

Kreisteiz e oa p'em boa loc'het. Hedañ a raen ar ganol war-du skluz Sant-Marzhin. Penn-da-benn dezhi e oa yaret bepred an dud war bantenoù ar vriell a oa ledan ha geotek en amzer-se (kleuz e oa naoz ar ganol neuze ha ne dizhed an dour nemet war-bouez daou pe dri metrad war-draon); dalc'hmat e oant o klask en em c'houderiñ; darn - repuidi war a glevis - a oa o leñvañ. E gwir ne oa ket echu ar reuz, war a soñjed: pa sellen war va c'hiz e c'houwelen ar goabrennad zu a riskle goustad a-us da gêr hag a c'holoe anezhi tamm-ha-tamm.

An dezo am boa da gemer hent Sant-Gregor dre hed bered an hanternoz. Hogen ur soudard eus al lu gall a gejis gantañ dirak skluz Sant-Marzhin a gemmas va ali o lavarout din e vefe kletoc'h deomp a-hed ar ganol. (o ter-c'hel e garter e Sant-Gregor e oa ar soudard-se; genidik

eus un tu bennak er 'Mene' e oa, a gredan). Pa oamp o tont er-maez eus kêr e voudas ar c'horn evit kemenn diwezh an emziwalladenn (1). Pa oamp erru da hanter ar skorf e oamp bet tizhet gant ur soudard all, echu e ermaeziadenn gantañ hag a oa o tistreiñ d'ar memes karter hag egile e Sant-Gregor. Keloù resis a oa gantañ avat diwar-benn ar pezh a oa nevez c'hoarvezet e Roazhon: bombezet e oa bet mirvañ eoul-maen ha treniadoù pourveziou-brezel, emezañ; ar re-se eo a glevet o tarzhañ bepred.

E bourc'h Sant-Gregor e kimiadis diouzh (2) va daou gompagnun. Youlet e oan da genderc'hel va c'herzhadenn dre hent Melez a gase war-eeun da skluz Sant-Jermen hogen berzet e oa an hent-se gant ur bagad soudarded c'hall. Mont a ris neuze gant an hent a zisoc'he e bourc'h Sant-Jermen (un hent-douar ha na oa ket darempred nemeur en amzer-se). Dre ma tremenen e terede ar gouerion da glask keloù: petra oa c'hoarvezet e Roazhon? Perak e oa tarzadennoù bepred? Degouezhet e-tal kroazhent Bezon-Melez e kejis gant un ambrougadeg kirri saoz a oa diantket: goulennet e voe ouzhi penaos pakañ hent Sant-Malo hep tremen dre Roazhon. Rener an ambrougadeg a hañvale bezañ skuizh hag ankeniet. Diskleriañ a ris dezho gwellikañ ma c'hellis rak n'ouien ket saozneg. Kerkent e skarjont kuit hep gortoz pelloc'h. Tro am boe goude-se d'ober hent a-gevret gant daou gouer yaouank a zistroe diouzh Roazhon gant o c'hezeg hag a zivize etrezo diwar-benn an darvoudoù en o zeodyezh romanek. Aet e oan betek o mereuri hag eno em boa klevet ar vaouez o kontañ din e oa bet lazhet meur

(1) Din da c'houzout ne oa bet kemennet an deroù tamm ebet.

(2) Aet e oan a-ziarak da evañ ur banne sistr gant paotr ar Mene ebarzh un ostaleri a oa leun a soudarded gall ha saoz. Diskleriadennoù liesseurt ha kontrol an eil d'eben am boa klevet eno diwar-benn ar vombezadeg.

a viliad a dud ; ar c'heloù-se a oa deuet dezhi gant ur blenier karr-tan a oa tremenet nebeut amzer araoek. Daoust ma ne ouien netra resis d'an ampoent, eveljust, . e asuris d d'ar vaouez ne oa ket bet ken spontus all ar reuz e kêr (1). Ne fel'as ket din chom da evañ ar volennad chistr a oa kinniget din rak mall aoa warnon d'erruout d'ar gêr. Dam-ti-hent-houarn Sant-Jermen ; ne chome mui nemet un hanter -lev d'ober dre hed ar ganol. Eno eo avat e ouezis an nevezinti ziwezhañ am lakaas bezivet mik d'ar beure-hont. Goulennet em boa ouzh ur c'houer war ribl an hent hag-eñ e oa pell ar ganol c'hoazh. Goude va disaouzanañ en doa ouzhpennet hemañ : "N'eo ket mui dav dit en em chalañ, paotr : ned i ken d'ar brezel ; goulennet eo bet an arsav-brezel."

Egiz m'em eus merket uheloc'hik, sebezet krenn e voen gant ar c'homzoù-se. Un nebeut eurvezhioù kent em boa kredet e oa mennet ar C'hallaoued da herzel da vat ouzh an Alamaned peogwir o doa lakaet ur soudard e penn ar gouarnamant. Hag an eneb an hini eo a zeue da wir. Hogen d'ar c'houlz-se zoken, goude bezañ klevet e oa prest ar C'hallaoued d'en em zaskoriñ, n'oa ket evit meizañ ervat ar c'hademgav peogwir em boa soñjet e vefe chomet a-sav an Alamaned war harzoù Breizh hag e c'hellfen tremen va bachelouriezh en arbenn a'n astal-se : atav e oan gant va stultenn ! Evelato e komprenis neuze perak e oa ken bras pres war ar Saizon em boa ket ganto : gant an dezo da bakañ Sant-Malo ha d'en lestrañ ar buanañ ar gwellañ e oant.

(1) War a glevis evelato e kollas meur a gant den o vuhez er vombezadeg-se.

Teireur hanter e oa pa zegouezhis d'ar gêr. Dienkrezet e voe an holl neuze : saveteet e oan. Gouezet o doa eveljust e oa bet bombezet Roazhon ; a c'horre ar vourc'h, war laez, e c'helled arvestiñ ouzh tangwall ar mirvaou-eoul-maen, ugent kilometrad bennak er c'hreisteiz. Du-mañ ivez e oa tremenet ar memes blenier karr-tan - marteze an hini em boa klevet kel dioutañ war an hent - da embann e oa bet lazhet miliadoù a dud hag e oa gwastet kêr a-bezh gant an tan. Aon o doa bet neuze e vijen en em gavet er porzh-houarn da goulz ar freuz. En un doare souzhus awalc'h o doa disoñjet krenn em boa pellgomzet eus ar Mailh ur pennadig amzer araoek ar vombezadeg. Aet e oad da gerc'hat va zad e Mouterel-war-Izol hag hemañ a oa o prientiñ mont kuit da Roazhon da welout petra oa c'hoarvezet ganin pa oan en em ziskouezet a-greiz-holl. Ne vanke mui a-benn neuze nemet va c'hoar M.H. ha krog e oad d'en em chalañ en abeg dezhi er gêr ken na c'hellis asuriñ n' em boa ket ha gwelet er porzh-houarn tamm ebet.

Dija avat e ankounac'haen ar vombezadeg ha soñjal raen er vachelouriezh a zleen tremen e Dinan d' ar gwener war-lerc'h. Fellout a rae din zoken distreiñ da Roazhon d'abardaez evit resteurel ar seier a oa bet pres-tet din ha kerc'hat va geriadurioù bras latin ha gresianek am boa lezet e skluz ar Mailh hogen difur e voe kavet va mennad ha ne gredis ket kas anezhañ da benn. "Warc'hoazh e vo deiz," evel ma lavare va zad din e brezhoneg (seurt troiennoù a zeue gantañ e brezhoneg). Se oa diaes da nac'hañ. Goude bezañ klasket en aner lenn ha studiañ -eseurt degouezhennoù n'oa ket aes - en em gredis

da vont da gavout va zad ha va breur a oa distroet un hanter-eur kent da gKourgalez (1), dek kilometrad eus du-mañ dre hed ar ganol. Eno o doa ar Saozon stlapet o zraoù goude bezañ diempret ha difoeltret anezho : kirri-samm, marc'hoù-houarn, marc'hoù-tan (dispennet a daolioù horzh), binvioù, ardivinkoù, stalikerezhioù hag harnezioù a bep seurt (teltennoù ha me 'oar-me). Va zad a oa aet da welout petra a oa c'hoarvezet du-se peogwir e oa karget da evashaat ar ganol.

Pa zegouezhis da Gourgalez e veizis e oa aet brielloù ar ganol hag ar pradoù tro-dro d'ur gwir foarlec'h : holl gouerion an ardremez a oa deredet di hag a oa o tañva evit ur wech levenez ouez ha kentidik ar prei-zherezh. Holl bourvezioù ar Saozon a oa bet lakaet en ari-grap : hemañ a daole e graban war ur voestad busku, egile war ur voestad te, hennezh a skrape un deltenn - Doue a oar petra oa e soñj ober ganti - , henhont a samme ur rumm kelornioù ; hiniennoù o doa diwisket o dilhad hag a oa o foutouilhac'h en dour o klask adkavout marc'hoù-tan ar Saozon ; e pep lec'h e vordilhe ar breizherion, mall warno da gas d'ar gêr o lodenn eus ar pardon, etre Kourgalez ha Kêrvorin, ar skluz diwezhañ arak ar skorf-dourannañ.

Siwazh, va zad a oa bet digalon awalc'h evit goulen digant an archerion dont da lakaat un tammig urzh. Pa oa paret ar re-mañ a-benn ar fin, a-daol-trumm, egiz dre un taol strobinnell bennak, e oa steuziet an holl dud-se, evel ur boblad korriganed o sankañ dindan an douar (1) Kourgalez a zo ur skluz uheloc'h eget Mousterele-war-Izol, tostik d'ar skorf-dourannañ etre an Atlantel ha Mor Breizh ; er penn all - seizh kilometrad pelloc'h - e kaver unnek skluz war-hed un hanter-lev bennak, war-dro Kêr Hazoù.

da darzh-an-deiz.

En diwezh e oan aet da geñ ouzh va zad en ur vereuri en tu all d'ar pont. An ozhac'h en doa graetaet pourchas deomp un nebeut lurioù piz bihan ha kaset en doa e wreg d'o c'hutuilh. Ar vaquez paour - war a zisklerias din va zad a-gostez - a oa chomet loaret ha trevariet he spered abaoe ma oa marvet he mab diganti seizh vloaz arak, e korf tri deiz, da seitek vloaz - an oad am boa neuze - gant droug-ar-c'harv. A-hervez n'en em gleve mui mat gant he gwaz : bepred e veze o tamall marv he mab dezhañ.

Ambrouget em boa ar vaquez en he liorz adreñv an ti-anez. C'hwec'h eur hanter bennak e oa ; abar-daeziñ a rae ; dalc'hmat e klevet kroz an obuzioù a gen-dalc'h da darzhañ tregont kilometrad alese, evel ur vourbl damvouget gant ar pellder. E ser komz eus un dra bennak em boa troet ar gaoz war-du ar vombezadeg. Ha setu, a-greiz kutuilh ar piz bihan e oa staget ar vaquez a-daol da ouelañ dourek. "Sur-mat, ez eus mammoù kaezh o leñvañ bremañ," emezi. Sioulaat he doa graet a-benn ur pennad. Damc'houde avat e kroge da zifronkal adarre ; diwar gounañ he mab avat e rae ar wech-se. Dezrevell a reas din e varv, o tiskanañ bepred etre he sklañkadennoù : " A oad ganeoc'h e oa ; e garout a raen evel un doue, Bon Di! ! " Hag o komz eus he gwaz e lavare "I' l'oubli' ; c't un ingrat!"

Esaeet em boa frealziñ ar vaquez paour o tisplegañ dezhi en dije bet he mab pevar bloaz warn ugent d'ar mare-se hag e vije bet kaset d'ar brezel. Ne selaoue ket ac'hanon avat. A-benn ar fin evelato e oa bet torret d'an arnev ha karget e oa bet ar banerad piz bihan.

Goude-se hor boa hastet da zistreiñ d' ar gêr. Eizh eur hanter e oa p'hor boa diraezet skluz Sant-Jermen.

\*\*\*\*\*

P e n n a d 16

Kousket em boa mat an noz war-lerc'h daoust d'ar c'hirri-nij o doa fraoñvet betek ar mintin. Da nav ar hanter diouzh ar beure e oan diskennet da gemer va lein. Ne oa c'hoarvezet netra betek dek eur hanter. D'ar c'houlz-se e oa erruet va c'hoar C. eus ar vourc'h trejeboulet holl : hi ha va zad o doa klevet eno gant ur c'habiten a oa o raouez tremen e oa an Alamaned o tostaat ouzh Roazhon, tizh warno, hep tennañ tenn fuzuilh ebet. Ar sabatur a gouezhas warnon adarre pa ouezis ar c'heloù -se : evel meur a hini all em boa empennet en em strinkfe an Alamaned war-du kreisteiz Bro-C'hall hag e lezfent ledenez Vreizh a-gostez, da c'hortoz da vihanañ. Va raktresoù - pergen e sell da dremen ar vachelouriezh - a oa direnket da vat gant an degouezhadenn-se.

Va c'hoar C. a gave dezhi e rafemp mat o vont kuit da Waïen war varc'h-houarn, me ha va breur en doa pemzek vloaz d'ar mare-se (war varc'h-houarn e rannemp mont pa n'hor boa moz-dezougen ebet). Atav e rede ar brud e vefe dastumet ar baotred yaouank gant an Alamaned ha Doue hepken a ouie netra o dije graet ganto. Ar spont a (1) oa o ren eta. Er penn-kentañ ne oan ket tomm tre eveljust evit ober ar veaj-se rak va ratozh a chome dalc'hmat mont (1) Ret eo din merkañ amañ ne oa ket tizhet an holl gant ar spont. Ar soudarded c'hall a oa o tiwall ar pont e-kichen du-mañ, da skouer, pe ar gouerion dre vras, a oa dinec'h da welout ha difrom kaer e choment pa glevet e oa degouezhet an Alamaned da Roazhon.

da Zinan d'ar gwener ha d'ar sadorn war-lerc'h da dremen an arnodenn. A-benn ar fin e kavis penn d'am c'hudenn : e Pondivi, a soñjen, e chomfen a-sav ; eno e vefe un dalc'h eus an arnodenn koulz hag e Dinan ; er gêr-se ivez e anavezzen ur c'henskoliad, Le Cadre e anv, hag a c'hellfe moarvat pourchas herberc'h din en ur stumm bennak. Kent loc'hañ avat e felle din mont da Roazhon da resteurel va seier d' an tad Agombart ha da gerc'hat va geriadurioù bras latin ha gresianek hogen adarre e voen dizallet a-grenn : re zañjeus e oa, emezeur, en em lakaat war var da vezañ paket gant an alouberion. Seurt kuzul a seblante bezañ fur ha distourm awalc'h e tilezis va mennad bout ma 'n em c'houlenn pelec'h an diaoul e c'hellfen pourchas al levrioù a vanke din. E gwirionez n'em boa ket kalz c'hoant da vont en hent. Padal, war-bouez gwelout tud yaouank o tremen dibaoez war o marc'hoù-houarn hag o skeiñ war-du ar c'hornog e teuen da soñjal e vefe da marteze ober evelto. A-benn ar fin eta e ris va soñj mont kuit. Va mamm a savas d'ar vourc'h ha pourchas a reas eno an dafaroù hor boa diouer anezho : dougerioù-pakadoù evit hor marc'hoù-houarn - hag ivez eveljust bitailh a bep seurt. Aozet e voe ar c'hreziou, ha prest e oamp da loc'hañ pa zegouezhas ur c'harrig-samm dirak hon ti ; ennañ e oa un tiegezh Gallaoued a oa o tec'hout dirak an Alamaned abaoe un eizhteiz bennak ; eus 'departamant'an 'Aisne' e oant ha klask a raent diraez 'departamant' ar 'Morbihan' a oa bet merket dezho evel o 'departamant-herberc'h'. Diouzh ar mintin o doa kuitaet 'Avranches' hag asuriñ a raent ne oa alaman ebet eno. Ur soñjezon trumm a zeuas war spered va zad : ma c'hellfe an dud-se kemer ac'hanomp, va breur ha me, e c'hellfemp da vihanañ ober un darn

eus ar veaj hep re a skuizhder. Pedet e voe an dud-se eta da gemer ur banne kafe er gêr ha neuze e voe goulennet diganto sammañ ac'hanomp, va breur ha me ; gouest e vefen eme va zad, d'o heñchañ betek ar Morbihan peogwir e oan eus ar vro ; ouzhpennañ a reas e tleen tremen ar vachelouriezh e Pondivi a oa ur gêr eus ar 'Morbihan' end-eeun. Ha setu tonket ar marc'had, sammet va breur hag an daou varc'h-houarn en adreñv, ha me troet da arouezier hag aet em c'hoazez etal ar blenier en araoek. Hag en hent : unnek eur hanter e oa. E gwirionez ne ris ket ervat va micher rak n'anavezen ket nemeur rannbarzh kornog Roazhon ha grozmolat a rae paotr ar rod-stur o soñjal n'en doa ket graet un afer vat o c'hoprañ ac'hanon. Bezet pe vezet, degouezhout a rejomp abarzh pell da Rovelieg, daouzek kilometrad bennak e kornog Roazhon. Eno avat e voe kadarnaet ar c'heloù hor boa damglevet er bourc'hioù hor boa treuzet a-ziagent: erruet e oa an Alamaned da Roazhon (1).

War hent Sant-Brieg a dizhjomp damc'houde eo e komprenjomp ster ar c'heloù-se. Eno e oa an dec'hadeg en he stankañ : a bep tu d'an hent hag o skeiñ holl gwitibunan etrezek Sant-Brieg - den na karr ne gerzhe war-du Roazhon - en em stleje kantadoù ha kantadoù a dec'hidi, tud yaouank an darn-vuiañ anezho, kalz war droad gant o sac'h war o c'hein, reoù all war varc'h-houarn, darn ebarzh kirri-tan. An iskisañ tra a skoas va spered avat e voe merzout kirri-tan peuzc'houllo hag a skare war an hent hepteur el meiz an disterañ ouzh an dec'hidi war droad, divi, a rae sin dezho - en aner - da chom a-sav d'o sammañ.

War a veizis diwezhatoc'h pa chomjomp a-sav da zebriñ ur pennad-amzer war-lerc'h, lod eus ar (1) Gant maer ar barrez e voe roet deomp ar c'heloù-se. N'em boe ket munudoù d'ar c'houlz-se.

re yaouank a zifraee evel henn war hent Sant-Brieg a oa mennet d'en em lestrañ er gêr-se ha da dreuziñ mor Breizh betek Bro-Saoz: suroch repu a gavjent eno; hogen n'oant ket o unan : merc'hed ivez, en o mesk a-wechoù, a haste ken buan all war-du ar memes kêr. Un arvest sebezus e oa an divandennadeg-se ; ne dizhen ket kompren re vat perak en doa an engroez-se kuitaet Roazhon nemet lusket e vije bet gant ur braouac'h divent. Seurt dikiantadeg avat a oa dreist-faltazi.

Damsoñjal a raen a-wechoù e c'hellfen ivez mont da heul ar re-se ha sevel war vourzh ur vag bennak hogen n'oan ket gwall zedennet gant hevelep avantur a hañvale din diboell : va albac'henn a oa bepred gant va arnodenn ; evel un dilsam varzhus em boa klenket va levrig-skoliad ebarzh va malizenn etre ul lur amann ha plakennoù chokolad. E gwirionez e pegen start bepred em dezo da ziraer Pondivi araoek an abardaez. D'ur mare em boa merzet ur post-aroueziañ o tiskouez hent Sant-Meven en em gave war an hentadur am boa divizet din. Kerkent em boa goulennet digant va blenier treiñ war-du ar gêr-se. Hemañ avat a gavas gwell arsaviñ epad ur pennad. Renket en doa e garrsamm war ribl an hent, difoeltre awalc'h, a gav din, hep skoachañ anezhañ tamm ebet, ken e oa deuet blenier ur c'harr-tan all a oa arsavet pelloc'hik da gemenn deomp kafunañ gwell hon tumporell ; anez, emezañ, e tamantfe deomp : c'hoarvezet e oa gantañ bezañ mindrailhet meur a wech war an hent gant ar c'hirri-nij alaman pe italian. Dres e kendalc'he ar c'hirri-nij-se da fraoñval e lein an oabl. Hor blenier a gavas gwell sentiñ ouzh ali ar paotr hag a yeas da blantañ e garr en un hent-kev un nebeut metradoù larkoc'h.

Va ostizion a grogas da zebriñ o merenn.

Un eur pe un eur hanter goude kreisteiz e oa, a gav din. Klask a rejomp ober evelto ha digeriñ a rejomp ur voestad sardined hogen n'em boa tamm ilboued ebet, sec'hed ne lavar-an ket. Gwell a se e teuas hon ostiz war hor sikour o kin-nig deomp ... gwin 'Champagne'. N'en doa nemet se, emezañ, d'en em zigareziñ. Daoust ma vije bet gwell ganin ur banne dour fresk eget ar gwin klouar-se e ris va mad evelato eus ar c'hinnig hegarat-mañ hep bezañ diaviz awalc'h evit goulenn e pelec'h en doa pourchaset hon ostiz hevelep died.

E-keit-se e oa erru war hon tro repuidi eus hanternoz Bro-C'hall - eus trowardroioù Cambrai end-eeun - ha dezho pouezmouezh kreñv o rannyezh c'hallek. Kaoz a savas. "Salv hor bije gelllet skrapañ karr-tan hor mestr," emezo. "Aesoc'h e vije bet evelato bale betek amañ!" Diwar varvailhat e teuas anat din n'en devoa va blenier tamm aotre-bleniañ ebet (e pelec'h en devoa diskoachet e garr-samm n'en devoa ket diskuliet din kennebeut). Egile en eneb - ur paotr yaouank a ambrouge ur vacuez war an oad - en devoa un aotre-bleniañ diouzh reol. Setu e voe graet ur marc'had nevez : ar paotr yaouank a grogfe er rod-stur. Sammet e voe ivez an hini gozh ha me a bignas en dro-mañ en diadreñv. En em savout a ris eta gant ar re all ebarzh ur c'hozh kased teñval, emesk pallennoù ha pilhoù kramennet ha flaerius, pakadoù a bep seurt war va zro ha war va gorre, dres a-us d'ar gorzhenn diaezhenniñ, adreñv ur stalaf peuz-serret, ma oa hogos din mougañ gant an toufor. Ha ni en hent adarre. Ar wech-mañ avat n'en devoa ket kemeret hor blenier nevez hent Pondivi evel m'em boa goulennet, hini Sant-Brieg ne lvaran ket.

Ma ! Pa voemp erru e Bron - kalonask a oa ganin a-benn neuze - e kavis furoc'h diskenn diouzh ar c'harr-samm gant va breur ; aet e oan skuizh ivez gant va ostizion. N'ouien ket a-hend-all da belec'h e vefen aet ganto en diwez. Kemeret hor boa eta hor marc'hoù-houarn ha kimiadet hor boa hep distro.

Hent Merdrigneg a zigore dirazomp ; eeun ha plaen awalc'h e oa ; kalz nebeutoc'h a dec'hidi a oa warnañ eget war hent Sant-Erieg ; an darn-veiañ anezho a valee war varc'h-houarn evelomp. Moarvat e oa skuizh-usoc'h un tamm mat kerzhout evel-se, sammet evel ma oamp ivez hag e gor an heol war ar marc'had, hogen dieub e oamp hag aer glan ar maezioù a c'hellemp analat.

Treuzet hor boa Erieg hag a-benn 16 kilometrad hor boa tizhet Merdrigneg. Ha ni war-raok bepred etrezek Loudieg. War an hent-se ivez e oa distank an dec'hidi. Ha neuze e oa c'hoarvezet ar pezh a oa didec'hus ; peder eur hanter pe bemp eur e oa, n'em eus ket mui soñj mat, dek pe bemzek kilometrad e kornog Merdrigneg, pa oa aet dreist deomp tri pe bevar c'harr-mindrailher alaman ; ur soudard en ul livrez du, a gav din, a oa gwintet e lein an hini kentañ, o sellout a-benn dirazañ, o spiañ an hent hag ar vro tro-dro, sonn evel un delwenn ; n'en doa ket troet zoken e benn war hon tu, egiz pa ne vije bet ac'hanomp nemet amprevaned. Hag e gwirionez, setu pezh e oamp evito, dizarm ha ma oamp, dic'houest d'en em zifenn, evel ma oamp arack dirak nerzhioù al lu gall dispennet : n'oa ket ac'hanomp koulz lavaret hag ar merzad-se a oa unan diskonfortus kenañ.

Padal, ar pep brasañ eus ar rannlu alaman

a heulie hent kreiz Breizh na oa ket deuet war wel c'hoazh ha dizale e oamp en em gavet hon unan adarre. Daoust d'ar pezh a oa o paouez c'hoarvezout hor boa kendalc'het da gambliañ ar buanañ ma c'hellemp ; n'ouzon ken peseurt mennoz droch a oa kelliget en hor c'hreiz : marteze e oa pell diouzhimp c'hoazh an dalc'h eus an arme alaman ; neuze, eveljust e talvez e ar boan kas pelloc'h hor beaj. Ha setu pezh a rejomp daoust d'ar wrez ha d'ar skuizhder a oa ouzh hor breviñ.

Ne oamp ket aet gwall bell avat. Pa voemp degouezhet war lez kêr Loudieg e voemp tizhet gant lanvezhiad ar c'hirri alaman. Ar wech-se hor boa lezet anezho da dremen ha gant va breur e oan aet d'en em skoachañ er parkeier o c'hortoz ma vefe tremenet red an aloubadeg. Dirañvañ a raamp a-hend-all gant ar sec'hed ha deuet e oamp da skeiñ ouzh dor ur vereuri da c'houlenn aluzen ur banne. Neuze e oamp distroet d'ur prad, nepell diouzh an hent, en entremar. Abardaeziñ a rae a-benn neuze ; bepred avat, en traon, hep ehanañ, e tournie ar c'hirri-samm hag ar c'hirri-arsailh war an hent a deuze a nebeudoù er beuznoz. Pell amzer, betek tremen hanternoz marteze, o doa padet da vont war-raok ; a-wechoù e paoueze toumpi an ambrougadeg met hep dale e kreñvae adarre, bouzarus ; kredet en defe unan na vefe fin ebet dezhi. Ha padal e oa an amzer kaer hag hinon, sioul ar maeziou ; sklaeriañ a rae al loar gann e-kreiz an cabl dizolo ; bez e oa anezhi un nozvezh leizh a Vezheven o teurel frond ar foenn nevez vedet endro deomp. Hogen evit an dud ne oa peoc'h ebet.

Klasket hor boa kousket hogen ne oamp ket deuet a-benn. Revet e oamp gant freskter an noz ; ken

prim e oamp aet kuit ma n'hor boa kaset ganeomp tamm dilhad ebet koulz lavaret ; n'em boa nemet ur roched hag ur chupenn war va c'hein. Klasket hor boa en em c'houderiñ ebarzh bernioù foenn nevez troc'het hogen, eveljust, ne oamp ket deuet a-benn da dommañ deomp. Ne soñje ket din e c'helled kaout kement anoued e-kreiz miz Mezheven.

A-benn ar fin e oa paouezet an tousmac'h war an hent. Gortozet hor boa c'hoazh ur pennad amzer. Neuze, d'ar gouloù-deiz, hor boa en em silet er-maez eus ar prad. War hon troad, goustadik, e oamp aet e-biou d'ar c'hirri alaman arsavet. Ne oamp ket bet harzet gant den. Digenvez a-grenn e oa ar straedoù d'ar c'houlz-se a-hend-all. E gwirionez, ken bras mall a oa warnomp da zont er-maez eus kêr ha da dec'hout diouzh an Alamaned ma n'hor boa kemeret amzer da sellout ouzh ar postoù-heñchañ. Aet e oamp gant an hent kentañ a zigore dirazomp. Evel-se hor boa skoet hep gouzout deomp war-du an hanternoz ha goude bezañ kambliet epad div eur bennak dre hentoù distro ha dizarempred e oamp en em gavet en tu all da Uzel e trowardroioù Korle. Abred e oa anezhi c'hoazh. O c'houlenn ouzh ur c'houer bennak (1) e pelec'h edomp hor boa merzet e oamp pellaet un tamm mat diouzh hor pal. Diskennet e oamp endro etz war-du Pondivi hogen e Neuilheg, c'hwec'h kilometrad en hanternoz kêr, en ur vourc'h vihan, e voe roet deomp da c'houzout e oa deuet tre an Alamaned e Pondivi, ar pezh a oa da c'hedal. Neuze avat ne oa ket mui dav din klask tremen va arnodenn eno.

(1) Leouen e oan daoust d'am zrubihoù da vezañ degouezhet d'ar brezhonegva ha bewech ma c'hellen e klasken eskeñ un nebeut gerioù e brezhoneg gant an dud a gejen outo.

Er stad m'edo an traoù ne dalveze ket ar boan distreiñ da Sant-Jermen ha lakaat a ris em penn kenderc'hel va beaj war-du Gwaien. Eus Neuilheg eta hor boa skoet war-du Klegereg ; treuzet hor boa Seglien, Lan-goelan, Ploerdud, Sant-Tugdual, bepred dre hentoù strizh ha dizarempred a-grem ; eno e gwirionez, pell diouzh ar gourhentoù hedet gant an alouberion, e oa sioul ar maezioù ha dudi am boa oc'h ergerzhout war va fouez rannvroioù ar Goueled ; leun-e oa va c'houn a eñvoradurioù diwar levrioù Anatol ar Bras am boa lennet e-kerzh ar bloaz ha dre ma valeen e klasken adkavout ar gweledavou a oa taolennet ebarzh oberennoù ar skrivagner-se pe c'hoazh roudoù ar stuzegezh poblel a oa deskrivet enno. Ur wech bennak, er merc'hervezh-se, war-dro div eur bennak, e oamp chomet a-sav en ur vereuri da c'houlenn an hent adarre ; edo an dud gant o merenn endro d'an daol ; e-kreiz houmañ end-eeun, war ur gantenn, e oa bet plantet ur mell kaoteriad youd gwinizh e-lec'h e chome war neuñv ur pikol tamm amann teuz melen hag an holl, bras ha bihan, gant pep a loa, a gemere o lod ebarzh, dinec'h kaer : tenerausat arvest eus ar vuhez war ar maez en amzer wechall ! Hag evit frealziñ gwelloc'h va c'halon e kejen aliesik gant tud war an oad, merc'hed dreist-holl, hanac'hoent tamm galleg ebet. Gwir eo ne gomrenent ket kalz tra em brezhoneg palevarzh a glasken drailhañ hep morc'hed ebet hogen gant se ne oan ket chalet bras : ar pezh a oa a-bouez eo ne oa tamm galleg ebet etrezomp.

E tro an abardaez e oamp deuet tre e Kernev. Tremenet e oamp en Abati-Langonnet, e Langonnet, e-biou d'ar Sent pintet war an uhel ha tostaet hor boa ouzh Gwiskriv. Noziñ a rae d'ar c'houlz-se avat ha poent

e oa deomp klask bod un tu bennak. Deuet e oamp da c'houlenn herberc'h en ur vereuri. An ozhac'h en doa kinniget deomp tremen an noz ebarzh ur c'hledour leun a foenn ; ar c'hledour-se ne oa nemet un doenn anezhañ e gwirionez met gwelloc'h e oa e oa eget kambr ar stered.

Biskoazh ne gouskis ken c'hwek hag en noz-se ebarzh ar foenn. Gwir eo n'hor boa serret lagad ebet abaoe pergont-eizh eur. D'ar beure e oan bet dihonet gant gouloù an heol o tarzhañ : ur pennad oabl glas hinon a bare dindan doenn ar skiber a c'houdeur ac'hanomp. Geiz al laboused kludet war ar gwez tro-dro hor gronne : ne oa nemet un devezh hañv evel ar re all.

Degemeret mat e oamp bet gant ar gouerion. Pedet o doa ac'hanomp da gemer hol lein ganto : chokolad a oa bet aozet deomp, un danvez a oa tonket dezhi rouesaat hep dale. Neuze e oamp aet en hent adarre. Savet e oamp betek Roudaoualleg ; alese hor boa diraezet Kore, Langollen ha Landudal, bepred dre hentoù distro e-lec'h ne gejem gant karr ebet na den ebet koulz lavaret. Soñj am eus e oamp manet a-sav war ribloù an Odet ; eno ne oa ar stêr nemet ur c'houer, bas an dour enni, a strinkellike en ur redek war ar grouan ; digenvez e oa an ardremezioù ; chomet e oamp da ziskuizhañ war ar ribloù, hon unan penn, en ur arvestiñ ouzh ar froud arc'hantek a riskle a-herr war-du ar c'hreisteiz. Neuze e oamp tremenet en hanternoz Brieg ha dre Gerlez-Bras ha Kerrez hor boa tizhet Plogonneg. Un nebeut kilometradoù pelloc'h edomp er Yuc'h ; war hon troad, dre ur wenedenn, en ur stlejañ hor marc'hoù-houarn, e oamp krapet gant an tarroz hag alese e oamp diskennet war-du Poull-Dahud. E-kreiz an endervezh e oamp hogos erru e Gwaien.

Hogen meizañ a rejomp neuze e oa bet didalvez a-grenn hon tec'hadenn : er Pont e oa aet e-biou deomp ur bagadig soudarded alaman war varc'h-tan-karr, gwisket en o mantilli -glav gwer a gouezhe betek o zreid. N'oa ket dav deomp bezañ kuitaet Roazhon a-benn mont diouzh an Alamaned evit o adkavout e Gwaien.

Betegout n'hor bije en em gavet gant un ambrougaded bennak a girri alaman hor boa kavet furoc'h dont tre e Gwaien dre an hent kozh a dreuz ar c'hoad e Rozveur hag a zisoc'h e Kerbuzulig. Eno a-hend-all e oamp chomet a-sav da gentañ, en ur c'henkiz a oa anvet "Kêr Pierrette", e-lec'h e chome maeronez va c'hoar henañ. Goude-se e oamp diskennet e ti va zad kozh, er Gêr-vihan". Pemp eur pe c'hwec'h eur e oa, d'ar merc'her 20 a viz Mezheven.

Chomet e campe Gwaien betek an 10 a viz Gouere. Diwar an teir sizhunvezh-se n'em eus dalc'het nemet un nebeut notennoù diskrabet war ar prim en ur brezhoneg disneuz a-grenn, mesket gant stummoù eus teodyezh Waien a glevan neuze gant va zad-kozh hag unan eus va moerebed. Setu int amañ kempennet un tammig.

Disul 23

Kentañ sul tremenet amañ e Gwaien.

Dilun 24 a viz Mezheven 1940

E Sant-Tujan (1) omp bet. M.C. a zo deuet da gemenn deomp diwall diouzh an Alamaned a glaskfe marteze dastum ac'hanomp. Hogen n'eus c'hoarvezet netra.

(1) Un draezhenn e Kornog Gwaien, ul lev bennak diouzh kêr, war-du Beg-ar-Raz. Digevannez a-grenn e oa d'ar c'houlz-se. Diaes eo kouronkañ war an draezhenn-se a-hend-all.

Dimerc'her 25 a viz Mezheven 1940

Douaridigezh (1). Div wech eur deuet da gemenn deomp diwall diouzh an Alamaned a oa o klask aozañ un taol a-enep d'an dud yaouank. Dav e vo din mont d'en em ziskouez dezho.

Dimerc'her 26 a viz Mezheven 1940

N'eus c'hoarvezet netra a-benn ar fin. Prenet em eus levrioù. Berzet eo bet gant an Alamaned derc'hel skingomzerioù er gêr. Diouzh an abardaez em eus breutaet gant va eotr J.M. diwar-benn ar brezhoneg.

Diriaou 27 a viz Mezheven 1940

Aet on da Draezh-Kadeg. Kouronket hon eus evel boaz ha, neuze, dastum briñsad d'aozñ tan er gêr.

Digwener 28 a viz Mezheven 1940

Aotreet eo kaout skingomzerioù er gêr hogen difenn zo da selaou ar skignlec'hioù saoz dindan boan a varv (2). Prenet em eus levrioù. Pourmen e koad Rozveur.

Disadorn 29 a viz Mezheven 1940

Marc'had d'ar beure-mañ. Goude kreisteiz omp aet da besketa war bont "Penn-ar-marc'had" (3). Ar Rusianed a zo deuet tre e Roumania.

Disul 30 a viz Mezheven 1940

Bet omp o kouronkañ e Traezh-Kadeg adarre. Bepred eo kaer an amzer, da sabatuiñ. War a glevan ez eus erruet repuidi alaman e Kemper (4).

(1) N'em eus mui soñj tamm ebet eus peseurt douaridigezh ez eus anv amañ.  
(2) Ne gav ket din e voe embannet a-gefridi ken groñs difenn. Brudoù a rede avat.  
(3) Ar pont a gas da Blouhineg. Nevez awalc'h eo. Gwechall ne oa ket kalz darempred etre Plouhineg ha Gwaien. Gwaien a oa troet war-du ar C'hab.  
(4) Ur vrozenn iskis a rede e Gwaien d'ar c'houlz-se. N'ouzon ket peseurt diazez a oa dezhi. Emichañs e oa erruet kargidi sivil alaman e Kemper (postoù h.a.)

Dilun 1añ a viz Gouere 1940

Chomet on er gêr d'ar beure-mañ. Goude peder eur omp aet da bont "Penn-ar-marc'had" da besketa ha neuze da Draezh-Kadeg. P'edomp o tistreiñ e oa va moereb A. ha va zad kozh o Klask ac'hanomp e pep lec'h, o krediñ c'hoazh emichañs e oamp bet dastumet gant an Alamaned. Eizh eur e oa.

Dimeurzh 2 a viz Gouere 1940

Lenn ha skrivañ betek peder eur. Goude -se, kouronkañ e Traezh-Kadeg hag ober ur weladenn d'ar voereb Ameli, er ru Doub. Kaozeal ganti diwar-benn ar brezel. Klevout a ran tud o lavarout : J. ha G. a zo aet a-du gant an Alamaned (1).

Dimeurzh 3 a viz Gouere 1940

Lenn betek peder eur. E Traezh-Kadeg goude-se. D'ar beure-mañ em eus bet ul lizher digant va mamm : dont a raimp endro dimeurzh 9 a viz Gouere, n'ouzon ket penaos avat.

Kalz a Alamaned yaouanka zo o chom amañ bremañ. A-hervez e e vefe aet tre an Alamaned e Bro-Spagn. Ar repuidi c'hall a ya kuit hag ar repuidi alaman a gemer o lec'h (2).

Diriaou 4 a viz Gouere 1967

Ar Saizon o defe goulennet an arsav-brezel digant an Alamaned hag ar re-mañ o defe nac'het. N'on ket aet er-maez.

(1) Ur vrozenn all adarre : Alamaned o komz brezhoneg ; a-hervez e vefe bet anezho Bretoned divroet da Vro-Alamagn (marteze emrenerion, ne ouied ket re vat) hag a oa distroet gwisket en ofisourion alaman hag o komz brezhoneg ;  
(2) Dalc'hmat ar memes brozenn iskis an eus meneget endev.

Digwener 5 a viz Gouere 1940

Emgann etre al listri saoz ha gall. Lennet em eus ar c'helou-mañ war ar gazetenn. Darn a lavar n'eus eus aze nemet gevier livet gant an Alamaned. Daoust ha gwir eo pe get ? Diaes eo gouzout.

Soudardal alaman nevez a zo degouezhat e Gwaien. Aet omp da neuñ ; uhel e oa an tarzhioù war an traezh. Prenet em eus levrion.

Disadorn 6 a viz Gouere 1940

Marc'had. Prenet em eus ul levr gant Anatol ar Bras. Torret eo an darempredoù kannadouriezhel etre Bro-C'hall ha Bro-Saoz.

Aet on da neuñ ; kreñv e oa an tarzhioù. Ul lizher digant...

Disul 7 a viz Gouere 1940

Oferenn blaen d'ar beure-mañ. Netra. N'on ket aet er-maez. Hervez a glevan e vefe marv kalz tud war an hentoù epad an dec'hadeg.

An dud a gav dezho emaint o vont da vervel gant an naon ha spontet int.

Dilun 8 a viz Gouere 1940

Lenn e ti M.C., e 'Kêr Pierrette'. Hervez a lavar houmañ din o teuo endro roue Bro-C'hall war e dron.

Brest a zo bet bombezet (1). Ar spont a ren e pep lec'h. An dud o deus ach bapred rak mervel gant an naon. N'on ket aet er-maez hiziv, nemet da bremañ levrion. Daou vartolod a zo marv : kaset int bet hiziv d'ar vered.

(1) Emichañs e oa bet bombezet Brest gant ar Saizon en dro-mañ, lakaet e vefe c'hoarvezet un dra bennak e gwirionez rak n'em eus ket gallet gwiriañ pezh a verkan amañ.

Dimeurzh 9 a viz Gouere 1940

Warc'hoazh e tleomp en em lakaat en hent da zistreiñ da Sant-Jermen. Setu hogos teir sizhun tremenet amañ hag an div ziwezhañ hep preder ebet petra bennak m'omp bet spontet awalc'h epad an hini gentañ, e gwir pe e gaou. Pebezh kemm c'hoarvezet en un nebeut devezhioù : bremañ emañ an Alamaned oc'h ober o mistri e pep lec'h e Breizh. Petra a zegouezho warc'hoazh ? Emañ an dud e pep lec'h en gortoz da vervel gant an naon. Peseurt buhez hor bo ha ni stag ouzh ur vro drec'het ? Daoust ha Breizh a c'honezo un dra bennak gant an darvoudoù-mañ ? Sur eo avat ne vo ket Bro-C'hall kaset da get hepken hogen... Hag an freuzioù-stal...

.....  
Amañ ez echu an notennoù am boa kemeret e Gwaien. Al lenner en devo merzet pegen stroñset e oa an dud gant an darvoudoù. Pezh a greske ar strafuilh er speredoù, ouzhpenn ar c'hemm a oa deuet en un taol er stlennerezh dre vras - skingomzerezh ha kelaouennoù - , e oa ivez ar c'hemm eur : lakaet e oa bet an eur alaman hag e Gwaien d'ar c'houlz-se e pade an deiz betek unnec eur tost-da-vat.

Da e ve, a gav din, klokaat an notennoù-mañ gant un nebeut eñvorennoù.

Epad an devezhioù kentañ e oamp chomet serret er Gêr-vihan, e ti va zad kozh pe e 'Kêr Pierrette' e ti maeronez va c'hoar henañ, e kêr Buzulig. Ne gredemp ket diskenn e kêr. Paz aemp da bourmen e skoemp war-du ar maezioù. Evel-se e oamp aet betek Sant-Tujen. Atav e rede ar brud e vefemp dastumet ha bac'het gant an Alamaned ha lod eus ar re a oa war va zro, gwragez dreist-holl, a soñje

dezh e vefe furoc'h sevel war vourzh ur vag-pesketa bennak ha klask divroañ da Vro-Saoz (gouzout a reer e oa didec'het Suniz da Vro-Saoz evel-se). Hogen, adarre, ne oan ket tomm tamm ebet evit ar mennad-se. Da gentañ e oa anat din e oa arvarus un arnod seurt-se. Deuet e oa ar c'heloù du-mañ e oa bet goueledet ar vag "La Touche" (ma ne fazian ket) dirak an Oriant : karget e oa gant paotred yaouank a glaske divroañ da Vro-Saoz. Ne felle ket din lakaat va zammig buhez en argoll evit ur vro na santen ket mui e oa va hini petra bennak ma n'em boa ket en em zivoazet c'hoazh a gomz egiz ur gall gant an dud a oa war va zro. Divroañ da Vro-Saoz a oa evidon un avañtur ha n'he doa ster ebet. Lezel a raen ar vrogarourion c'hall a oa war va zro da gomz evel ma karent hogen mennet mat e oan d'ober hepken diouzh va mennoz.

Hiniannoù eus Gwaien a oa didec'het da Vro-Saoz evelato. Ur wechad, o tont endro eus Traezh-Kadeg dre Gervrec'h, em boa toullet kaoz gant un den war an oad a oa o keuziañ da vezañ lezet e vab da vont kuit du-se o vezañ ma ne oa ket kement-se a reuz gant an Alamaned goude holl. Enkrezet e oa an den kaezh, na petra 'ta, oc'h en em c'houlenn petra e vefe deuet e vab da vezañ en harlu du-hont.

E gwirionez e oa un diazez d'ar brud a roe da soñjal e felle d'an Alamaned dastum an dud yaouank. Ar re-se a oa war glask ar soudarded c'hall a oa en em skignet e pep lec'h da goulz an drouziwezh hag o doa gwisket dilhad sivil. Setu, e deroù an eil sizhun m'edon o vevañ e Gwaien, e oa bet gourc'hemennet d'an holl wazed adal saitek vloaz en em ziskouez dirak ar pennadurezhioù alaman. Gwall nec'het e oa bet gant an urzh-se ar re a blede ganaomp e Gwaien. Ar merc'hed a oa ali ne ranken da briz abet en em ziskouez d'

an Alamaned. Gant va zad kozh avat e oa ur mennoz disheñvel krenn. Enebet en doa taer ouzh ali ar merc'hed hag eñ o tiskleriañ n'oa ket tu da herzel ouzh urzhioù seurt-se ; ma ne sentjen ket, emezañ, e vefe graet ac'hanon un ... "déserteur" (ar ger-se en doa implijet e galleg), da lava-rout eo en em lakaen war var da vezañ barnet d'ar marv ha fuzuilhet !

Biskoazh c'hoazh dezhañ ! Me ' oa chomet va genoù digor war nav eur o klevout komzoù va zad kozh. E gwirionez e oan batet ha sabatuet mik, skodeget, hag en em c'houlenn a raen ha goap a rae ouzhin. Tamm ebet avat ! Gant reizh awalc'h e soñje e oa ar Stad ar Galloud a zalc'he nerzh al lu. D'ar c'houlz-se avat e oa ar Stad e Breizh ur Stad alaman ha netra ken peogwir e oa hec'h unan oc'h arveriañ nerzh al lu en hor bro. Diskaret e oa bet ar Stad c'hall, lakaet unan all en he lec'h mat, forzh penaos, e oa ret sentiñ ouzh an eil evel ma sented argentaou ouzh eben. N'oa ket tu da herzel ouzh ar Stad. En devezh kent e oa Gall ar Stad ; 'Gallaoued' e oamp ha ret e oa seveniñ hon 'dleadou' a C'hallaoued ; antronoz e errue ar Stad alaman ; Alamaned' e teuemp da vezañ ha ret e oa en em zougen evel Alamaned'. Ne oa nemet plegañ d'ober. N'eo ket da 91 ez cer d'ober an dispac'h.

E gwirionez e oa gwall strafuilhet va zad-kozh gant donedigezh an Alamaned (ar 'Brusianed' en doa brezelet outo seikont vloaz araok). Leveoù en doa a-barzh ar C'hallaoued : dacust ha kenderc'hel a rafe da douch anezho goude ma oa erru an Alamaned ? Gant ar goulenn-se e oa trubuilhet bras. Spez an dienez a c'hourdrouze gwechall ar rummoù kozh a sponte neuze e askre. Doujañ a rae mont

mont da glask e vara hag eñ erru e penn e vuhez.

Bezef pe vezef, aet e oan d'en em ziskouez d'ar 'pennadurezhioù alaman'. Bodet e oa bet an holl wazed en devezh-se war borzh skol ar baotred, er Stumm. Endro din, a-hend-all, ne oa nemet martoloded kozh pe war an oad, an holl o komz brezhoneg. Unan anezho a oa mezh ; bepred e teue ar ger 'Boched' gantañ hag ur c'havandad dezhañ, nec'het, a beuke e gostezioù d'ober dezhañ tevel. Pa oa deuet va zro da ziskouez va faperoù, ar c'hargiad alaman - e sivil e oa gwisket - en doa sellet outo a-boan. Deuet e oan war ar straed, disammek kaer va spered.

Diwar neuze ne voen ket mui chalet ha tremen a ris ar peurrest eus an div sizhun, hep soñjal nemeur en amzer-da-zont peurvuiañ. Ankounac'haet em boa a-grenn va arnodenn. Adkroget em boa gant studi ar brezhoneg ; un tamm eus teodyezh Waien a zesken o selaou va moereb A. ha va zad-kozh o komz brezhoneg etrezo. A-hend-all, lenn : nouspet romant gallek - un ugent bennak - an boa prenet. Skrivañ a raen ivez, e galleg avat. Ivez, kouronkañ ha pesketa : ur vuhez dibreder, egiz ma weler.

War va zro avat, evel ma verken, e oa gwall-stroñset speredoù an dud. Ar bed ma oant kustumet da vevañ ennañ a oa kouezhet en e boull en un taol krenn. Eus un deiz d'antronoz, hep tremen ebet, e kemme tu an talvoudoù. Ar gwashañ stroñs avat a zeuas diwar emgann Mers-el-Kebir : meur a baotr yaouank eus Gwaien a oa war vourzh al listri gall en devezh-se, ur c'henderv kompez din en o zouez. Hag int boazet da sellout ouzh ar Saozon evel mignoned ne gomprenne mui Gwaieniz netra er pezh a c'hoarveze. O dazwered e voe neuze nac'hañ an darvoud pe damall bruderezh an Alamaned.

E gwirionez e voe paket an dud e-doug ar brezel etre daou vruderezh a glaske ober binvioù anezho ; kement-se ne dalv ket ne oa ket un dibab da ober etre an daou éneber hag an daou stourm ; hogen, ne vern pe zibab a voe graet, atav e voe graet a dastorn, hep anavezout holl elfennoù ar gudenn; en ur brezel, ret eo lavarout, eo diaes e ve disheñvel ar gont ; evel-se avat e tibabas meur a hini an hent mat pe an hent fall hep gouzout da vat pezh a rae. Tro am bo da wiriañ ar mennoz-mañ pa zanevellin ar bloavezhioù da heul.

=====

D i b e n n a n e i l l e v r e n n

REIZHADENNOU HA DIVANKADURIOU

- P.4, en notenn : lenn "digeflusker" e-lec'h "digedlusker"  
P.5, linenn diwezhañ : ouzhpennañ /warn-ugent/ war-lerc'h kilometrad.  
P.28 ; lenn "abaoe" war al linenn eil-diwezhañ.  
P.34 : linenn 6, lenn "Kemblizieg" e-lec'h "Komborn" lakaet dre fazi.  
P.88 : Ober a ran gant ar stumm "kevarzhel" (=kenuehel).  
Koulz e vefe marteze ober gant ar stumm "kedarzhel"  
P.98, linenn 18, en diwezhañ : lenn er sichenn e-lec'h en.  
P.99, linenn 12 : lenn "netra" e-lec'h "ne ra".  
P.103 : aze adarre reizhañ 'kevarzhelaat' e 'kedarzhelaat'  
P.105, linenn diwezhañ : lenn "Alamamed" e-lec'h "Almaned".  
P.116, linenn 6 : lenn "diktatourion" e-lec'h "ditaktourion".  
P.121, linenn 6 : lenn "hag" e-lec'h "ghag".  
P.124, eil linenn : reizhañ evel-henn e dibenn al linenn :  
kontañ.  
P.130 : tennañ "ha" e diwezhañ ar bajenn.  
P.133 : stagañ "all" e dibenn al linenn diwezhañ.  
P.140, linenn gentañ : lenn "ne" e-lec'h "na".  
P.148 : lenn "gweladvaou" e-lec'h "gweledavaou".
-



